

AR GRASOU

PE

AR PEDENNOU

EVIT AR REVARO



**Breudeur, kerent ha mignoned,
En an' Doue, hor selaouet,
En an' Doue, hor sikouret !**

(Kantik ar purgator)

AR GRASOU

PE

AR PEDENNOU


evit ar re varo .

GANT

YEUN AR GO

SKEUDENNET GANT

JOEL G. PHILIPPON



AR VUHEZ KRISTEN — ROSKO

En envor eus Anaon garet:

Anna BOZEG, va fried,
Marjanig GUILHOU, va mamm,
Yeun AR GO, va zad,
Yeun AR GO, va zad-koz,
Jan-Marigou AR C'HOGANT, va mamm-goz,
Jan-Marigou AR GO, va maeronez,
Mazevig FRABOLOT, va faeron,
Jozon BOSSON ha Mari-Jozef AR SEAC'H,
va zud-kaer,

Ha re va holl gerent, mignoned ha kenvroiz,
em eus dastumet ha reizet danvez al leor-man.

*Doae da roy digemer d'ezo e-touez Sent koz Breiz,
e gloar ar Baradoz!*

YEUN AR GO.

NIHIL OBSTAT :

Rosko, 25 c'hovevrer 1945.

T. FULJANS a C'HOUDILIN,
T. BRIEG a BLOGONEG,
O. F. M. Cap.

IMPRIMI POTEST :

Paris, 28 c'hovevrer 1945.

T. E. DEODAT a S. GEMMES,
O. F. M. Cap. prov.

IMPRIMATUR :

Kemper, 6 meurzh 1945.

P. MESSEGER,
Vikel-vras.

RAKLAVAR

*Maz sonche den certen en maru
Hag ouz pep barn peguenn garu eu,
Bizhùiquen en lech ne peche,
Na ne hoarshe her dre ve beu.*

(Tennet eus « BUHEZ MABDEN », eul
leor bet moulet er bloaz 1530.)

Da lavaret eo, e brezoneg hon amzer-ni :

*Ma sonjfe-an den serten er maro,
Hag ouz pep barn pegen garo eo.
Birviken e nep lec'h ne bec'hfe,
Na ne c'hoarzfe herr-keit ma ve beo.*

War a glevan, eo kollet, e parrezioù 'zo, ar c'hiz da lavaret
gras en noziou-beilh gant ar re varo. E Kerne, a drugarez Doue,
e talc'her c'hoaz, d'ar c'hiz vat ha santel-se. A-benn nebeut amzer
ac'hann koulskoude, pa vo aet d'ar bed-all hor grasaouerien hag
hor grasaouerezed koz, ne vo ket klevet ken ar pedennoù kaer-se,
ma ne vez ket kavet an tu da viret outo da vont da goll.

Ma c'hoarvezfe kement-mañ (Doae ra viro !), e teufe hon no-
ziou-beilh da veza heñvel ouz re ar c'hêrioù bras, e-lec'h ne gle-
ver na *Pater* na *noster*, da lavaret eo gwir noziou-beilh paian.
Na trist ha mantrus e vefe eur seurt tra, ha pebez koll evit ar feiz
hag ar brezoneg ! Rak n'eo ket e-lec'h ma tigouez d'hor yez koll
tachenn e weler an dud o wellaat hag o tiskouez muioc'h a garan-
tez da Zoue.

Bremañ c'hoaz, en darn vrasa eus hor bro, pa vez bet an
Ankou oc'h ober e dro en eun ti bennak, war ar mêz pe en eur
vourc'hadenn, e vez graet noz-veilh gant an hini tremenet. Klas-
ket e vez unan bennak, gwaz pe vaouez, da lavaret gras gantañ.
E kanton Pleiben, ne vez nemet merc'hed koz koulz lavaret oc'h

ober ar vicher-se (1); e Brieg ha tro-war-dro e kaver c'hoaz eun nebeud gwazed deuet war an oad hag a ya da bedi a vouez uhel evit ar re varo a vez o c'hortoz beza kaset d'an douar.

Goude koan e teu ar gerent, an amezeien ha tud eus an anaoudegez da bedi evit an hini maro ha da deurel dour benniget war ar c'horf sebeliet ha lakaet, war ar varvskaoñ, en eur *chapel wenn*. Neuze e krog ar grasaouer pe ar c'hrasaouërez, daoulinet war eur gador e-tal ar varvskaoñ, da lavaret gras. Alies e pad ar pedennou eun eur pe ouspenn. Dibunet e vezont dindan eñvor hag an hini o lavar a vez paeet evit e labour.

Gwechall, e parrez Goezeg da-vihana, ne veze ket dao paea den da lavaret gras. Grasaouerien a-walc'h a veze kavet, evit bennoz Doue, e-touez an dud a zeue d'an noziou-beilh. E pep tiegez koulz lavaret e kaved unan bennak hag a ouie ar pedennou-se ha, lies gwech, e veze klevet diouz tro pemp pe c'houec'h den o tibuna bep a c'hras e-pad ar memes noz-veilh. Ne zeue ket an hevelep pedennou ganto holl, hag eur seurt heligenta a save etrezo gant ar c'hoant en deveze pepini anezo da ziskouez e oa kaeroc'h ar c'hras a ouie eget re ar re-all. Dalc'het o deus soñj ar re goz eus meur a c'hrasaouer brudet hag a oa o veva, n'eus ket pell bras c'hoaz, etre ar Stêr Aon ha Karreg an Tan.

Kent ivez e oa bet eur mare ma veze kantikou war-lerc'h ar c'hras, tre betek hanter-nôz. E Sant-Toz hag en Edern, bremañ ez eus war-dro pemp bloaz war-nugent pe dregont vloaz, ez ae eun nebeud tud (8 pe 10 peurvua) d'o c'hana a-zaouiou, pep koublad kanerien o kregi diouz tro gant e boz. E-lec'h arc'hant o deveze bep a damm butun war-lerc'h ar c'hras. War am eus klevet gant Youen ar C'hintin, eur grasaouer koz eus Treflec'h, e parrez an Edern, (76 vloaz en deus bremañ), e veze kanet evel-se, etre ar c'hras kenta hag hini hanter-nôz: *D'an deiz bras, d'an deiz a goler...* (war don *Kantik Jenovefa a Vrabant*), *Soñjit den faziet...*, *Peur, va Doue, vezo delivret...*, *C'houi, tud devot, ho pet memor...*, *Gwerz ar Retred pe Evit beva e gras Doue...* Gousperou an Anaon e brezoneg, Kan ar Repoz pe al *Libera* e brezoneg, ha kalz kantikou all c'hoaz.

Setu perak, moarvat, pa voe kollet ar c'hiz-se, e teuas ar c'hantikou da veza orezonou. E-lec'h beza kanet, evel gwechall gant eun nebeud kanerien, e vezont dibunet bremañ, evel pedennou all, gant ar c'hrasaouerien hepken.

(1) E Lotei, koulskoude, e vez Yeun an Haridon, ar c'hloc'her, eus Pennod (62 vloaz), o lavaret gras.

E-leiz a genteliou hag a bedennou kaer ha skouerius a zo er grasou. Brouda a reont nerzus kalon pep gwir gristen, ha taolenni a reont ivez, en eun doare iskis ha strafuilhus alies, finveziou diweza mab-den. Graet int bet diouz doare tud hor gouenn, ken touellet o spered gant traou misterius ar maro ha buhez ar bed all. Sikouret o deus ar Vretoned da choñ feal da feiz o zud koz ha lakaet en o c'halon karantez ha doujañs evit an anaon.

Hogēn ma ne ziwalloomp ha ma ne enebomp ket, ez ay en traon dizale ar c'hiz eus ar grasou. Bihanaat a ra bep bloaz niver ar re o goar, rak ar re yaouank ne glaskont ket o deski. Gwechall, daoust ma ne oa ket ar vriz-deskadurez ken skignet e-touez ar bobl ha ma 'z eo hirio an deiz, ha marteze abalamour da-se, e oa troet an dud da selaou ar re a ouie eun dra bennak ha da zeski dindan eñvor ar pez a glevant ganto. Bremañ avat n'eo ket heñvel ken : diskaret eo bet ar c'hiz-se gant ar c'hazetennou, al leoriou hag ar radio, ha desketoc'h en em gav ar re yaouank eget ar re goz.

Daoust d'ar pez emaoñ o paouez diskleria, n'eo ket hepken gant tud kosoc'h egeto o deus desket hor grasaouerien o orezonou kaer. Holl, koulz lavaret, e ouzont lenn ar brezoneg, ha talvezet eo bet kement-se d'ezo evit deski o-unan kalz gwerziou santel ha pedennou diwar leoriou a zevosion.

An hini brudeta hag anavezeta e-touez ar re-mañ eo, hep mar ebet, an **HEURIU BREZONEC HA LATIN** savet, war-dro fin ar seitekvet kantved, gant eur c'hure eus Kleder, an Aotrou Briz. Met rouez a-walc'h eo deuet al leoriou-se da veza, hag ar brezoneg a gaver enno a zo fall alies ha saotret gant eun niver bras a c'heriou gallek. Koz int, moulet divalo peurvua ha stranet enno ivez an danvez grasou amañ hag a-hont, hep urz ebet. Abalamour d'ar siou-se moarvat ne blijont ket d'an holl. Rak-se e kredan eo poent bras rei d'hor c'henvroiz eul leor grasou hag a zeroo outo, ma ne fell ket d'eomp e tivoazfe ar Vretoned diouz ar c'hiz santel ha trugarezus da bedi asambles hag a vouez uhel dirak o zud varo.

Pal an « Obererez Katolik » eo lakaat pep kristen sentus ouz hon Tad Santel ar Pab da boania, hervez e c'halloud ha war an dachenn ma 'z eo gouest da labourat, evit mad ar feiz hag hor relijion santel. Ar reolenn gaer-se ha va c'harantez evit ar brezoneg ha gizioù fur ha dereat hor bro o deus graet d'in prederia war ar pez emaoñ o paouez displega. Diwar neuze eo bet diwanet em spered ar soñj da zastum hor grasou koz, d'o c'hempenn ha da sevel eul leor ganto.

Graet eo al leor hag her c'hinnig a ran gant karantez d'am breudeur dre ar feiz, ar yez hag ar gwad.

Allas ! n'ouzon ket hag hen e plijo d'an holl. Evit kas va labour da benn eryl ha disi-tre, e vije bet ret d'in marteze dibab ar pedennou hag an orezonou pouezusa ha kenteliusa da rei d'am c'henvroiz. Hogen ar grasou a zo bet dastumet ganin ha gant re-all evidoun, am eus kavet ken kaer, ma n'oun ket bet evit ober va menoz da lezel eul lodenn anezo diembann. hag holl em eus graet o moola war al leor-man. C'hoant am eus bet d'o lakaat dirak daoulagad va lennerien en doare ma vezont lavaret breman c'hoaz hag hervez an urz ma vezont dibunet. Boazet eo an dud d'o c'hlevet evel-se, hag ar re eus ar Vretoned n'ouzon ket petra eo ar grasou, a blijjo d'ezo, marteze, o c'havout aman evel m'o lavarar bepred.

Evit gwir, n'o c'havint ket tre evel pa zeuont eus genou ar c'hrasaouerien. Ar pedennou koz-se, bet savet pe adaonet diwar re-all gosoc'h er seitekvet hag en driouec'hvet kantved, a oa mastaret spontus gant eur bern doareou ha geriou gallek, evel ma oa ar c'hiz d'ar mare-se. O c'hempennet, o renket hag o reizet em eus, ar gwellika m'am eus gallet, e-kenver ar yez, ar ment (kadans) hag an taol-mouez. Ma n'eo ket disi va labour, em eus fizians koulskoude na vo ket kavet didalvoud-tre gant va c'henvroiz.



Anat eo na vez ket lavaret henvel ar grasou en holl barrezioù, met setu aman o steuenn dre vras, hervez ar pezh en deus diskleriet an Aotrou Chaloni Perennes, beleg Ospital Kemper, en e leorig ken gouizie ha ken plijus « Ar Maro e Breiz-Izel » (1) :

« Goude beza lavaret eun akt a gontrision, e c'houlenn « kerent ha mignoned an hini maro ouz Doue pardoni e « bec'hejou » d'an hini eman e gorf aze war ar varvskaoñ ». « Neuze e peder an Aotrou da gas kuit eus an ti an aerouant « pe ar sarpant-ifern ha da zigas ennan an êlez a beoc'h. « Lavaret e vez eur Bater hag eun Ave Maria evit goulenn « skoazell ar Spered Santel, hag ivez litanioù ar Werc'hez. « War-lerc'h e teu an Angelus e latin, gant ar misterioù e « brezoneg. Goude-se e tibuner eun nebeud Paterioù hag « Aveou evit an hini tremenet hag evit ma vo sevenet gou- « lennou all tud an noz-veilh. A-raok ha war-lerc'h e klever

(1) *La Mort en Basse-Bretagne*, gant an Aotrou Chaloni Perennes, 4 real ar pezh; e gwerz e ti Oberou Katolik a Yaouankiz Eskōpti Kemper, ru Feunteunig-al êz, Kemper, kont chekennou-post Nn 64-59, an Naoned.

« orezonou hir e komz-plên pe e gwerzennou, enno peurvuia « kaoz ar maro hag ar finvezioù diweza. A-wechou e vez « kavet en o zouez eur *Reolenn a vuhez* pe eun *Orezon evit an « holl ezommou*, ha neuze e c'heller kredi en deus bet c'hoant « ar grasaouer da heulia-an ali a zo en eur werz santel :

*Larit muioc'h 'get nebeutoc'h,
Larit holl ar pezh a ouzoc'h...*

« Ne vez ket echuet ar grasou hep lavaret « Chapeled an « Anaon ». Meur a zoare a zo d'hel lavaret, hervez ar parre- « zioù, daoust ma tibuner e pep lec'h war bep greunenn vihan : « *Requiem æternam dona eis, Domine — Et lux perpetua luceat « eis — Requiescant in pace — Amen*; ha war bep greunenn vras : an *De Profundis*.

« Echuet e vez ar grasou dre eun nebeud pedennou latin : « *In manus tuas...*, *Maria, mater gratiæ...*, pe an *In Paradisum « lakaet e brezoneg. Hag evit kloza e leverer eun nebeud pe- « dennou berr evel ar re-mañ :*

*Peoc'h ha gras Doue d'ar re veo
Ha repoz vat d'ar re 'zo maro.*

Doue da bardono d'an Anaon !

*Ene paour, en em goñsolet,
Mar plij gant Doue e vezoc'h delivret.*

« Parfet ha distroet enno o-unan gant ar soñj eus ar maro, e « ped a-greiz kalon ar gerent hag ar vignoned, koulz e latin « hag e brezoneg, evit an hini en deus o c'huitaet. Hogen tru- « garezus ha brokus eo feiz ha karantez ar Vretoned, ha diouz « tro, war eun ton-pedi, e tigas ar grasaouer soñj eus an holl « Anaon fidel, — re ar barrez ha re ar c'harter —, eus ar vado- « berourien, « dreist-holl », emezañ, « eus ar re o deus bet « roet d'eomp da zebri ha d'eva », — eus ar re emañ o c'horf « war ar varvskaoñ, — eus an hini a zo aet da ziweza eus an « ti pe eus kêr, — eus Anaon dilezet ar Purgator : « Ma pe- « domp evito, e permeto Doue e vo pedet evidomp, pa vimp « er memes stad ganto ».

« Ha n'eo ket hepken evit ar re varo e kaser pedennou war- « du Doue; ar re veo o devez ivez o lod. Ar c'hras a vez gou- « lennet evit ar re a zo en o *fasion* pe war o zremenvan, hag « evit ar c'henta pe ar genta a varvo eus tud an noz-veilh, da « gaout eur maro mat; evit ar re a zo e stad a bec'hed marvel, « hag evit ar brasa pec'her hag ar vrasa pec'herez eus ar gom-

« pagnunez da zistrel ouz Doue; hag evit an dud just ha santel da genderc'hel en o stad.

« Evit m'o do ar re veo hag ar re varo ar grasou-se, dreist-holl an hini emañ o veilha e gorf, en em erbed ar grasaouer, « gant eur vouez birvidik ha souezus a-wechou, ouz Doue, ar « Werc'hez, an Elez ha Sent ar baradoz, hep urz na renk merket ebet evit pep-hini.

« Digant an Dreinded Santel e c'houlenner « kaout truez « ouz ene an hini tremenet en deus bet fiziañs enni. » Ar Werc'hez a vez pedet dindan an anioù ma vez enoret en he chapelioù hag he fardoniou, er barrez pe er c'horn-bro. Evel-se e vo graet meneg eus Itron Varia ar Sklerded « a blijo ganti rei d'eomp ar sklerded hor ho ezomm da anzav hor pec'hejou a-barz kuitaat ar bed-mañ »; eus an Itron Varia a Druez « a vo hon alvokadez d'eomp-ni ivez, p'en em gavimp dirak « Doue »; eus an teir Mari : Itron Varia Wir Sikour, Itron Varia ar Porzou hag Itron Varia Rumengol.

« Goulennet e vo skoazell Sant Mikêl, « kabiten arme an « Neñvou » pe c'hoaz « balañser an eneou ». Pedet e vo, evit « kement a sell ouz an hini tremenet, da « boueza muioc'h ar « mad eget an droug », evit ma 'z ay e ene, war-lerc'h ar bouezadenn, da gemeret e lec'h en tu dehou d'ar Barner Bras. »

*Sant Mikêl, balañser an eneou,
Balañsit e ene diouz an tu dehou.*

« Kalz devosion o deus hor c'henvroiz d'o El-Mat; ne vez ket ankouaet e-barz ar c'hras : « Goulennomp digant hon El « Mat ma plijo gantañ chom ganeomp hepred, deiz ha noz, ken « na vimp rentet e gloar ar Baradoz. Goulennomp digantañ ivez « ma vo kaset kerkent ene an hini tremenet-mañ d'an Neñv. »

Ober a ra meneg ar grasou c'hoaz eus Sant Jozef, « patron « ar maro mat, heñ hag en deus bet ar c'haera maro a c'hellfeld « da gaout »; eus an daouzek Abostol « evit ma vint daouzek « alvokad galloudus a-du gant an hini tremenet »; eus Sant Per « ha Sant Paol « evit ma plijo ganto dont da zigeri d'ezañ do-riou ar baradoz ».

« Goulennet e vez digant Santez Madalen « pedi evit ar bec'he-rien hag ar pec'herezed a zo e-barz ar gompagnunez, ha da « gaout evidomp digant Doue ar c'hras da c'hellout lakaat hon « ene e stad vat a-barz ma varvimp »; ouz Santez Barba, « d'hon « diwall diouz ar gurun, al luc'hed, an tan ha diouz kement « gwalleur a zo, ha, dreist pep tra, diouz ar maro trumm a « sourpren an den e-kreiz e bec'hed, d'hol lakaat da gaout, « pep-hini ac'hanomp, ar c'hras da reseo hor sakramañchou

« diweza a-barz mervel, ha da lakaat an hini tremenet da vont « d'ar joa a bado da-viken ». Ouz Sant Rok ha sant Sebastian « en em erbeder evit « ma pellaint diouzomp an holl gleñve-« jou hag ar gwall-blanedennou ha m'hol lakaint da gaout ar « c'hras da veza digemeret eun devez en Neñv, e-kreiz ar joaiou « hag an enoriou ».

« Hervez kredenn ar bobl ez eus eun nebeud Sent « hag o « deus ar galloud da ziboania bep a ene bemdez eus tan ar « Purgator ». Ar re-se eo Sant Matulin, « patron ar Purgator », « Sant Odilon ha Sant Dihoan. Kement-se a laka da gompren « perak eo ken devot e-keñver ar Sent-se an dud fidel en em « vod da veilha ha da bedi evit ar re dremenet.

« E-pad ar c'hras e peder c'hoaz santez Anna, « patronez « Breiz-Izel », sant Yeun (1), « skoazeller an dud reuzeudik », « sant patron an eskopti, evit ma plijo gantañ kas ene an hini « tremenet dirak Jezuz ha Mari. Aspedet e vez ivez « paeron ha « maeronez » (2) an hini maro da zont da gerc'hat o filhor (pe « o filhorez) evit e gas betek al lec'h ma vo kurunet dirak ar « Sent hag an Elez. Skoazell a vez goulennet, evit an ene aet « d'ar bed-all, digant « Sent patron an iliz-parrez », « ar Sent « pe ar Sentezed a zo enni », « an holl Sent a zo e-barz ar cha-« pel-mañ-chapel er barrez », ar Sent a oa kustum an hini tre-« menet d'en em erbedi outo ».

« E enez Eusa », eme c'hoaz an Aotrou Chaloni Perennes, er « memes leorig, « pa vez bet chomet eur martolod da yeuzi, er « mor ha pa ne vez ket bet kavet e gorf, e vez graet eun noz-« veilh evit ober kañv d'an hini maro, ha goude eur seblant « interramant. *Broella* eo an ano a roer d'al lidou-se, hag ar « ger-se a dalv kement hag *envroa*, pe *digas en-dro d'ar vro*.

« Er penn franka eus an ti e vez ledet, war eun daol, eul liñ-« ser vras lien gwenn. War he gorre e lakaer eur groazig koar « skrivet warni ano an hini maro hag, ouz troad ar groaz « etre diou c'houlouenn venniget war elum, poltred an hini « tremenet. E penn an daol e vez eur plad gwenn leun a zour « benniget, ennañ eur bodig beuz glas. E-kichen an doare « marvskaoñ-se, dirak ar gerent hag ar vignoned, eo e vez la-« varet pedennou hir ar grasou e-pad an noz-veilh.

« Antronoz-vintin e vez douget ar groazig koar d'an iliz, war « eun tamm lien gwenn, gant tosta kar an hini maro. War ar « bank-kanv he lakaer neuze, ha goude e vez kanet ar servij hag

(1) Anvet c'hoaz Sant Youen ha Sant Erwan.

(2) Ar sant patron hag ar santez patronez.

« an oferenn interramant, evel ma vez graet d'an interraman-
« chou ordinal. War-lerc'h an ofis e lakaer ar groazig koar, pe
« *broella*, e-barz relegouer an iliz da c'hortoz ken na vo kaset,
« da geñver eur mision, da relegouer ar vered.

E enez Seun, kerkent ha ma vez gouezet e vez bet kollet eur
« martolod er mor pe maro unan bennak all pell diouz ar gêr,
« e kaser kelou d'ar veleien, hag ar re-mañ a zeu neuze,
« diouz an abardaez, da di an hini tremenet da salmenni gous-
« perou an Anaon. Noz-veilh a vez graet ivez hag ar varvskaoñ
« a vez fichet evel e Eusa, met ne lakaer kroazig koar ebet war-
« ni. E' enez Seun, kennebeut, n'emañ ket ar c'hiz d'ober ar
« seblant interramant, ha n'eus enni relegouer ebet evit ar re
« varo en iliz nag er vered ».

Er grasou a vez lavaret evit an Anaon e kavomp ar *peden-
nou* a zo bet desket d'eomp gant hor Mamm Santel an Iliz, hag
ivez *pronou* hag *orezonou*.

Ar *pron* eo an diviz a vez graet gant ar grasaouer da ziskle-
ria bep eur mare, d'an dud a vez en noz-veilh, evit piou emañ
o vont da bedi, ha d'o alia da unani o mouez gant e hini. Kalz
eus ar *pronou* a zo kaer-tre hag alies e vez enno peadra da vrou-
da ar c'halonou ha d'o lakaat da druezi. Seblantout a reont beza
bet savet gant ar c'hrasaouerien o-unan, hervez faltazi pep-hini
anezo, rak, betek-hen da vihana, n'em eus bet kavet nikun e
leor ebet.

An *orezonou* eo an ano a raer eus ar c'henteliou, ar gwerziou
santel hag ar c'hantikou a vez dibunet er grasou. Kozik-mat e
seblant an *orezonou*-se beza, evel m'em eus lavaret uheloc'h.
Darn anezo evel *Ar C'hantik war glemm an Anaon* (An den ranko
beza kalet...) hag *Elez an Nenv, deuit d'an douar...* a zo bet
savet gant an Tad Maner. Re-all a gavomp en HÉURYOU BRIZ
(mouladur ar bloaz 1841) evel :

Graet em eus va menoz em c'halon, paj. 196; *O Tad ar skle-
rijenn eus an Nenv...* paj. 557; *Va Salver benniget Jezuz-Krist
staget ouz ar groaz...* (Orezon da J. K. krusifet), paj. 638; *Me ho
salud, o Pemp Gouli...*, paj. 82; *C'houi, tud devot, ho pet envor...*
paj. 213; *D'an deiz bras hag a gasoni...*, paj. 215; *Gwerc'hez
Vari, mamm Jezuz, me ho ped da druezi...*, paj. 217; *Setu Sin
hor Mestr hegarat...*, paj. 409; *D'e Elez hon diwall 'n deus Doue
kemennet...*, paj. 205; *Piou a c'hellfe teurel evez e anken Mari,
ar Werc'hez...*, paj. 272; *Salud, Steredenn ar Moriou...* paj. 36;
Ra vezo meulet an Aotrou 'ro d'eomp boued hag e holl vadou...

paj. 84; *O Gwerc'hez Vari, mamm a druez, me ho ped, eñvor ho
pezel...*, paj. 197; *Sonjit, den touellet, er bed-all hep ehand...*
paj. 219.

Hiniennou eus ar c'henteliou pe orezonou e komz-plên a zo
er grasou-mañ. a gaver en eul leor all bet savet ivez gant an
Aotrou Briz : *Reflexionou profitabl var ar finvezioù diweza eus
an den gant preparationou d'ar maro* (advoulet e ti Desmoulins,
Landerne, er bloaz 1848). An aotre da voula al labour-se a oa
bet roet, ar wech kenta, er bloaz 1718, gant Eskopti Leon.

War am eus klevet, unan eus ar grasouerezed brudeta a oa e
Goezeg, Franseza Mahe, maro d'an 10 a viz eost 1941, (Doue d'he
fardono !). a zibune alies, pa veze o lavaret gras, pennadoù o
tenna d'ar re a zo en « Divizou ar Basion », bet embannet gant
Kervarker da-heul *Burzud bras Jezuz* (Didier, Pariz, 1866).

Ar bedenn da Sant Per (*Aotrou Sant Per benniget, abostol
eurus...*) ha Gwerc'hez an Ifern (*Diskennomp holl a spered en ifern
da welet...*) a zo bet savet gant an Aotrou Chaloni Dumoulin,
ginidik eus Kraon (1748-1811).

A-hend-all, ar gwerziou santel meneget amañ war-lerc'h a
zo bet embannet, goude beza bet reizet ha kempennet eun tamm
bennak, ha lakaet enno a-wechou brezoneg gwall-uhel evit ar
bobl, gant an Aotrou Henry, beleg Ospital Kemperle, en e GA-
NAOUENNOU SANTEL.

Ar Maro (*Mab-den, sonjit en hoc'h eur diweza...*), paj. 68;
Gwerc'hez an Ifern (*Diskennomp holl a spered...*), paj. 89; Gwerc'hez
ar Baradoz (*Pebez laouenedigez da eun ene eurus...*), paj. 91;
Gwerc'hez ar Garnel (*Deomp d'ar garnel, kristenien, gwelomp ar
relegou...*), paj. 270; An Disparti etre ar Chorf hag an Ene (*Se-
laouit, kristenien, da c'houzout ken troet...*), paj. 272.

Ar werz-man a zo ivez lod anezi el leor BARZAZ BREIZ,
e-lec'h ma lavar Kervarker e voe adaezet diwar unan gosoc'h,
er bloaz 1476, gant eur manac'h a urz Sant Benead, anvet Guil-
laume Aline. Daoust ha ne rae ket Kervarker eur fazi, pa skrive
kement-se ? War am eus klevet, e voe savet *An Disparti* gant an
Aotrou Alin, bet person e Bey, eur barrezig a gostez Kemperle.

N'ouzon ket e-pelec'h o deus kavet hor grasaouerien o *ore-
zonou all*. Gwerc'hez ar Berejou (*Me hoc'h asped, Spered Santel,
roit d'in sklerijenn ha skoazell...*) a veze gwerzet war baperen-
nou distag, er foariou hag er pardonioù, n'eus ket c'hoaz pell-
bras. Anat eo n'eo ket nevez, rak meneg a zo enni eus « al lec'h
prientel er vered evit lakaat an hugunoded » pe protestantel.
Gwerc'hez an Ene daonet (*Klevit pebez glac'har en deus an den doa-
net...*) n'eo ket nevez-flamm kennebeut, pa'z eus ano enni eus
« trouz kanolioù Korserien Sant-Malo ».

Sklêr eo n'eo ket bet graet an holl *orezonou-se* er memes amzer hag anat eo ivez e vefe eur gwall-labour klask gant piou ha pedavare eo bet savet pep-hini anezo.



Echuet em boa va labour, pa voe roet tro d'in da lenn leor nevez kantikou brezonek Eskopti Kemper ha Leon, reizet bre-mañ ken mat ha ken brao. Kavet em eus ennan kempennet pe adaozet, hiniennou eus ar c'hantikou a zo er grasou-mañ. Ma n'em eus ket goulennet aotre d'o lakaat em leor en o stumm nevez eo abalamour ma 'z eo berroc'h an darn vrasa anezo eget ar re am eus embannet amañ. Ar pedennou diouz ar muntin ha diouz an noz am eus lakaet avat er grasou evel m'emaint bre-mañ war al leor kantikou moulet a-nevez evit an Eskopti.

Pevare bennad a zo el leor-mañ :

Er c'henta emañ GRAS SKAER, ar gaera eus ar grasou am eus bet klevet pe lennet biskoaz ;

En eil GRAS GOEZEG;

En trede GRAS GOUENAC'H;

Hag er pevare diou werz santel bêt dastumet ganin hag a c'hello beza dibunet, e-pad eur c'hras, da heul *orezonou* all.

Gras Skaer a zo bet adskrivet gant an Aotrou Chaloni Favé, bet kure e Skaer, diwar gaier Fransez Bernard, eur grasaouer koz eus Koadri, maro eun nebeud bloaveziou 'zo;

Gras Goezeg a zo bet dibunet d'in, dindan eñvor, gant Mari Peron, gwreg da Ber Marzin, kantonier e Goezeg; houmañ, evit d'ezi gouzout lenn ar brezoneg, ne oar ket skriva;

Gras Gouenac'h am eus kemeret diwar eur c'haier bet prestet d'in gant an Aotrou Chaloni Perennes; skrivet e oa bet er bloaz 1902, gant Jann ar C'horr a oa neuze o chom e Gouenac'h hag a zo bremañ ampezerez e Kemper. *Pronou* ar c'hras-mañ am eus hiraet eun tammig, rak re verr ha re sec'h o c'haven, hag eur bedennig tennet eus an HEURYOU BRIZ am eus lakaet d'he c'hloza. Lakaet em eus ivez enni eun *orezon* en enor da Sant Frañsez a Asiz, gant ar sonj da skigna en hor bro an devosion d'ar Sant bras-se a savas an Drede-Urz.

Trugarekaat a ran a greiz kalon an Aotrouned Favé ha Perennes, ken troet all o-daou gant ar brezoneg ha gizioù fur hor bro, evit ar skoazell am eus bet diganto, hag ivez an Tad Eujen, eus Kapusined Rosko, evit beza kemeret ar gefridi da lakaat moula al leor-mañ, hag o fedi a ran da zigemeret va anaoudegez-vat.



N'eo ket eul leor gouiziek eo hemañ. Her savet em eus hepken evit ma vo kendalc'het da bedi a vouez uhel e brezoneg dirak hon tud varo, ha da rei, evel BUHEZ MABDEN gwechall :

*Da lenn da re a C'houeled Breiz
Evit chom fermoc'h en o feiz.*

YEUN AR GÖ.

Gouere 1943 ha Meurz 1945.

Eun nebeud aliou d'ar re a ray implij eus al leor

D'ar re a ray implij eus al leor-mañ, da bedi evit ar re varo en noziou-beilh, e roan ali :

I. — Da lakaat pep gras da badout war-dro eun hanter-eur hepken ha da zistaga frês ha sklêr ar pedennou hag an orezonou, rak eur c'hras, pa vez ré hir ha lavaret fall, a vez kavet skuizus hag enouus.

Dispartiet eo gant eur merkig ar pennadoù pedennou hag orezonou etrezo. Evel-se e vo ês da bep grasaouer pe grasaouerez lakaat asambles eun nebeud pennadoù na badint ket pelloc'h eget eun hanter-eur.

II. — Da zeski ar grasou dindan eñvor evit heulia giz hon tud koz, rak plijusoc'h eo, d'hor meno, klevet eur c'hras dibunet evel-se eget unan lennet.

Evelato, pa ne vo ket kavet den ebet da lavaret gras dindan eñvor, e c'hello n'eus forz piou he lenn a vouez uhel war al leor-mañ.

III. — Da lavaret, war-dro hanter pep gras, ar *chapeled* « *Requiem* » evel ma 'z eo displeget war ar bajenn 119 eus al leor.

IV. — Da lakaat ar *pedennou diouz ar mintin* e-lec'h ar *pedennou diouz an noz* er grasou a vez lavaret goude hanternoz hag an hini a vezer kustum da lavaret a-barz ma vez douget ar c'horf d'an iliz.

V. — Ha pa vo eur bugel e-lec'h eun den bras war ar varvskaoñ, da bedi Doue, n'eo ket da ziboania e ene pe d'e zigemeret e eürusted an neñvou, hogen « *da greski joa an el-se er baradoz* », evel ma lavar ar c'hresaouerien a vicher.

Ouspenn, pa vo lec'h da bedi evit eur vaouez varo, arabat e vo komz anezi evel eus eur gwaz; ret e vo lavaret neuze *ene an hini dremenet* e-lec'h *ene an hini tremenet*, daoust m'hon eus implijet an doare diweza-mañ hepken penn-da-benn al leor.



PENNAD KENTA

GRAS SKAER




Document numérisé en 2023



Hervez an daolenn « Intañvez Enez-Seun »

Soñjit en ho tad, en ho mamm,
Er purgator e-kreiz ar flamm :
Va mab, va merc'h, a ! selaouet,
En an' Doue, hor sikouret !

(Kantik ar purgator.)



En ano an Tad, hag ar Mab hag ar Spered-Santel.
Deomp d'an daoulin dirak ar c'horf-mañ, ha sonjomp
hor gwel hag hor c'hlev an Aotrou Doue hag eo prest da rei
d'eomp ar pezh a c'houlennimp digantañ.

Goulennomp digant Doue pardon eus hor pec'hejou, evit
ma vimp e stad vat da reseo e c'hrasou.

Goulennomp, gant fiziañs, digantañ ar sklerijenn hag ar
c'hras d'ober eun orezon vat.

Goulennomp trugarez an Aotrou Doue evit ma teuy da
bardonni d'an ene-mañ :

Va Doue, c'houi hag a zo ken trugarezus en hor c'henver,
c'houi hag a glask silvidigez an dud, aspedi a ran ho made-
lez, gant skoazell ar Werc'hez Glorius Vari hag an holl
Sent benniget, da zigemeret ene an den maro-mañ er baradoz
e-touez ar Sent hag an Elez.

Grit eur sell a-druez ouz ar re a zo aet da anaon, n'o
barnit ket gant krizder, met bezit madelezus outo.

Hon Tad hag a zo en Neñv...

Me ho salud, Mari...

Aotrou Jezuz-Krist, pegen dister bennak ma 'z omp,
ho pet truez ouz ene an hini a zo amañ war ar varvaskaon,
ha grit ma 'z aimp ivez diwezatoc'h gantañ d'al lec'h m'emañ
an eñrusted a bado da-viken, al levenez vrasa, an holl binvi-
digezioù, ar garantez frouezus hag ar yec'hed gwirion.

Grit ma tec'ho an aerouant ac'hann ha ma ne dostay
ket ken ouzomp ; ma vo amañ, en hor c'hichen, an Elez a
beoc'h ha ma 'z ay eus an ti-mañ pep dizunvaniez ha pep
kasoni.

Grit, Aotrou Jezuz-Krist, ma vo meulet hoc'h ano, ha roit ho pennoz d'an noz-veilh-mañ. Santelait hon donedigez doujus ha dilorc'h en ti-mañ, c'houi ken santel ha ken trugarezus hag a chomo gant an Tad hag ar Spered-Santel e-pad an holl amzeriou.

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit goulenn sklerijenn ar **Spered-Santel** da skleraat hor spered, da entana hor c'halon, evit ma raimp eur bedenn vat ha santel en enor da Zone hag evit sikour ene an hini tremenet-mañ da vont d'an eürusted, gant aon e vefe dalc'het d'ober pinijenn.

Goulennomp ouz Sent hag Elez ar baradoz pedi ar Werc'hez Vari hag he Mab Jezuz da gaout truez outañ, evit ma vo diboaniet ha ma 'z ay hep dale da welet Doue d'ar baradoz.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Ra vezo meulet an Aotrou
'Ro d'eomp boued hag e holl vadou;
D'ar re veo, peoc'h ha gras Jezuz;
D'ar re varo, repoz eürus.
Evel-se bezet graet.

O va Doue holl-c'halloudus,
Eternel ha trugarezus,
D'eoc'h eta e rentomp grasou
Evit hoc'h holl vadoberou.
Evel-se bezet graet.

Ganeomp holl, ra vezoc'h meulet,
Trugarekaet ha benniget
'Vit kement gras ha madober
A rit bepred en hor c'heñver.
Evel-se bezet graet.

Ni ho ped, dre ho trugarez,
Da sellet ivez gant truez
Ouz an holl eneoù fidel,
D'o c'has d'ar repoz eternal.
Evel-se bezet graet.

Ha ni, grit ma vevimp e peoc'h
Gant hon nesa koulz ha ganeoc'h,
Evit ma 'z aimp d'ho paradoz,
Er peoc'h eternal da repoz.
Evel-se bezet graet.

Eürus mil gwech korf enorus
Ar Werc'hez Sakr, mamm dous Jezuz,
En devez douget Mab Santel
Roue 'n Neñv, an Tad Eternel.
Evel-se bezet graet.

Eürus ivez ar boull-kalon,
Hag eürusoc'h c'hoaz an divronn
O deus roet al lêz an dina
D'an Aotrou Jezuz da zena.
Evel-se bezet graet.

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit ma kavo digemer ene an hini tremenet-mañ

Gant Jezuz-Krist hag ar Werc'hez, e vamm galloudus,
Bremañ e-barz an ti a beoc'h ma 'z eo ar baradoz skedus,
Da gana da-viken ar c'hantikou nevez,
E-touez an Elez hag an dud fidel, gant pep seurt levez.

Pedomp evit ene an hini tremenet-mañ, e-giz ma karfemp e vefe pedet evidomp hon-unan, pa vimp en em gavet war ar memes poent gantañ.

Lavaromp 'ta evitañ eur *Bater* hag eun *Ave Maria*, ma plijo gant Jezuz-Krist, mab Doue eternal, a zo war an tron uhel, dont da reseo an ene el liorz dudius ma 'z eo e varadoz, ha d'e lakaat en tu dehou d'ezañ, e renk ar re en deus diba-

bet da welet o Salver, hag a vo eun drugar evito beza gantañ e-pad an holl amzer, e-serr ar Sent hag an Elez eürus, o kana d'ezañ meuleudiou da-yiken.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Ne dleomp morse, eme sant Fransez a Sal, chom hep lavaret hor pedennou diouz an noz, kennebeut hag hor pedennou diouz ar mintin. Rankout a reomp; a lavar c'hoaz ar Sant-mañ, soñjal, ma teuomp, dre ar bedenn-vintin, da zigeri hon daoulagad da sklerijenn an Neñv, e teuomp ivez, dre ar bedenn-noz, d'o sarri ouz tenvelijenn an ifern.

Houmañ a dle beza lavaret e koinun, ken lies gwech ha ma c'heller, a-unan gant holl dud an ti, a-barz en em zispartia da vont da gousket, evit tenna, muioc'h a-se, bennoz Doue war an tiegez a-bez.

Neb a ray an aktou eus ar bedenn, a dleo o distaga war e bouezig, gant eur vouez frêz ha devot, evit ma c'hello an holl o lavaret ivez asambles, da vihana en-o c'halon, rak a galon dreist-holl eo e ranker pedi Doue ha n'eo ket hepken a c'henou. Ar pedennou a c'henou ne dalvezont da netra, nemet c'hoant hor befe d'o ober ivez a galon.

Ar penn eta eus an ti, pe unan all bennak eus ar gompagnunez, a grogo evel-heñ gant ar **pedennou diouz an noz**.

Pedennou diouz an noz

En ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel.
Evel-se bezet graet.

Evit trugarekaat Doue

Mil bennoz d'eoc'h, o va Aotrou,
Evit hoc'h holl vadoberou:
D'am beza graet, prenet, mired,
En hoc'h Iliz digemeret.

Evit goulenn sklerijenn da anaout hor pec'hejou

O va Jezuz, me a c'houlenn
Kaout diganeoc'h ar sklerijenn
Evit anaout e pet pec'hed
Oun bet, siouaz! hirio kouezet.

Evit goulenn pardon

Keuz bras am eus, o va Salver,
Da veza bet eur seurt pec'her;
Gant ho krasou, hiviziken,
Me a vevo e gwir gristen.

Evit pedi ar Werc'hez

Gwerc'hez Vari, va Mamm dener,
Bezit atao mat em c'heñver,
Ha, pa sono eur ar c'himiad,
Deuit da gloza va daoulagad.

Evit pedi hon El-Mat

C'houi, va El-Mat, kannad Doue,
Mirit va c'horf ha va ene;
Na lezit ket an droukspered
D'am chadenna dre ar pec'hed.

D'hor Patron pe d'hor Patronez

Va Sant patron, me 'zo eürus
Da gaout hoc'h ano enorus.
Peogwir em eus ken bras enor,
Ho pet truez ouz ho filhor.

Va fatronez, me 'zo eürus
Da gaout hoc'h ano enorus;
Hag ho pedan, va maeronez,
Da henchha mat ho filhorez.

Evit pedi Jezuz-Krist hag ar Sent

Jezuz, Mari ha Jozef, itron santez Anna,
Sant Per ha sant Kaourintin, sant Paol, santez Barba,
Elez ha Sent an Neñvou, me ho ped d'am difenn;
Ma c'hellin, gant ho sikour, gounit va c'hurunenn.

Hon Tad hag a zo en Nenv

Hon Tad hag a zo en Neñv, hoc'h ano bezet santelaet;
ho rouantelez deuet d'eomp; ho polontez bezet graet war an
douar evel en Neñv. Roit d'eomp hirio hor bara pemdeziek;
ha pardonit d'eomp hon ofañsou, evel ma pardonomp d'ar
re o deus hon ofañset; ha n'hon lezit ket da goueza en
dentasion, met hon diwallit diouz an droug. Evel-se bezet
graet.

Me ho salud, Mari

Me ho salud, Mari, leun a c'hras, an Aotrou Doue 'zo
ganeoc'h, benniget oc'h dreist an holl gwragez, ha benniget
eo ar frouez eus ho korf, Jezuz.

Santez Mari, mamm da Zoue, pedit evidomp, pec'herien,
bremañ ha da eur hor maro. Evel-se bezet graet.

Me a gred e Doue

Me a gred e Doue an Tad holl-c'halloudek, krouer an
Neñv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unik, hon
Aotrou, a zo bet konsevet dre c'halloud ar Spered-Santel,
ganet gant ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan
Pons-Pilat, a zo bet krusifiet, maro ha sebeliet, a zo disken-
net d'an iferniou, d'an trede deiz savet a varo da veo, a
zo pignet d'an Neñv, azezet en tu deou da Zoue an Tad
holl-c'halloudek, ac'hano e teuy da varn ar re veo hag ar
re varo.

Me a gred er Spered Santel, en Iliz Santel Katolik, e
Komunion ar Sent, e remision ar pec'hejou, e rezureksion ar
c'hig, er vuhez eternal. Evel-se bezet graet.

Me a gofes ouz Doue

Me a gofes ouz Doue holl-c'halloudek, ouz ar Werc'hez
glorius Vari, ouz an Aotrou sant Mikêl Arc'hêl, ouz
an Aotrou sant Yann-Vadezour, ouz an Ebestel sant Per ha
sant Paol, hag ouz an holl Sent, abalamour m'am eus pec'het
bras dre soñj, dre gomz ha dre ober: dre va faot, dre va
faot, dre va brasa faot.

Rak-se e pedan ar Werc'hez glorius Vari, an Aotrou
sant Mikêl Arc'hêl, an Aotrou sant Yann-Vadezour, an Ebes-
tel sant Per ha sant Paol, hag an holl Sent, da bedi Doue
evidoun. Evel-se bezet graet.

Gourc'hemennou Doue

Eun Doue hepken a adori
Ha dreist pep tra holl a gari.
Na dou ket ano Mestr ar bed,
Ma n'ec'h eus abeg mat ebet.
Ar suliou santel a viri
D'enori Doue, d'e bedi.
Da dad, da vamm a enori,
Evit pell amzer ma vevi.
Ha mir na lazi den ebet,
Nag a galon, nag a efed.
D'ar pec'hed vil n'en em ro ket,
Dindan boan da veza daonet,
Laerez na miret madou den
E gouiziegez ne ri biken.
Na gevier na fals-testeni
Mir birviken na liviri.
Na c'hoanta dre luksur pec'hi
Nag e sonj vil n'en em bliji.
Madou re-all na c'hoanta ket
Evit o c'haout hep gwir ebet.

Gourc'hemennou an Iliz

Klevout a ri mat penn-da-benn
Sul ha gouel-berz an oferenn.
Neuze pep labour a lezi,

Evit da Grouer enori.
Eur wech er bloaz da vihana,
E kovesai hep nac'h netra.
Ha da Salver a resevi
Da Bask devota ma c'helli.
Yun a ri an daouzek deiziou,
Ar C'horai hag ar vijilou.
Da zeiz vijil na da wener
Ne zebri kig e nep amzer.

Evit an Anaon hag ene an hini a zo
aman war ar varvskaon

De profundis clamavi ad te, Domine; Domine exaudi
vocem meam.

Fiant aures tuæ intendentes, in vocem deprecationis meæ.
Si iniquitates observaveris, Domine; Domine, quis susti-
nebit?

Quia apud te propitiatio est, et propter legem tuam
sustinui te, Domine.

Sustinuit anima mea in verbo ejus, speravit anima mea
in Domino.

A custodia matutina usque ad noctem, speret Israël in
Domino.

Quia apud Dominum misericordia, et copiosa apud eum
redemptio.

Et ipse redimet Israël ex omnibus iniquitatibus ejus.

— Requiem æternam dona eis, Domine.

Et lux perpetua luceat eis.

— Requiescant in pace.

Amen.

— Domine, exaudi orationem meam.

Et clamor meus ad te veniat.

Oremus.

Fidelium, Deus omnium Conditor et Redemptor, anima-
bus famulorum famularumque tuarum remissionem cuncto-
rum tribue peccatorum, ut indulgentiam quam semper opta-
verunt piis supplicationibus consequantur. Qui vivis et
regnas in sæcula sæculorum. Amen.

*
**

Lavaromp Litanioù ar Werc'hez Glorius Vari evit kas
an droukspered diwar hon tro hag evit ma plijo ganti gou-
lenn digant he mab ar c'hras d'eomp da gaout bep a varo
mat ha da ene an hini tremenet-mañ da veza digemeret bre-
mañ e-barz palez ar Sent hag an Elez.

Sub tuum præsidium confugimus, Sancta Dei Genitrix:
nostras deprecationes ne despicias in necessitatibus: sed a
periculis cunctis libera nos semper, Virgo gloriosa et bene-
dicta.

Litanioù ar Werc'hez

Kyrie, eléison.
Christe, eléison.
Kyrie, eléison.
Christe, audi nos.
Christe, exaudi nos.
Pater de cælis, Deus, mise-
rere nobis.
Fili, redemptor mundi Deus
Spiritus Sancte Deus,
Sancta Trinitas unus Deus,
Sancta Maria, ora pro no-
bis.
Sancta Dei Genitrix,
Sancta Virgo virginum,
Mater Christi,
Mater divinæ gratiæ,
Mater purissima,
Mater castissima,
Mater inviolata,
Mater intemerata,
Mater amabilis,
Mater admirabilis,
Mater boni consilii,
Mater Creatoris,
Mater Salvatoris,

Virgo prudentissima,
Virgo veneranda,
Virgo prædicanda,
Virgo potens,
Virgo clemens,
Virgo fidelis,
Speculum justitiæ,
Sedes sapientiæ,
Causa nostræ lætitiæ,
Vas spirituale,
Vas honorabile,
Vas insigne devotionis,
Rosa mystica,
Turris Davidica,
Turris eburnea,
Domus aurea,
Fœderis arca,
Janua cæli,
Stella matutina,
Salus infirmorum,
Refugium peccatorum,
Consolatrix afflictorum,
Auxilium christianorum,
Regina angelorum,
Regina patriarcharum,

Regina prophetarum,
Regina apostolorum,
Regina martyrum,
Regina confessorum,
Regina virginum,
Regina sanctorum omnium,

Regina sine labe originali
concepta,
Regina sacratissimi Rosa-
rii,
Regina pacis,

Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, *parce nobis, Domine,*
Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, *exaudi nos, Domine,*
Agnus Dei, qui tollis peccata mundi, *miserere nobis.*

Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix,
Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

Oremus.

Defende, quæsumus, Domine, beata Maria semper virgine
intercedente, istam ab omni adversitate familiam et toto
corde tibi prostratam ab hostium propitius tuere clementer
insidiis. Per Christum Dominum nostrum. Amen.

*
**

Saludomp ar **Werc'hez Vari** dre he fedenn gaer ha gal-
loudus, evel ma voe saludet gant an El e kêr Nazared:

Me ho salud, Mari, leun a c'hras...

Mari, kavet hoc'h eus gras dirak Doue; evidoc'h da chom
bepred gwerc'hez, e konsevoc'h eur mab a lakaoc'h er bed
hag a anvoc'h Jezuz. Bras e vo e pep doare hag, abalamour
d'ar burzudou kaer a ray, e vo anvet Mab an Holl-C'hal-
loudeg.

Sellomp a-zevri ouz madelez Mari a zo meurbet trugare-
zus, anavezomp-hi evit hor rouanez, choazomp-hi evit hon
alvokadez. Enoromp an hini a zo bet enoret gant Doue, salu-
domp an hini a zo bet saludet gant an El, ha lavaromp d'ezi
gant doujañs, gant fiziañs ha devosion, ar memes komzou a
rannas an El dirazi hag a gaver en *Ave Maria*, ar bedenn
ken kaer ha ken plijus d'ezi.

Gant eur galon dinamm, eeun ha joaius,
Lavaromp a-unan an **Angelus**
A ganas an Arc'hêl bras Gabriel,
Pedomp Mari, merc'h an Tad Eternel.

O Mari, c'houi 'zo benniget
Dreist an holl gwragez ha merc'hed
Itron Varia, mamm Jezuz,
Bezit ouzomp karantezus.

Angelus Domini nuntiavit Mariæ.

— *Et concepit de Spiritu Sancto.*

Ave Maria...

Ha gant santez Elizabed,
Mamm Yann-Vadezour benniget,
Lavaromp d'ar Werc'hez Vari
'Vit he meuli, hec'h enori:

« O Mari, c'houi 'zo benniget
Hag a bep seurt grasou karget! »
Itron Varia, mamm Jezuz,
Bezit ouzomp trugarezus.

Ecce ancilla Domini.

— *Fiat mihi secundum verbum tuum.*

Ave Maria...

Gant an Iliz, a wir galon,
Gant doujañs ha devosion,
Pedomp hor mestrez roueel,
Gwir bried d'ar Spered-Santel.

Ho skoazell a c'houlennomp holl,
A-hend-all ez afemp da goll;
O Mari, gwir vamm da Jezuz,
Bezit ouzomp trugarezus!

Et Verbum caro factum est.

— Et habitavit in nobis.

Ave Maria...

M'ho salud, Rouanez 'n Neñvou,
Mamm Roue 'n Elez, hon Aotrou;
O Mari, c'houi ez eo boked
Ha bleunvenn an holl werc'hezed.

'Vel ar roz pe ar bleuñv-lili
E santomp o c'houez gant dudi,
Skuilhit ho pedenn galloudus,
Evidomp holl, dirak Jezuz.

Ora pro nobis, sancta Dei Genitrix.

— Ut digni efficiamur promissionibus Christi.

Oremus.

Gratiam tuam, quæsumus, Domine, mentibus nostris
infunde, ut qui, angelo nuntiante, Christi Filii tui incarna-
tionem cognovimus, per passionem ejus et crucem ad resur-
rectionis gloriam perducamur. Per eundem Christum Domi-
num nostrum. Amen.

*
**

Setu eur c'horf hag en deus tremenet e vuhez e-barz ar
bed-mañ.

Evesaomp eta, pep-hini ac'hanomp, ouz ar stad ken trist
ma vimp lakaet enni e berr-amzer, pa zeuy Doue d'hor ger-
vel ha da rei d'eomp taol ar maro. Ne vimp mui, a-benn
eur pennadig goude, nemet breinadurez ha boued preñved.
Allas! hon eskern hag hon holl izili a vo etre ar garnel hag
ar vered. Met hon ene paour, a-vec'h en do ar maro sarret
hon daoulagad ouz ar bed-mañ, a ranko en em gavout dirak
lez-varn an Aotrou Doue da renta eur gont piz ha fidel eus
hor buhez penn-da-benn. Barnet e vo didruez gant ar Barner
bras ha just a ziskuilho, gant ruster, an holl ofañsou ha



« Me eo ar Rezureksion hag ar Vuhez. An hini a gred ennoun,
ha goude ma vefe maro, a vevo... » (Hor Salver Jezuz-Krist,
Aviel St Yann. XI.)

dismegañsou a vo bet graet en e eneb. O gwasat tra a vo ar gont a rankimp renta evit ar vuhez hor bo renet! Ma vimp kavet din da veritout ar baradoz, e vo da-viken; met pebez gwalleur, ma tigouezfe d'eomp beza kondaonet d'an ifern. Eno e rankfemp chom da leski da virviken e-pad an holl amzer.

O va ene, sonj alies en eternite, pa 'z eo eno e kavi ar gwir eürusted pe ar reuz a bado da-viken. Eno eo e tleomp digouezout a-bret pe ziwezat, goude beza tremenet eun nebeudig amzer hepken war an douar.

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit ene an hini tremenet-mañ, hag evit ar c'henta (pe ar genta) a varvo eus ar gompagnunez, ma plijo gant Jezuz-Krist benniget hag ar Wer-c'hez, e vamm, rei d'ezañ (pe d'ezi) ar c'hras da gaout eur maro mat hag eürus, ha da ene an hini tremenet-mañ da vont bremañ e-touez ar Sent, e palez dudius an Aotrou Doue.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Ar maro, ken garo,
Buan ho tiskaro;
Doue, d'ar maro,
Pep tra a varno.

Ret 'vo mervel, ret 'vo mervel,
Pa zeuy an Ankou d'ho kervel.

Ar varn buan 'zo bet douget
Ha bremaik e vo sevenet;
Evel ma weñvo ar vleuñvenn
'Ranko an den mervel souden.

Ar maro kriz ha didruez
A drouc'ho neudenn ho puhez.
Kenavo, mignoned, kerent,
Bugale a garemp kement.

Ho kalon a vo ankeniet,
P'hor c'huitaoc'h gant keuz ha more'hed;
Sklavourien al lore'h, ar fouge,
Petra 'vo ho kened neuze?

Dorn eun Doue holl-c'halloudus
Da welet ho rento euzus;
C'houi 'n em douell gant ho c'hoanton,
Mezvet gant plijadureziou.

Ennoc'h, pegen trist chenchamant
A ray ar maro dizamant;
Tud ar bed, gwelit en arched
Hoc'h ourgouilh ken herr diskaret.

D'en em gavout ez oc'h techet
Ha da netra 'vezoc'h rentet;
'N eur bez teñval, 'barz an douar,
E kavoc'h lojeiz hep arvar.

Eno ho korfou ken karet
Gant ar preñved a vo krignet;
Setu eta ho korf maro,
Hoc'h ene da be lec'h 'z aio?

Dirak lez-varn 'n Aotrou Doue
Pebez spont a vo en deiz-se!
Hoc'h oberou, pa vint pouezet,
'Vezoc'h daonet pe absolvet.

Diwar neuze ho planedenn
A rankoc'h heulia da-viken
Hag, e-doug an eternite,
E c'houzanvoc'h setañs Doue.

Gant aon da sonjal en traou-se
A dosta 'vidoc'h koulskoude,
Ne deo ket chalet ho spered
'Met gant gwall-dechou ha pec'hed.

Pa vo ret klevet ar setañs,
Piou neuze 'vo en asurañs?
Da bet ar maro ankenius
A vo eur blanedenn c'hrevus?

Evit miret na vimp daonet,
Gouelomp d'hor buhez tremenet;
Torromp buan ar chadennou
Hon dalc'h stag ouz hor pec'hejou.

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit goulenn ar c'hras
d'ar bec'herien da chench buhez, hag eur maro mat hag
eürus d'ar re a zo war o zremenvenn hag o vont er-mêz eus
buhez ar bed-mañ.

Lavaromp ivez eun *De profundis* evit ma repozo ha ma
vo diboaniet ene an hini tremenet-man hag eneou e holl
gerent aet d'ar bed-all, gant aon e vefe dalc'het unan
bennak anezo e-barz ar Purgator.

Pedomp Hor Salver Jezuz-Krist hag e vamm venniget,
evit ma vo digemeret bremañ ar paour-kêz eneou-se er Bara-
doz e-touez ar Sent hag an Elez.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...
De profundis...

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria*, pep-hini ac'hanomp, en
enor d'e sant paeron ha d'e santez maeronez, hag evit pedi
sant paeron ha santez maeronez an hini tremenet-man (pe
an hini dremenet-mañ), ma plijo ganto dont en arbenn d'o
filhor (pe d'o filhorez) ha d'e gas (pe d'he c'has) ganto d'ar
baradoz, betek al lec'h ma vo kurunet dirak ar Sent hag an
Elez.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit ma vimp sikouret
hon-unan ha ma vo sikouret ene an hini tremenet-mañ gant
Sant Kaourintin, patron an eskopti (1).

O sant Kaourintin bras, tad mat ha karantezus,
Bleinit an ene-mañ betek tron hor mestr Jezuz
Ha bezit evitañ alvokad ha difenner,
Ma plijo gant Doue hag e vamm hen digemer.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit pedi Sant , hor
patron, hag ar Sent all a enoromp er barrez da erbedi ouz
Doue ene an hini tremenet-mañ ha d'e lakaat da gaout digant
Jezuz ar c'hras kaer da veza resevet bremañ e kompagnunez
ar Re Eürus.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Ne vimp ket atao e-barz ar bed-mañ. Goude ar vuhez
m'emaomp enni, hor bo unan all ha n'he do fin ebet. Eürus
e vimp neuze da-viken pe reuzeudik e-pad an holl amzer.

Allas! a-benn nebeut ac'hann en em gavimp eno, da lava-
ret eo er Baradoz pe en Ifern. Met e pe lec'h e vin-me lakaet?
Ma c'hounezan ar Baradoz, pebez eürusted evidoun! Met,
siouaz! ma kouezan e puns an Ifern, e vo spontus va stad
e-touez ar Re Zaonet!

A-barz eun eur goude va maro en em gavin e hini pe hini
eus an daou lec'h-se, hervez ma vo bet merket d'in dre eur
varnedigez na c'hello beza cheñchet na torret. N'ouzon ket

(1) E eskoptiou sant Brieg ha Gwened, e-lec'h sant Kaourintin,
e vezo lavaret : *Sant Brieg* ..pe.. *sant Patern*,...

an eur eus va maro, ha rak-se n'oun ket evit gouzout pedavare e vin kaset d'ar plas, a zo miret d'in evit an eternite, met gouzout a ran mat e rankin mervel abret pe viwezat. Kuzet eo ouzin an eur hag ar mare, ha va zro a c'hell dont hirio, siouaz! Anavezet em eus tud hag o deus bet eur maro trumm ha, koulskoude, e seblantent beza ken yac'h ha me.

Pa zeuy ar maro betek ennoun, da betra e servijo d'in an holl soñjou emañ va spered o prederia ganto? Ha ma teufe ar maro d'am samma e stad a bec'hed marvel, da be lec'h ez afe va ene? Gellout a rafen, marteze, beza sourprenet e-barz ar stad-se.

N'em eus ket aon rak ar maro, met nec'h am eus rak ar pez en em gavo war e lerc'h. Aon am eus rak ar blanedenn eürus pe reuzeudik a bado atao hag a vo va hini, hervez ma vin bet er pred diweza eus va buhez.

N'ouzon ket petra a vo evidoun ar mare-se na c'hellan ket tec'het dioutañ hag a zigoro dirazoun dor ar vuhez a bado da-viken. Aon am eus rak an devez a vo an diweza eus va holl zevezioù hag ar c'henta eus eun eürusted pe eur gwalleur ha n'en do fin ebet.

O va Salver benniget! diskennet oc'h bet eus an Neñv war an douar da glask ar bec'herien. Setu me, unan eus ar re vrasa anezo, o vont d'en em gavout dirak ho lez-varn. Laouen oun da veza barnet ganeoc'h, nemet e lakafec'h ho Kroaz etrezoc'h ha me. Sellit ouz ar gouliou hoc'h eus resevet evit va silvidigez; gwelit petra oun koustet d'eoc'h; klas-kit en ho Kalon Sakr hag e kavoc'h peadra da baea ar boan dleet d'am fec'hejou; pouezit va ene e balañs ho kroaz ha sellit gant truez ouz ar c'holl bras a vefe evitañ, ma vefe kondaonet d'an ifern.

O va Jezuz dous ha mat, ho pet envor penaos, evit va c'hask-me, hoc'h eus graet kement a veajou; penaos, evit rei d'in ar vuhez, hoc'h eus gouzafvet eus maro križ war ar Groaz; ha penaos, evit va renta eürus, ez oc'h en em rentet ar reuzeudika eus an holl dud! O va Salver ker, na gollit ket an ene en deus koustet d'eoc'h kement a wad hag a zaelou!

*
*
*

Eur Bater hag eun Ave Maria evit pedi an Aotrou Doue ha Sperejou Eürus an Nenv da zont da zigemeret ene an hini tremenet-mañ o deus bet kement a soursi anezañ e-pad e vuhez. Pedomp evit ma plijo ganto chom hep hen dilezel bremañ, pa 'z eo maro e-barz ar bed-mañ. Pedomp sant Mikêl hag e El-mat da zont d'e frealzi ha d'e ziboania, hag an holl Sent benniget, dreist-holl ar re en deus bet an enor da zougen o ano hag ar re e oa boazet d'en em erbedi outo alies, ma plijo ganto dont da rei skoazell d'ezañ ha da alvokadi evitañ dirak an Aotrou Doue.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
*
*

Eur Bater hag eun Ave Maria hag eun De profundis evit, pa vo kaset korf an hini tremenet-mañ d'an douar benniget, ma vo douget e ene gant ar Sent hag an Elez d'ar baradoz, da gregi gant eur vuhez leun a bep joasted er palez kaer a zo preparet d'eomp gant an Dreinded.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...
De profundis...

*
*
*

Selaouit eta, va Doue, ouz ar c'hri a ran ouzoc'h em fedennou.

Ho pet truez ouzin ha plijet ganeoc'h rei d'in va goulenn. Komzet em eus ac'hanoc'h em ezommou, hag atao, Doue, ho klaskin, ken n'am bo an eur da welet ho fas.

Na zistroit ket ho taoulagad diwarnoun, ha na bellait ket, en ho kounnar, diouz ho servijer paour ma 'z oun.

Kendalc'hit d'am sikour, n'am disprikit ket, va Doue, va Salver.

Evel eur c'hrouadur dilezet gant e dad ha gant e vamm, oun bet dirazoc'h.

Hogen, c'houi, va Aotrou, hoc'h eus bet ar vadelez da gemeret ar garg ac'hanoun.

Deskit d'in eta, va Doue, kerzet e hent al lezenn, ha kemerit preder d'am blenia hoc'h-unan dre an hent eeun a zo ken striz, gant aon e vefen lakaet da fazia gant an enebourien.

N'am lakait ket dindan galloud ar re a zo ouz va heskina; Savet int em eneb evel testou displeal ha fallakr.

Hogen kasoni o menozioù fall ne noazo nemet outo o-unan.

Rak kredi a ran em bo an eurvad da gaout ar gerz eus madou va Doue e bro ar re ve.

Gortozomp eta, va ene, an Aotrou Doue d'hor sikour.

Kemeromp nerz-kalon en hor poanioù, ha kennerzomp hon ene en eur lakaat hor fiziañs e Doue.

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit pedi **Itron Varia ar Wir-Sikour, Itron Varia ar Porzou hag Itron Varia Rumengol**, ma plijo gant an teir Mari-se na day nikun eus ar gompagnunez-mañ da goll.

O Itron Varia Rumengol, patronez Breiz-Izel, pedit evit ene an hini tremenet-mañ hag evit pep-hini ac'hanomp, bre-mañ ha pa rankimp mervel, ma c'hellimp, goude an draonienn-mañ a dristidigez, kaout ar vuhez a bado da-viken, gant ar Sent hag an Elez er baradoz, evit meuli da-viken Hor Salver benniget.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

An den 'ranko beza kalet
Ma ne vez e galon rannet
O klevet klemmoù truezus
An anaon paour hag hirvoudus.

An anaon a glemm hag a gri
'Kreiz ar Purgator o tevi,
O tevi bemdez; evel-hen
Ec'h aspedont ar gristenien:
Mar deus siousaz! truez er bed,
En an' Doue hor sikouret.

Breudeur, kerent ha mignoned,
En an' Doue hor selaouet,
En an' Doue hor sikouret,
Breudeur, kerent ha mignoned!

Allas! ne c'houfe den kompren
Pegen iskis eo hon anken;
Gouzañv a reomp ken gwas tourmant
Ma 'z eo eun dra dreist ho skiant.

Gant ar re hon eus-ni maget,
Ez omp pell 'zo ankounac'hêt;
Ha gant ar re hon eus karet,
Hep truez, ez omp dilezet.

Va mab, va merc'h, c'houi 'zo kousket
War ar pleuñv dous ha blot-meurbet,
Ha me, ho tad, ha me, ho mamm,
Er Purgator e-kreiz ar flamm.

C'houi 'zo er joa, ni en anken;
C'houi 'ra chervad, ni pinijenn.
C'houi 'zo e-kreiz al levnezh,
Ha ni dilezet en enkrezh.

C'houi 'zo en davarn o vezvi,
Hag ho tad en tan o tevi.
Goulenn a ra eul lommig dour,
Allas! ne zeu den d'e sikour.

Dañsal a rit, merc'hed divat,
Keit ha ma tev en tan ho tad;
Bragal a rit en nozveziou,
Keit m'emañ ho mamm er flammou.

Ar madou hon eus gounezet,
Gant mil boan, pa edomp er bed,
A foranit da bep mare,
Hep soñj ac'hanomp, bugale.

Roit evidomp an aluzen,
Kinnigit yun ha pinijenn,
It ivez d'ar gomunion,
Nêd ha digailhar ho kalon.

Gounezit gant devosion
Ar jubile d'an anaon,
Hag e-giz-se, hep mar ebet,
Ez aïmp holl d'ar joausted.

Met pa 'z eo hon tud didruez,
Hor selaouit prim, o' Gwerc'hez!
Skuilhit eus ho lêz prizius
War an anaon hirvoudus.

Ar Werc'hez Sakr, mamm da Zoue,
A respontas eun deiz a voe:
« Anaon kêz, en em frealzet,
« Emberr e vezoc'h diboaniet.

« Va mignoned am eus kaset
« Da sikour 'n anaon glac'haret
« Dre 'r jubileou benniget
« 'zo bet em reket digoret. »

Anaon ker, en em frealzet,
Emberr e vezoc'h diboaniet
Dre wad santel Salver ar Bed
Ha lêz Mari, mamm venniget.

*
**

Eur Batér, eun Ave Maria hag eun *De profundis* evit
diskuiz ha diboagn eneoù hon tadou hag hor mammou,
hon tadou koz hag hor mammou koz, hor breudeur hag hor
c'hoarezed, hor yontred hag hor moerebed, hor c'herent hag
hor mignoned ha, dreist-holl, evit ene an hini tremenet-mañ,
gant aon e vefe bet dalc'het unan bennak eus an eneoù
paour-se e-barz ar Purgator. Pedomp an Aotrou Krist benni-
get hag e vamm, ar Werc'hez, da gaout trugarez outo ha
d'o digemeret er Baradoz, e kompagnunez an Elez eürus, da
gana meuleudi da Zoue e-pad an holl amzer.

Hon Tad hag a zo en Neñv...

Me ho salud, Mari, merc'h da Zoue an Tad,
Me ho salud, Mari, mamm da Zoue ar Mab,
Me ho salud, Mari, pried ar Spered-Santel,
Me ho salud, Mari, templ an Dreinded-Sakr,
Me ho salud, Mari, esperañs ar bed,
Me ho salud, Mari, leun a zouster hag a drugarez,

*Me ho salud, Mari...
De profundis...*

*
**

Graet em eus va menoz em c'halon
Da veza devot da Vari;
Hounnez a vo eun devosion
Ha na vankin morse d'ezi.
O pegen dous eo ar sonjezon
En devez ar C'hristen bemdez
Hag a laka tommder 'n e galon
Ouz Mamm Doue, dre garantez!

War-lerc'h Jezuz e karan Mari,
Hag e rin va flijadurez
O servija hag oc'h enori
Ar Werc'hez e-pad va buhez.

Eürus eo neb a vez e spered
O soñjal atao er Werc'hez;
Eürus neb en deus he c'hemeret
Evit e vamm hag e vestrez.

E-giz-se 'ta e vezin eürus,
Rak da-viken, o va Itron,
E talc'hoc'h, goude ho mab Jezuz,
Al lec'h uhela em c'halon:
C'houi a vo enni ar Rouanez,
Hag ho mab Jezuz ar Roue;
Heñ, ar mestr bras, ha c'houi, ar veztrez,
O do pep galloud warnoun-me.

Pa ve 'm eneb an Ifern savet,
Ne gollin ket an esperañs
Am eus da veza dreizoc'h salvet
War bouez ho heulia gant fiziañs.
Rak-se 'ta, Gwerc'hez, me hoc'h asped,
Grit ma kendalc'hin hep ehan
Da garet Doue ha d'ho karet
Betek 'n eur eus va zremenvan.

O Gwerc'hez Vari leun a druez,
Me ho ped, eñvor ho pezet
Penaos biskoaz den en e vuhez
N'en deveus gwelet na klevet
Ho pije lezet en abandon
Nikun a gement a zeue
D'en em erbedi d'eoc'h a galon,
Daoust pegen bras pec'her 'vije.

Nann, ne zeuit morse da zilezel
Neb gant fiziañs 'n em dro ouzoc'h
Hag a c'houlenn ho kwarez santel
Ha skoazell nerzus diganeoc'h.
Gant memes fiziañs 'teuan ivez,
O Gwerc'hez, mamm ar gwerc'hezed,
D'en em erbedi d'ho madelez
Evit kaout ho sikour bepred.

'Trezek ennoc'h, 'n eur huanadi
Evel eur pec'her bras ma 'z oun,
Ez an gant doujañs ha gant dudi
Da c'houlenn dreizoc'h ar pardon.
Pa 'z oc'h gwir vamm Ger Santel Doue,
Na zisprizit ket va c'homzou,
Met pedit evidoun hor Roue
Ma roy d'in va holl ezommou.

*
*

Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit en em erbedi ouz
Rouanez an Nenv hag an douar.

O Mamm Doue, leun a enor, hon distlabezit diouz ar
pec'hejou hag ar c'hleñvejou diremed! O Gwerc'hez Vari,
hor rouanez, c'houi hag a zo leun a vadelez, plijet ganeoc'h
alvokadi evit silvidigez pep-hini ac'hanomp! O Mamm dener
Hor Salver, anvet ar Vamm a Drugarez, c'houi hag a zo bet
dibabet e-touez an holl gwiragez evit lakaat Jezuz, hon
Aotrou, war an douar, bezit hon difennourez dirak Doue!
Bras eo ho karantez en hor c'heñver, o Mari, mamm a druez!
Na nac'hit ket reseo ene an hini tremenet-mañ; deuit d'hen
digemeret e-touez an niver bras eus ho servijerien.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
*

Eur Bater hag eun *Ave Maria* en enor da santez Anna,
mam garantezus ar Werc'hez Vari ha mamm-goz Jezuz-
Krist, hon Aotrou, ma plijo ganti pedi he mab bihan benni-
get da rei e bardon da ene an hini tremenet-mañ ha da skuilh
e c'hrasoù war bep-hini ac'hanomp.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
*

O santez Barba, merzerez leun a c'hloar maro evit ar feiz, c'houi hag a laka ar re en em erbed ouzoc'h da gaout ar c'hras da reseo o sakramañchou diweza a-barz mont kuit eus buhez ar bed-mañ, me hoc'h asped, gant eur galon izel, da rei d'eomp dre ho skoazell an eurvad da veza salvet, evit ma kanimp meuleudiou da Zoue er baradoz, e-lec'h ma vev ha ma ren Jezuz-Krist gant e Dad hag ar Spered-Santel e-pad an holl amzeriou.

*
**

Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit pedi **santez Barba**, ma plijo ganti hon diwall diouz ar gurun, diouz al luc'hed, diouz an tan-gwall, diouz ar gwalleur ha, dreist pep tra, diouz ar maro trumm a zeu da samma an den en e bec'hed, pa vez en nebeuta sonj, ha ma plijo ganti ivez lakaat pep-hini ac'hanomp da gaout ar c'hras da reseo e sakramañchou diweza a-barz mervel, hag ene an hini tremenet-mañ da vont bremañ d'ar joausted a bado da-viken.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

O Tad ar sklerijenn eus an Neñv,
Ouz ar Vadalen pa sellit,
Flamm nerzus-dreist ho karantez kreñv
En he c'halon a enaout,
Rak, o veza kaset diouti
Ar pec'hed marvel dre ho kras,
Hoc'h eus lakaet neuze da deuzi
Kement a oa enni a sklas.

Gant mall ez a, he c'halon trec'het
Gant ho karantez, va Aotrou,
Da ongañti ho treid benniget
Ha d'o gwelc'hi gant he daelou.

Gant bleo he fenn pe gant he c'huchou
E teu d'o c'hempenn, d'o zorcha,
O pokat d'ezo gant he genou
Ha gant he zeod ouz o lipa.

E-harz ar groaz, war ho tremenvan,
E tired c'hoaz hep aon ebet;
E-harz ho pezh, gant keuz ha gouelvan,
Ez eo glac'haret bras-meurbet.
Ne sponte ket rak ar soudarded,
Daoust pegement e oant ganas,
Rak atao he freder d'ho karet
Pell diouti pep aon 'gasas.

O va Jezuz, hor gwir garantez,
Plijet ganeoc'h-c'houi hor gwelc'hi
Diouz kement droug ha fallagriez
Hor be graet a-enep d'eoc'h-c'houi.
Deuit, Aotrou, ni ho ped, da leunia
Gant ho krasou hor c'halonou
Ha, goude-se, roit d'eomp an tañva
Eus hoc'h eürusted en Neñvou.

Enor ha gloar d'an Tad Eternel
Ha d'e Vab unik, Hor Salver,
Ivez d'ar Spered glan ha santel
Tre betek fin an holl amzer.

*
**

Eur Bater hag eun *Ave Maria* en enor da **santez Mari-Madalen**, evit ma plijo ganti beza eun alvokadez vat evit ar bec'herien hag ar pec'herezed a zo amañ en hon touez, ha lakaat pep-hini ac'hanomp da gaout digant an Aotrou Doue ar c'hras d'en'em gavout e stad vat ha santel a-barz ma sono evidomp eur drist ar maro, rak, siouaz! tostaat a ra ouzomp bemdez.

Pedomp ivez Hor Salver Jezuz-Krist da gaout truez ouzomp ha da rei da ene an hini tremenet-mañ eul lec'h a levez hag a ziskuiz da veuli Doue gant an Elez er baradoz.

*Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...*

*
**

Ê-barz ar Jardin Olived
Heuliomp an Aotrou Jezuz,
Hag Hor Salver 'c'hellimp gwelet
En e dremenvan poanuis.

E galon beuzet er glac'har,
En e zaoulagad daelou,
Pleget eo betek an douar
Dindan pouez hor pec'hejou.

Pebez burzud a garantez :
Setu Mestr bras an Neñvou
Sammet 'vidomp, dre dugarez,
Gant gwall vec'h hon torfejou.

Pebez samm a zo warnezañ :
Ar pec'hejou tremenet,
Ar re a réer c'hoaz bremañ
Hag ar réou da zonet !

Adalek pec'hed meur kenta
Hon tad koz Adam gwechall
Tre betek pec'hed diweza
'N diweza eus an dud fall.

War e gein o gwelan berniet :
Siouaz ! nag a dorfejou !
Penaos 'ta beza souezet,
Ma skuilh kement a zaelou ?

Pec'her, te ac'h eus e wisket
Gant fañk da walloberou ;
En-dro d'ezañ ec'h eus skoulmet
Eur gouriz a bec'hejou.

Penaos 'c'h eus dishenvelebet
Hor Mestr leun a drugarez ?
Diskouez a rez frouez milliget
Da galon ken didruez.

Er stad-se ken vil, ken euzus,
En deus heug e Dad outañ ;
E zaoulagad karantezus
A zistro diwarnezañ.

War Jezuz, kent e vab karet
Hag e vrasa levenez,
E taol e valloz gant more'hed
Ha bec'h e vuanegez.

Hag evit ma vo sevenet
E varn a-enep d'ezañ,
Eun El eus an Neñv 'n deus kaset
Eus e berz betek ennañ.

En e zorn, eur c'halir c'houero
Leun a li hon torfejou
Hag, en e oueled, ar maro,
Frouez mantrus hor pec'hejou.

O veza na c'hell teneraat
Kalon e Dad kounnaret,
Da gaout e dud ez a timat
Met, siouaz ! holl int kousket.

Pebez kalonad, va Aotrou !
Gant ho Tad, ho tiskibien,
Ez oc'h dilezet 'n ho poaniou,
Hep frealz 'kreiz hoc'h anken.

Neuze diouz e dud e pella
Hag en em lak' a-nevez
Da hirvoudi ha da ouela
Gant ar spont hag an enkreiz.



Itron Varia a Druéz, pedit evidomp. Dre ar poaniou hoc'h eus gouzañvet war ar menez Kalvar, goulennit d'eomp eur maro santel hag ho pet truez ouz eneoù ar Purgator !

Rak ar gwanerez ken garo
A zo evitañ aozet
Hag ar gloaziou a c'houzañvo
A wel frès en e spered.

Keit ma pado e Basion
Poaniou kriz a ziwasko ;
Poaniou a gorf hag a galon
'N eil goud' eben a zeuio.

Amañ 'n em gavont asambles
Evel bleizi kounnaret ;
En eur mor a dristidigez
E galon o deus beuzet.

En em welet a ra gwerzet
Gant Judaz, trubard ganas,
Gant e ziskibien dilezet
Ha gant Per nac'het, siouaz !

E gorf santel a sañt, gant gloaz,
Dispennet gant skourjezou
Hag e izili ouz ar groaz
Staget gant mellou tachou.

Pez a gresk ar boan 'n e ene
Eo hon dizanaoudegez ;
Mervel e tarb d'ezañ neuze
Gant an doan hag an enkreiz.

Ha pa wel kement a boaniou
Kollet evit ar pec'her,
Ar gwad ruz-glaou, a-boulladoù,
Eus e izili ' ziver.

Deuit da zastum ar beradoù
Eus ar gwad ken prizius
A zired, evel stivellou,
Eus a gorf santel Jezuz.

O sellet outañ 'n e anken
Hag e c'hlaç'har diremed,
Dre zaelou eur gwir binijenn
Deskit gwelc'hi ho pec'hed.

*
* *

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit enori tremenvan
Jezuz, hon Aotrou ken mat en deus c'houezet dour ha gwad,
e-barz ar Jardin Olived, gant pouez ha grevusted pec'hejou
ar bed.

Me hoc'h asped, o va Jêzuz, dre an daelou hag ar gwad
hoc'h eus skuilhet e-barz liorz Jetzemani ha dre an holl bo-
niou hoc'h eus gouzañvet a-raok mervel, da rei ar c'hras
da neb a zo war e dremenvan da guitaat ar bed-mañ war-
lerc'h eur maro mat ha santel, ha da ene an hini tremenet-
mañ da vont bremañ d'an eürusted n'he do fin ebet.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
* *

Klevit, kristenien gwirion,
Ar c'hoant birvidik 'm eus
Ho pe holl devoñsion
D'ar seiz kleze a geuz.
Treuzet ' deus kalon glouar
Mari, ar Werc'hez sakr,
Pa voe heget, dre gounnar,
He mab gant poaniou hakr.

Rak-se livirit bemdez
Seiz Pater hag Ave
Da enori ar Werc'hez
Evit he seiz kleze,
Hag hep mar ho tigollo
'Vit ho feiz, ho pedenn,
Hag e teuy, war ho maro,
Ouz Satan d'ho tifenn.

Gant ar memes seiz Pater
E c'hellit enori
He mab karet, Hor Salver,
Ivez e bemp gouli.
Bemdez mar o salutit,
Kalz merit ho pezo,
Rak-se 'ta, mar am c'hredit,
'N em erbedit outo.

Ha setu frêz bremañ doare
Ar pemp gouli, ar seiz kleze.
Bezit aketus d'he laret
Gant feiz, pa ho po he desket:

Kenta gouli Hor Salver a zo en e zorn dehou, ha kenta
kleze a geuz ar Werc'hez Glorius Vari a voe, pa glevas gant
sant Simeon e vije bourreviet he mab Jezuz.

Pebez kalonad varvel
A ro d'in Simeon;
E gomz, evel eur gontell,
A ya dre va c'hàlon,
Rak va mab ker, emezañ,
Hon Doue, hon Aotrou,
A dle gouzanv er bed-mañ
Disprizañs ha poaniou.

Dre verit ho kenta kleze, Gwerc'hez Vari, Mamm druezus,
ho pet truez ouzomp, bremañ ha pa rankimp mervel, hag
ouz ene an hini tremenet-mañ, evit ma 'z ay kerkent d'ar
repoz a bado da-viken.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Eil gouli Hor Salver a zo en e zorn kleiz, hag eil kleze
a geuz ar Werc'hez Glorius Vari a voe pa rankas tec'het
gant he Mab d'an Ejipt, rak Herodez a oa ouz e glask evit
e laza.

Allas! pebez melkoni
D'in-me rankout tec'het
D'an Ejipt, da repui
Va mabig benniget.
Me 'm eus aon ha nec'hamant
'Vefen, siouaz! tapet;
Kredi 'ran 'mañ an tirant
'Tont d'am heul bep kammed.

Dre verit hoc'h eil kleze, Gwerc'hez Vari, mamm druezus,
ho pet truez ouzomp, bremañ ha pa rankimp mervel, hag ouz
ene an hini tremenet-mañ, evit ma 'z ay kerkent d'ar c'hloar
a bado da-viken.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Trede gouli Hor Salver a zo en e droad dehou, ha trede
kleze a geuz ar Werc'hez Glorius Vari a voe pa ziankas he
Mab diganti ha pa chomas en Templ da ziviz ouz an dokto-
red.

Hemañ a zo eur glac'har.
Em ene 'm eus santet,
Pa 'z eo va mab, hep arvar,
Diganin dianket.
Allas! ma ve c'hoarvezet
Eun droug bennak gantañ!
N'oufen debri na kousket
Hep e glask da gantañ.

Dre verit ho trede kleze, Gwerc'hez Vari, mamm druezus,
ho pet truez ouzomp, bremañ ha pa rankimp mervel, hag
ouz ene an hini tremenet-mañ, evit ma 'z ay kerkent d'an
eürusted a bado da-viken.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Pevare gouli Hor Salver a zo en e droad kleiz, ha pevare
kleze a geuz ar Werc'hez Glorius Vari a voe, pa zigouezas
gant he Mab Jezuz o tougen e groaz da Venez Kalvar.

Siouaz! mabig truezus,
Sammet mantrus oc'h bet
Gant eur gwall bost-kroug mezus
'Vit pec'hejou ar bed.
Perak n'eo ket permetet
D'in-me dougen ho kroaz?
'Vit ma vefec'h divec'hiet,
Her grafen gant mall bras.

Dre verit ho pevare kleze, Gwerc'hez Vari, mamm drue-
zus, ho pet truez ouzomp, bremañ ha pa rankimp mervel,
hag ouz ene an hini tremenet-mañ, evit ma 'z ay kerkent
d'an eürusted a bado da-viken.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Pempvet gouli Hor Salver a zo en e gostez sakr, a voe
toullet gant eur goaf dirennet kalet ha lemm, ha pempvet
kleze a geuz ar Werc'hez Glorius Vari a voe, pa welas staga
he Mab ker ouz ar groaz ha pa varvas outi dirazi, leun a
c'houliou.

Allas! me 'sant an taoliou,
War 'n tachou pa loper,
Hag a resev Hon Aotrou,
Ouz ar groaz p'her stager.
P'her gwelan o tiwada,
War beg Menez Kalvar,
'Kinnig va c'halon ranna
Gant ar mantr, ar glac'har.

O va Mab karantezus,
Mervel a rit brema!
Penaos hepdoc'h, va Jezuz,
E c'hellin-me beva?
Siouaz! perak ne doun-me
'Veldoc'h er groaz staget
Da vervel ganeoc'h ive,
Va Salver benniget?

Dre verit ho pempvet kleze, Gwerc'hez Vari, mamm druezus, ho pet truez ouzomp, bremañ ha pa rankimp mervel, hag ouz ene an hini tremenet-mañ, evit ma 'z ay kerkent, e-pad an holl amzer, da gemeret perz e gloar Doue.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

C'houec'hvet kleze a geuz ar Werc'hez Glorius Vari a voe, pa ziskennjod d'ezhi korf he Mab ker eus ar groaz war he barlenn.

Va c'halon ken kizidik
A vank! Mui ne c'hellan,
O korf sakr va Mab unik,
Maro mik p' ho kwelan.
Aze 'maoc'h war va barlenn
Hag e red va daelou
Da derri bec'h va anken,
Da welc'hi ho kouliou.

Dre verit ho c'houec'hvet kleze, Gwerc'hez Vari, mamm druezus, ho pet truez ouzomp, bremañ ha pa rankimp mervel, hag ouz ene an hini tremenet-mañ, evit ma vo kaset gant an Elez e-kreiz ar joausted hag ar meuleudiou a bado da-viken.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Seizvet kleze a geuz ar Werc'hez Glorius Vari a voe, pa lakajod korf sakr he mab ker e-barz ar bez.

P'edod o vont d'ho pezia,
Ar gwel, va mab gwirion,
Eus ho korf ar santela
A rannas va c'halon.
Hepdoc'h petra 'rin bremañ,
Va-unan war ar bed?
Mont d'ho heul 'barz ar bez-mañ
'Vefe dous d'in meurbet.

Dre verit ho seizvet kleze, Gwerc'hez Vari, mamm druezus, ho pet truez ouzomp, bremañ ha pa rankimp mervel,

hag ouz ene an hini tremenet-mañ, evit ma vo kurunet dioustu e-barz palez ar Sent hag an Elez.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit ma tistroy ar bec'herien ouz Doue ha ma kendalc'ho ar gristenien vat d'e enori ha d'e servija, hag eun *De profundis* evit kement hini eo bet douget e gorf eus an iliz da vered ar barrez, gant aon e vefe bet dalc'het unan bennak eus eneoù an dud paour-se e-barz ar purgator.

Me ho ped hag hoc'h asped, va Doue, da rei d'ezo ha da ene an hini tremenet-mañ an diskiuz a bado da-virviken hag ar gwel eus sklerijenn peurbadus ho kloar. Diouz porz an ifern, plijet ganeoc'h, va Doue, o miret ha kement hini a vo kaset e gorf da ziskuiza d'an douar santel, betek an devez spontan ma teuy an neñv hag an douar da grena ouz ho kwelet o tont da varn ar bed ha da rei da bep-hini ac'hanomp e setañs diyeza.

Plijet ganeoc'h, va Doue, e vimp holl, en devez spourous-se, renket en ho kompagnunez en tu dehou d'eoc'h, e-touez ar Sent, evit ma c'hellimp ho meuli e-barz ho palez dudies.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...
De profundis...

Ret eo mervel! Eun dra eo hag a c'hoarvezo ganeoc'h a-barz nemeur. An den a zo hirio war an douar, hag antro-
noz n'her gweler mui. Ha pa vez aet a-zirak hon daoulagad, e kollomp buan an eñvor hag ar soñj anezañ.

O dallentez! Kalon an den ne sonj nemet e traou an amzer-vremañ, hep soursial eus ar pez a dle erruout gantañ.

Pa 'z it da gofes, e tlefec'h ober evel pa vefe ret d'eoc'h mervel en deiz-se; ma vefe ho koustiañs gwenn ha nêt, n'ho pefe ket lec'h da gaout aon rak ar maro. Gwelloc'h eo lakaat evez d'en em ziwall ouz ar pec'hed eget ouz ar maro.

Ma n'emaoc'h ket hirio e stad vat da vervel, daoust hag e vezoc'h e gwelloc'h stad warc'hoaz? War var emaoch diwar-benn warc'hoaz, ha penaos e c'hellit-hu gouzout e weloc'h an deiz-se?

Petra a dalv d'eomp beva pell amzer war an douar, ma n'hellomp ket terri hor plegou fall? Allas! ne ra alies eur vuhez hir nemet kreski niver hor pec'hejou e-lec'h e viha-naat. Mar deo eur gwall dra mervel, ez eo marteze gwasoc'h c'hoaz beva pell amzer.

Eürus neb a sonj bepred en e eur ziweza hag a ra e bour-chas bemdez da vervel. M'hoc'h eus gwelet unan bennak o kuitaat ar bed-mañ, soñjit e reoc'h ivez ar memes hent. Lakait mat en ho spered, bep mintin, na weloc'h ket an noz marteze, ha, pa vo deuet an noz, na vezit ket re asur da veza beo antronoz vintin.

Bezit eta prest atao ha bevit e doare na c'helloc'h ket beza sourprenet gant ar maro, rak mab Doue a zo eur barner eeun ha galloudus, daoust ma 'z eo leun a basianted. N'her gwelloc'h ket bemdez o tiskouez e vuaneged, daoust pegement bennak hen dismegañser, ha koulskoude, ma ne cheñchit ket buhez, e tenno, a-greiz-holl, e glezê warnoc'h. Stignet eo gantañ gwareg e justis ha prest eo da ziskarga e veñjañs war ho penn; prientet en deus birou e dêrijenn da rei d'eoc'h eur maro trumm hag a vo d'e heul eun tan grizias d'ho leski. Met ar pec'her paour ne soñj ket en dra-se; n'en deus soursi nemet d'ober fallagriez hag, evel-se, eo leun e spered a zoan hag a enkrez, hag emañ bepred e poan.

O va Doue! grit d'in anaout pegen bihan eo an douar ha pegen bras an neñv, pegen berr eo ar vuhez-mañ ha pegeit eo an amzer a bado da-viken; grit m'en em brestin ervat da vervel, ma n'em bo lec'h ebet da gaout aon rak ho parnedigez ha ma 'z in war-eeun d'ar baradoz, dre veritou ho mab unik, an Aotrou Jezuz-Krist.

[**]

Eur Bater hag eun Ave Maria evit pedi **Mab unik an Tad Eternel** en deus kempennet evidomp hent ar silvidigez dre e vuhez, e varo, hag o sevel, leun a c'hloar, eus a varo da veo.

Me a erbed ouzoc'h, va Doue, hag hoc'h asped da zigemet etre divrec'h ar Re Salvat ene an hini tremenet-mañ hoc'h eus bet ar vadelez da ziskenn evitañ war an douar.

Anzavit, va Aotrou, ho krouadur; hemañ n'eo ket bet krouet gant Doueou estren, met ganeoc'h hoc'h-unan hepken, c'houi hag a zo ar gwir Doue beo, rak n'eus nikun all ebet hag a c'hellfe ober ar pezh a rit. Plijet ganeoc'h eta, hor gwir Aotrou, karga dirazoc'h ene an hini tremenet-mañ a levez, evit ma 'z ay bremañ d'ho kwelet war ho tron a c'hloar, ma paro e zaoulagad warnoc'h ha ma c'hello hoc'h adori da-viken gant an holl Sperejou Eürus.

Hon Tad hag a zo en Neñv...

Me ho salud, Mari...

*
**

Penaos oc'h ken dall ha ken diskiant da glask zoken pellaat ho spered diouz ar maro, p'hoc'h eus kement a ezomm da brederia warnañ? Sonjit ervat, hiviziken, petra eo ar maro: bez' ez eo eun disparti krenn diouz kement tra a zo er bed-mañ. Pa vezoc'h en em gavet er mare trist-se, ne vo mui evidoc'h na pinvidigez, nag enor, na plijadur, na kerent, na mignoned! Kenavo da-viken eta da vadou an douar en eur ziweza-se! Kenavo da-viken da gompagnuneziou kaer ar bed; kenavo da-viken, pried ha bugale! Netra ne c'hello lakaat eun harz d'ar maro; ho strinka a ray d'an eternite hep gortoz na selaou netra. Ha p' ho pefe en ho kerz kement mad a zo er bed-mañ, ne day ket eun distera anezo d'ho heul betek ho pezh. Ne ziskennno ganeoc'h e-barz nemet hoc'h arched hag al lianou a vo gwriet en-dro d'eoc'h.

Evit lakaat ar soñj eus ar maro da diza muioc'h ho kalon, na brederiit ket war maro ho nesa, met war ho hini hoc'h-unan. Gwelit e pe stad e vezoc'h neuze: gourvezet war ho kwele ha gwasket gant ho poan, hep gellout finval hoc'h-

unan hag hogozik hep anaoudegez, ar beleg en ho kichen, ar grusifi en ho torn evit en em bourchas d'ober an treiz diweza-se...

C'houi a vo neuze en ho spered menozioù all disheñvel-bras diouz ar re hoc'h eus bremañ. E-lec'h an hast-se hoc'h eus evit ar blijadur ha madou an douar, n'ho po nemet dispriz evito; keuz ho po d'an holl amzer ho po kollet hag ho po bet digant Doue evit ober ho silvidigez; kasaat a reoc'h ho puhez tremenet, ha marteze, siouaz! e vo re ziwezhat.

O veza n' oc'h ket deuet c'hoaz war an oad, e kred d'eoc'h hoc'h eus pell amzer da veva. Met allas! ha ne welit-hu ket kalz re-all en oad d'eoc'h, marteze e-touez ho kerent hag ho mignoned, tud eus ar memes stad ha micher ganeoc'h, hag a zo bremañ e-kreiz kalon an douar, e-touez ar re varo, petra bennak ma oant kën kreñv ha ken nerzus ha c'houi, endra m'edont er bed-mañ? Ha n' o c'hlevit-hu ket o lavaret d'eoc'h eus goueled o beziou: « Ho pet eñvor hon eus-ni bet hor setañs hag e resevoc'h ho hini ivez a-barz nemeur. Dec'h e oa hon tro hag ho hini a vo hirio pe warc'hoaz. Pa vezoc'h en nebeuta soñj, e vo merket glaz d'eoc'h gant kloc'h trist an Ankou! »

Arabat d'eoc'h fiziout eta war hoc'h oad na war ho nerz; ar maro n'en deus-doujañs ebet ouz an eil n'egile. Tostaat a ra ouzoc'h an disparti a vo graet etre ho korf hag hoc'h ene, hag an eur ma 'z eoc'h en eur vuhez-all, e-lec'h ma kavoc'h d'ho tigememet barnedigez kalet Doue. Bez ' ho po dirazoc'h ar gwel eus an eternite hag eus traou ar bed-all d'hoc'h enkrezi, d'ho kwana, d'ho mantra ha d'ho strinka en dizesper.

Ne vern war be du e trooc'h ho taoulagad, n'ho po lec'h nemet da veza spontet ha trubuilhet. Pa selloc'h etrezek an Neñv, e weloc'h Doue têtet ouzoc'h ha prest da ziskarga e veñjañs war ho penn. Pa zenoc'h, gant spont, da zistrei ho sellou diouz an Neñv ha d'o izelaat war-du an douar, gwel euzus ar bez hag an ifern en em ginnigo-dirak ho spered, ken-gwir ha m'emaoc'h etre ar baradoz hag an ifern ha m'eo digor an eil hag egile evit ho reseo, hervez an dibab ho po graet. Rak er stad m'en em gavoc'h enni er predig

diweza eus ho puhez, e-chomoc'h e-pad an eternite. Ma tigouez d'eoc'h beza eñrus a-walc'h d'en em gavout e stad a c'hras, e vezoc'h salvet hep mar ebet, met m'en em gavit er c'hontrol kablus eus eur pec'hed marvel hepken, hag e vefec'h betek neuze ar brasa sant a vije bet biskoaz war an douar, e vezoc'h kollet hep truez ebet evit an eternite.

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit an neb a zo e stad a bec'hed marvel hag a zo prest da vervel pe a varvo ac'hann da fin ar bloaz, hag eun *De profundis* evit ene an hini tremenet-mañ hag evit e holl gerent aet d'ar bed all, ma vint diboaniet eus tan hag ankeniou ar purgator da vont gant Doue, ar Sent hag an Elez da borz lùgernus an Neñvou, e-kreiz ar c'hloar hag ar joaiou.

Pedomp Mari, mamm dous ha trugarezus, evit ma vint resevet gant he mab Jezuz ha digemeret e-kreiz ar meuleudiou, goude beza bet digant Doue ar pardon eus o fec'hejou.

Hon Tad hag a zo en Neñv...


Me ho salud, Mari...

De profundis...

Deomp d'ar garnel, kristenien, gwelomp ar relegou Eus hor breudeur, c'hoarezed, hon tadou, hor mammou, Demeus hon amezeien, hor brasa mignoned; Gwelomp ar stad reuzeudik e-lec'h ma 'z int rentet.

O gwelet a rit aze torret ha bruzunet
Ha memes an darn vrasa a zo e poultr kouezet;
Ne weler mui o noblañs, o danvez, o gened:
Ar maro hag an douar o deus o distrujet.

Ar paour hag ar pinvidik, ar mestr hag ar mevel,
Holl int disheñvelebet, holl int lakaet heñvel.
N' ez eus mui nemet eskern, poultr ha breinadurez
O teurel en hon ene damant bras ha truez.



... A-hed ho puhez penn-da-benn, met dreist-holl da eur ho maro, lakait ho torn e dorn ho Salver. Eno emañ an eürusted hag ar silvidigez evidoc'h !

Met daoust d'ar stad truezus ma 'z int enni lakêt,
En eur yez vut e komzont, hag helavar-meurbet,
Ouz pep-hini ac'hanomp, mar karomp profita,
Keit ma plijo gant Doue hol lezel er bed-ma.

Klevit eta o c'hentel ha taolit evez mat;
Talyoudus 'vo evidoc'h, m' he selaouit ervat.
Lavaret a raint d'eoc'h-c'houi ez int bet er bed-ma
Hag e varvoc'h evelto, pa soñjoc'h 'n nebeuta.

Koulz ha c'houi, war an douar, ez omp bet o veva,
O tiviz hag o vale, o tebri, oc'h eva,
Ha setu amañ bremañ ar stad ma 'z omp rentet,
Goude m'omp bet er vered o vezur ar preñved.

Me 'oa eun den a galon ha me eun denjentil,
Me 'oa eun den pinvidik ha me eun den abil;
Me 'm eus kollet va noblañs ha me va holl zanvez,
Me va neuз ha va gened ha va gouiziegez.

N'hon eus kavet er bed-mañ 'met hon oberou mat.
Da ginnig d'ar Pennvarner, hon Doue hag hon Tad.
List eta madou 'n douar, kasait ar gwall-siou
Ha kaerait hoc'h eneoù gant pep seurt vertuziou.

'Pelec'h 'mañ, a c'houlennit, hon eneoù 'n enkre ?
O c'houlenn ho pedennou, da vont raktal er-mêz
Eus ar prizoniou teñval e-lec'h ma 'z int taolet.
Hastit, hastit d'o sikour, ma vezint diboaniet !

Ouzoc'h en em erbedomp, kerent ha mignoned;
Ho pezet sonj ac'hanomp, pa 'z eoc'h dre ar vered.
Livirit en eür dremen : Doue da bardono
D'an anaon er purgator, o bro a zo eno !

An aluzen, ar bedenn graet gant devosion,
Ar yun pe eun oferenn, pe ar gomunion,
A c'hell kalz hon divec'hia ha berraat hor poaniou,
Ha, prim 'n eun taol, hon tenna eus goueled ar flammou.

C'houi, beleien hegarat hag hoc'h eus hor bleniet,
Dre hent ar silvidigez, er bed p' hon eus bevet,
Kendale'hit c'hoaz, eun nebeud, da rei d'eomp ho skoazell;
Evidomp, dre drugarez, grit oberou santel.

Dreist-holl pa oferennit ouz an aoter bemdez,
Klevit hor c'hri glac'haret, hor garm leun a enkrez
O tont eus deon ar flammou da c'houlenn diganeoc'h
Ma plijo gant hon Aotrou rei d'eomp pelloc'h ar peoc'h.

Ha p' hor bo echu paea ar boan dlêt d'hor pec'hed,
Hor bo ' vidoc'h ho koulenn, hep mar, gant an Dreinded.
Pedit, ha ni 'ray ivez; en em sikouromp holl;
Hounnez a vo an doare na day nikun da goll.

Evel an dour o vouga an tan-gwall elumet,
An tan ' zo er purgator a vo ivez mouget
Dre ar sakrifiis santel, lidet war an aoter,
Da c'houlenn hon dilivrañs digant hor gwir Salver.

Pa ziskoach an heol skedus a-zindan ar goabrenn,
Ar bed holl e berr-amzer 'vez leun a sklerijenn;
Ac'hann ez aimp-ni ivez, sklêr evel ar stered;
Dre vertuz an oferenn eus ar boan 'vimp tennet.

Kenavo, tadou, mammou, breudeur ha c'hoarezed,
Kenavo d'eoc'h c'houi, kerent hag ivez mignonned;
Ober a reomp d'eoc'h bremañ hon diweza kimiad;
Kenavo, a lavaromp, e traonienn Jozafad.

Va Doue, va Dasprener, roit ar peoc'h eternal
D'ar re ' zo er purgator, d'an eneoù fidel,
'Vit ma 'z aint d'ar baradoz d'ho meuli da jamez
War eun dro gant an holl Sent ha gant an holl Elez.

Piou ac'hanomp, va Doue, n'en deus ket dioueret
E dad, e vamm, e bried, bugale, mignonned?
Deomp eta war o beziou ha pedomp a galon
Gant fiziañs ha gant douster, 'vel kristenien gwirion.

Daoulinomp 'tal o c'horfou, ha kredomp hep arvar
Ez aint holl d'ar baradoz, pa vo fin d'o glac'har,
Ha lavaromp evito hag hemañ tremenet
Eur-bedenn garantezus en enor d'an Dreinded.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...
De profundis...

Kemer kalon, o va ene; da stad divarvel a zo bet roet
d'it gant Doue, hag eur vuhez eürus, heñvel ouz hini da
Aotrou, a zo ouz da c'hortoz e-barz an Neñv. Gounezet eo
bet d'it gant Jezuz-Krist dre e labouriou hag en eur c'houezi
gwad, ha deuet eo da Salver d'az kervel evit mont gantañ
da gemeret perz en e c'hloar.

Pe venoz a fell d'it ober? Perak out ken techet gant traou
ar bed? Pebez eurvad evidout, peogwir e c'helli en em gavout
eun deiz e gloar Doue!

Nann, nann, va ene paour, n'eo ket ar bed-mañ eo da
vro. Diwall ouz ar garantez direiz e-keñver traou an douar,
rak n'int ket gouest da rei d'it ar gwir levenez. Sell etrezek
an oabl hag ar stered; sell ouz an Neñv: eno emañ ti Doue!
Hennez eo da vro, hennez eo al lec'h a zo bet graet da rei
bod d'an eneoù santel ha d'ar sperejou eürus; hennez eo ar
palez bet savet gant an Aotrou Doue evidout hag a zo bet
gounezet d'it gant Jezuz-Krist.

O! pedavare e teuy an devez eürus-se ma 'z ay va c'horf
e-barz ar c'hloar a-unan gant va ene? Neuze ne vo mui va
c'horf nemet eun tamm douar hepken; ne vo mui ken bresk,
ken lor, ken pounner ha ma 'z eo breman; ne vo mui sujet
d'ar pec'hejou. Met padout a ray keit hag an holl amzer,
ha morse ne c'hello beza mac'hagnet. Bez 'e vo, e berr gom-
zou, ken skedus hag an heol zoken.

C'houi, eneoù fidel, kemerit an hent ho kaso war-du an
Neñv; rankout a reoc'h sevel ho kalon a-us d'an enkrez ha
d'an holl boaniou a gaver er vuhez-mañ. Diwallit da veza
trec'het gant an droukspered o klask ho touella pe ouz ho

heskina, rak gouest e vefe d'ho lakaat da goll ar gurunenn lugernus a zo ouz ho kortoz er baradoz.

O va ene paour, greomp eta e-barz ar bed-mañ an holl vad a c'hellimp, ar pezh a garfemp beza graet e-pad hor buhez, pa vo deuet pred ar maro. Met na glaskomp ket beza digollet er bed-mañ; gortozomp hag esperomp c'hoaz eur pae kaeroc'h e rouantelezh Doue. Taolomp evez n'eo ar vuhez-mañ nemet eul lec'h a harlu pe eur prizon, hag eun draonienn a zaelou, a skuizder, a boan hag a c'hlaç'har, hag e vo an eternite eürus hir a-walc'h evidomp da ziskuiza, da zifêza ha d'en em frealzi e kompagnunez kaer ar Sent hag an Elez.

*
**

Eur Bater hag eun *Ave Maria* en enor da santez Tereza, da santez Juliana ha da santez Marc'harid.

Pedomp an teir gwerc'hez santel-se, ma plijo ganto unani o fedennou gant hor re da c'houlenn digant an Aotrou Krist ar c'hras da ene an hini tremenet-mañ da reseo bremañ eur gurunenn gaer er baradoz, evel eun digoll dleet d'ezañ e-pad an holl amzer.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

C'houi a zo en Neñv, o va Doue, ha me a zo war an douar; c'houi a zo en eul lec'h a beoc'h, ha me a zo e-kreiz ar brezel; c'houi a zo en Neñv evit rei d'in an donezon kaera a voe biskoaz, ha me a zo war an douar evit ho servija.

Hogen, siouaz! n'em eus ket klasket c'hoaz hen ober. Met daoust pegen fallakr ha pegen dizanaoudek bennak oun en ho keñver, o va Doue, ec'h esperan koulskoude, digant ho trugarez, am resevoc'h en ho paradoz, hag e tiazezan va fiziañs war meritou ho mab Jezuz ha war ar gwad en deus skuilhet evidomp. Allas! pedavare e teuy an deiz-se ken c'hoantaet ganin, ar c'haera hag an eürusa eus va holl zeveziou?

O va Doue, nag e tisplij d'in an douar, pa sellan ouz an Neñv! O baradoz, petra ne dieer ket ober evit da c'hounite! Ar pezh a c'houzañvan, n'eo netra e-skoaz an eurvad emañ e soñj kaout. Eürus eo, va Doue, ar re a zo o chom ganeoc'h en ho ti; hoc'h enori hag ho meuli a rin eno e-pad an holl amzer.

*
**

Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit ma vo digemeret ene an hini tremenet-man gant an Aotrou Doue, e grouer, en deus furmet e gorf gant fank eus an douar.

Ra zeuy eta eur strollad gloriüs a Eled d'e reseo; ra vo an daouzek abostol santel ouz e c'hortoz; ra zeuy d'e ziam-broug arme trec'h ar verzerien; r' en em gavo en-dro d'ezañ kompagnunez kaer ar gofesored, fichet ha kaeraet gant bleuñv lili ha kurunet a c'hloar; ra ziredo etrezek ennañ niver bras ar gwerc'hez d'hen digemeret gant o c'hantikou a levenez; ha ra vo briatet kalonek gant ar batriarched ha douget ganto gant evez e-barz ar repozvan eürus.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Selaouit holl, kristenien, klevit, bihan ha bras, Eun ali a-berz Jezuz, eur c'huzul a bouez bras: Erru ar varn diweza hag an eternite, Souden e vo goulennet kont digant hoc'h ene.

Bezit prest ha lakait urz 'n ho traou 'vit ar gwella, Gant aon ' vefec'h sourprenet, pa soñjec'h 'n nebeuta: Lec'h ober ho testamant, grit ho kofesion Gant glac'har en ho kalon ha gant eur c'heuz gwirion.

N'eus nikun war an douar a c'hellfe lavaret Pe c'hlaç'har a zirollo war ar bed spouronet, Pa rankimp guitibunan mervel ha kimiada Ha mont da veza barnet da draonienn Jozafa.

En hon touez e teuy neuze 'n Antekrist milliget,
Hag e-pad tri bloaz hanter 'raok ar varn 'vo gwelet.
Gant an ifern kounnaret d'eomp e vo digaset:
Gwalleur da neb her c'hredo, rak, hep mar, 'vo kollet.

Dre c'halloud an droukspered e pep lec'h 'vo douget
Da brezeg eur fals-lezenn gant Doue kondaonet.
Met dont a ray daou brofêd a-berz Salver ar bed,
Ha neb a sento outo, a vo sur saveteet.

Gwall-iskis e vo neuze sellet ouz ar mor glas,
Rak sevel a ray spontus dreist ar menezioù bras;
Al loened mut er c'hoajou ken euzus a yudo
Ma vo kerkent strafuilhet an holl dud o c'hlevo.

Ar bobl, gant aon, a welo an douar o krena
Ha, gant nec'h, ar menezioù o tont d'en em ranna;
Ar c'hêrioù, ar c'hastelloù 'vo ivez diskaret,
Hag ar c'herreg a frailho hag a gouezo brevet.

Er-mêz e teuo neuze an dud a vo kuzet
E toullou doun an douar, gant spont ennô tec'het.
'N em geja 'raint etrezo, hep komz, gant nec'hamant,
'Vel pa vefent simudet pe kollet ho skiant.

An heol, iskis da welet, gollo e sklerijenn;
Al loar, 'vel er gwad beuzet, 'vo en deñvalijenn,
Ha, diouz an oabl, ar stered a bep tu a gohezo;
Dre bevar c'horn ar bed-mañ, ar gurun a strako.

Ar bobl a vo reuzeudik 'n he flanedenn galet;
Ne ouezo 'pelec'h tec'het hag holl e vo devet.
Piou a c'hellfe displega pegement a c'hlac'har
'Vo gwelet neuze, siouaz! dre-holl war an douar?

An holl dud 'ranko mervel ha prest resusita
Da veza bodet neuze e traonienn Jozafa
Lec'h ma teuy, gant eun drompilh, El Doue da c'hervel
Ha da lakât ar c'horfou eus o bez da sevel.

Eus ar purgator memes e teuy an eneoù,
Hag ivez eus an ifern, da gavout o c'horfou.
Hennez a vo eur glac'har da eur c'horf milliget,
Pa glevo gant an ene penaos e vo daonet!

Rebechou treñk ha c'houero 'vo 'trezo da-viken
Abalamour d'o gwalleur ha, siouaz! d'o anken.
« Deus ganin, korf reuzeudik », 'me ar ene daonet,
« Te 'zo kiriek d'am gwalleur dre da vuhez kollet!

« Deus da glevet da setañs ha, ganin unanet,
« Eno 'ouezi, hep arvar, out koulz ha me daonet! »
Met an ene evurus a zeuy, gant joausted,
Da gemenn d'e gorf santel e vo asur salvet.

Hounnez 'vo eul levenez, eul laouenidigez,
Da veza ar pemp skiant kastizet hep truez:
« Deuit ganin, korf benniget, da veuli an Dreinded;
« Dre drugarez evidoc'h he deus d'eoc'h pardonet.

« Deuit da glevet ar Barner e varn o tistaga
« Ha d'ar c'hloar ez aimp goude, d'an eürusted vrasa.
« Selaouit an trompilh o tregerni skiltrus,
« O c'hervel ar re santel koulz hag ar re gablus.

« Gant an El ez oc'h galvet d'ar varn striz ha garo
« A roy da zarn ar vuhez, da zarn all ar maro;
« An amzer a drugarez 'zo, siouaz! tremenet
« Hag hini justis Doue 'zo bremañ erruet. »

Den ebet d'alvokadi; n'ho po den d'ho tifenn!
E-lec'h ma kouez ar wezenn e rank chom da-viken.
Setu erru hor Barner en e c'hloar ken skedus,
Ha d'an douar e tiskenn war eur goabrenn lintrus.

E fas 'zo ken lugernus, kaer ha leun a veurdez,
Ma kren zoken dirazan ar Sent hag an Elez.
Setu erru ar Werc'hez, mamm dener ha karet,
Hag an daouzek abostol, ar Sent, ar Sentezed.

Deuet int holl da-heul Jezuz, en eur gompagnunez,
Evit barn ar bec'herien; aze ' maint asambles.
Ha bremaik 'vo digoret leor ar c'houstiañsou
E-lec'h ma kavor skrivet niver hor pec'hejou.

« Ar re fall, 'laro Satan, a vo d'in hep arvar! »
Hag ar Werc'hez, truezus, a chomo dilavar,
Ha justis he Mab-Doue kement tra a varno
Hervez e lezenn santel ken eeun ha ken garo.

Setu ar Barner leal o laret ar setañs:
« C'houi, eneou evurus, ho pet ennoun fiziañs;
« Deuit, c'houi holl a zo karet gant va Zad eternal,
« Da gemeret eul lodenn eus ar c'hloar divarvel. »

Hounnez 'vo eul levenez mont da veuli Doue
'Ser ar Sent hag an Elez, 'pad an eternite!
Goude 'sello ar Barner 'trezek ar Re Zaonet,
Ken buanek ma vezint a dra-sur strafuilhet:

« It bremañ, tud milliget, d'an tan gant an diaoulou
« Prim da leski en ifern 'kreiz ar gwasas flammou. »
Eur gorventenn entanet, neuze, o dastumo,
Hag an ifern d'o lonka dindano ' zigoro.

Kement-se vo eun hirvoud, eur c'hri hag eun anken,
Eur gounnar, eun dizesper a bado da-viken,
Eur blanedenn a estlamm, a drubuilh, a spouron,
Hag a vec'hio pep ene hag ivez pep kalon.

D'an Neñv ez ay Hor Salver gant e vamm venniget,
Gant an Ebestel santel, ar Sent, ar Sentezed,
Heuliet gant ar Re Salvat hag an Elez skedus
O kana mil menleudi d'an Dreinded galloudus.

Ma fell d'eoc'h en em gavout en tu dehou d'Hor Salver,
Heuilhit mat ar vertuziou keit ha m'hoc'h eus amzer,
Dalc'hit da lezenn Doue, dilezit ar pec'hed,
Hag e prometan d'eoc'h-c'houi 'vezoc'h ivez salvat.

Eur Bater, eun Ave Maria hag eun De profundis evit
an diweza hini a zo aet eus an ti-man, pe eus ar gêr-man,
da anaon, ken kas ma vefe dalc'het e ene e-barz'ar purgator
dre faot beza bet lezirek da lavaret e bedennou diouz ar
mintin ha diouz'an noz, pe abalamour d'eun dra bennak all,
hag a c'hellfe beza marteze o c'hortoz eur bedenn evit beza
diboaniet ha kaout ar gwir da vont d'ar joaiou na vo fin ebet
d'ezò.

Pedomp a-greiz kalon ha gant fizians an Aotrou Krist
penniget hag e Vamm, ar Werc'hez, ma plijo ganto reseñ
gant truez hor pedennou birvidik e-lec'h e re, evit m'en do
ar c'hras d'en em gavout er baradoz dirak Doue ha da ren,
e-touez an Elez santel, eur vuhez eürus ha leun a c'hloar
er rouantelezh dispar-se.

Hon Tad hag a zo en Neñv...

Me ho salud, Mari...

De profundis...

**

Ret e vo d'in mont dirak lez-varn va Salver Jezuz-Krist,
evit beza barnet hervez an droug pe ar vad am bo graet. N'eus
netra suroc'h na gwelloc'h merket er Skritur eget ar wirio-
nez-se. He c'hredi a ran start, e-giz p'he defe sonet an drom-
pilh da zihuna ar re varo.

Perak hor befe gwall-soñjezonou ken alies, e reomp gwall-
oberou ken alies, e tisprizomp gras Doue ken alies? O gwasat
devez a vo deiz buanegez Doue, pa vo diskuilhet betek ar
soñj diweza eus ar galon ha pa vo kontet betek an distera
huanadenn, hep distaol ebet! Gant poan eo e tremeno ar
justa den.

Petra a ray neuze ar pec'her? Peseurt setañs a c'hello
neuze da esperout neb a vo chomet hep ober pinijenn, pa
n'en do mui an Aotrou Doue trugarez ebet evitañ? O gwasat
barnedigez a vo hounnez? « It, tud milliget... »

Met, Aotrou, da belec'h ez aint-i an dud reuzeudik-se?
Hag ar re hoc'h eus taolet warno ho malloz, e pe gorn eus ar

ped en em lakaint-i evit pellaat diouzoc'h? E pe du emañ al lec'h spontus-se?

Beza harluet a-zirak Doue, koeza dindan malloz Doue, o pebez reuz! Prederiit, evel pa vefec'h en em gavet dirak lez-varn Jezuz-Krist, war ar pezh a rafe d'eoc'h ar vrasa mez. Ha sonjit ervat ha taolit evez e vo, da zeiz ar varn, diskleriet ar pec'hejou kuzeta dirak an holl, ma ne vezont ket lamet a-raok eus ho kalon dre sakramant ar Binijenn. Piou a c'hello mont dirak Doue, pa vo têtet? O va Doue, gwaz a-se da neb a ren ar vuhez santela zoken, ma sellit re biz hag hep trugarez ouz e oberou!

*
**

Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit pedi an Aotrou Doue da bardoni d'eomp ar pec'hejou hag an ofansou hon eus graet abaoe ar penn kenta eus hor buhez ha da rei d'eomp ar c'hras, goude hor maro, da vont d'ar baradoz, ha da ene an hini tremenet-mañ d'en em gavout bremañ en eürusted a bado da-viken; hag ouspenn eun *De profundis* evit an holl eneou fidel a zo e-barz ar purgator, ma 'z aint da rouantelezh Doue da veuli an Dreinded e-pad an holl amzer.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...
De profundis...

*
**

Ouzoc'h, Gwerc'hez santel, e kriomp hag en em glemomp, ni bugale an Eva divat-se hag he deus roet d'eomp ar maro a-barz rei d'eomp ar vuhez, ar vaouez-se hag he deus hon taolet er-mêz eus baradoz an douar e-lec'h ma vijemp bet en hor plijadur o veuli Doue, hag he deus hol lakaet er bed reuzeudik-mañ e-lec'h m'emaomp evel tud harluet diouz o bro ha ma 'z omp kondaonet gant justis Doue d'ober pinijenn.

Hogen an Tad-se a drugarez en deus ho tibabet, Gwerc'hez santel, da rapari ar gaou a zo bet graet ouzomp gant ar vaouez kenta.

O'houi a laka salo ar re a zo bet bloñset ganti; c'houi a savete ar re he deus lakaet da vont da goll; c'houi a ra d'ar re n'o deus perz ebet mui e baradoz an douar mont da varadoz Doue! Abalamour da-se e kriomp war-du ennoc'h, hag e huanadomp, hag e ouelomp gant an nec'hamant, en drao-nienn-mañ a zaelou, e-lec'h ma 'z omp sammet gant bec'h hor pec'hejou. Mil boan a stourm ouzomp, pellaet omp diouzoc'h a bep tu, sachet gant hon enebourien, harluet diouz hor bro ger hag atao en dañjer da vont da goll, ma n'hor sikourit ket.

Va Doue, setu digor dija an ifern dindanomp evit hol lonka, setu eur vandenn leoned ha bleizi diaoulek en-dro d'eomp o pourchas dont d'hon drailha. Daoust ma kerzomp war eun hent striz, e skeud ar maro, n'hor bo aon ebet endra ma vezoc'h-c'houi ganeomp, Salver benniget!!

Elez eürus, sperejou eus an Neñv, c'houi hag hoc'h eus kemeret kement a soursi ac'hanomp abaoe m'emaomp war ar bed, kendalc'hit c'hoaz eun nebeud da rei d'eomp ho skoazell.

*
**

Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit pedi sant Mikêl arc'hêl, priñs ha kabiten e-barz armeou an Neñv, ma plijo gantañ dont, gant e arme gloriüs ha trec'h, en arbenn da ene an hini tremenet-mañ ha d'e heul an Elez hag an Arc'hêlez, an Tronou, an Dominasionou hag ar Vertuzioù eus an Neñvou, ar Cherubined hag ar Serafined, ar Batriarched, ar Brofeted ha Doktored santel al Lezenn, an Ebestel, ar Gofesored, ar Gwerc'hezed hag an Ermited ha kement Sant ha Santez a zo er baradoz. Ra blijo ganto holl dont da zigemeret ene an hini tremenet-mañ ha d'e ambroug betek tron Doue, e-kichen Abraham, en tu dehou d'an Tad Eternel.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Jezuz, mab Doue eternal,
C'houi hag a zo en tron uhel,
Me ho ped, klevit hor goulenn
Ha selaouit ouz hor pedenn.

Tad eus an Neñv, hor gwir Doue,
Mab, dasprener ar bed, ive,
Spered-Santel, heñvel oute,
Sellit ouzomp a drugare.

Treinded, Doue e tri ferson
'Vel ma kred pep kristen gwirion,
Bezit truezus 'n hor c'heñver
Ha roit d'eomp ar c'hras d'hor gelver.

C'houi, santez Mari venniget,
Mamm da eil ferson an Dreinded,
Gwerchez dreist an holl werchezed,
Pedit ivez ma vimp salvet.

Sant Mikêl ha sant Gabriel,
Ha c'houi, Aotrou sant Rafael,
Tri arc'hêl kaer ha gloriüs,
Pedit 'vidomp 'n Aotrou Jezuz.

Holl Elez hag holl Arc'hêl
'Zo e rouantelez Doue,
Ha c'houi, holl Sperejou eürus,
Pedit 'vidomp 'n Aotrou Jezuz.

Yann, badezour Mab hon Aotrou,
Galloudus e-barz an Neñvou,
C'houi gant Herodez dibennet,
Pedit 'vidomp hor Mestr karet.

Aotrou sant Per ha sant Andre,
Sant Paol ha sant Jakez ive,
C'houi, ouspenn, sant Berteleme,
Pedit 'vidomp 'n Aotrou Doue.



... Karnel Pleiben.



... Karnel Sant-Servez.

C'houi, Tomaz, Abostol Santel,
Sant Yann, skriver an Aviel
Filip ha Jakez ar bihan,
Pedit evidomp hep ehan.

Sant Tade ha sant Matiaz
Ha c'houi ivez, sant Barnabaz,
Maze, Mark, avielerien,
Pedit evidomp, pec'herien.

Ha c'houi, Diskibien Mab Doue,
Inosanted santel ive,
Pa 'z oc'h lakaet gantañ eürus,
Pedit 'vidomp 'n Aotrou Jezuz.

Pedomp ha pedomp hep ehan
Sant Visant ha c'hoaz sant Stefan,
Sant Laorans, merzer glorius,
Ma vo 'r C'hrist ouzomp truezus.

Teurvezit, sant Sebastian,
Ha c'houi, Aotrou sant Fabian,
Sant Yann, sant Paol, sant Damian,
Pedi 'vidomp gwitibunan.

Sant Servez, c'houi ivez sant Kom,
Sant Padrik ouz Doue ken tomm,
P'emaoc'h ho tri en Neñv eürus,
Pedit 'vidomp 'n Aotrou Jezuz.

C'houi holl hag hoc'h eus gouzañvet
Ha bet 'vit ar feiz merzeriet
C'houi hag hoc'h eus stourmet ken kreñv,
Pedit Doue d'hor c'has d'an Neñv.

Sant Jilvestr, sant Gregor, pabed,
Ambroaz, Aogustin, preladed,
Ivez sant Jerom benniget,
Pedit evidomp an Dreinded.

Sant Norbert ha c'houi sant Marzin,
Sant Samzon ha sant Kaourintin,
Sant Nikolaz, eskob santel,
Grit hor peoc'h ouz an Eternel.

Aotrou sant Riom benniget,
Sant Tugdual, hor sikouret,
Sant Gwilherm, Brieg ha Malo,
Pedit Doue m' hor pardono.

C'houi eskibien, kofesored
Hag holl Sent gant gloar kurunet,
Pedit Doue d'hor pardoni
Ma c'hellimp eun deiz e veuli.

Ha c'houi holl, Doktored santel,
Mignoned an Tad Eternel,
Pedit ho kwir Vestr benniget
Ma vezimp gantañ pardonet.

Sant Erwan ha sant Houardon,
Sant Benead ha sant Anton,
Bernez, Fransez ha Dominik,
Pedit evidomp birvidik.

C'houi ive, Aotrou sant Maode
Ha Gwenole, mignon Doue,
Ho pezet soñj ac'hanomp holl,
Mirit ouzomp da vont da goll.

C'houi, Beleien hag Ermited
A bep stad ha Relijiuzed,
Pedit neb ho laka skedus
Ma vezimp eun devez eürus.

C'houi, santez Anna glorius,
Mamm ar Werc'hez, mamm goz Jezuz,
Pedit ho Mabig benniget
Ma vo hor faotou pardonet.

O santez Mari-Madalen
Hag a zo, dre ho pinijenn,
Gant ar Sent 'barz an eürusted,
Pedit Doue ma vimp salvet.

Santez Agata, merzerez,
Servijerez Doue, gwerc'hez,
Lusia ha santez Agnez,
Pedit evidomp asambles.

Santez Silia benniget
Ha santez Barba merzeriet,
Ho pet soñj ac'hanomp bepred,
Dreist-holl pa 'z aimp kuit eus ar bed.

Santez Katell 'n Ejipsianez,
C'houi hag a roas ho puhez
'Vit lezenn Doue, Hor Salver,
Grit ma teuy ar C'hrist d'hor golver.

Santez Marc'harid, mignonez
D'Hor Salver Jezuz da jamez,
Dre 'r poaniou hoc'h eus gouzañvet
Grit ma vimp gantañ pardonet.

Anastazi, santez fidel
Da Zoue, hon Tad Eternel,
Grit ma vo dre ho meritou
Pardonet d'eomp hor pec'hejou.

C'houi, holl Sent hag holl Werc'hezed,
Ha c'houi ivez, Intañvezed,
P'emaoc'h gant Hor Salver eürus,
Pedit 'vidomp 'n Aotrou Jezuz.

C'houi, Sent ha Sentezed Doue,
P'emaoc'h en Neñv gant an Ele,
Hon erbedit ouz Hor Salver
Evit ma teuy d'hon digemer.

**

Eur Bater hag eun Ave Maria evit pedi ar Sent hag ar
Sentezed hag an holl Elez benniget da ginnig da Zoue
ene an hini tremenet-man, evit ma 'z ay da ziskuiza d'ar
baradoz e-pad an holl amzer, hag evit ma vo eneoù e holl
gerent aet d'ar bed-all digemeret ivez er joausted.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

**

O veza n'ouzon ket pedavare e varvin, m'am bo an eur-
vad d'en em aoza mat da vervel, ha ma vo gouest va spered
d'am heñcha war-du ar silvidigez, hoc'h aspedan, Gwerc'hez
Sakr, da ginnig d'ho mab ker ar pedennou a ran bremañ,
e-lec'h ar re n'hëllin ket ober marteze em c'hleñved diweza,
ha da c'houlenn d'in ar c'hras da vervel gant douter etre
ho tivrec'h santel.

Evit kement-se, ez an da lavaret d'eoc'h pedenn gaer an
Iliz Santel ar *Salve Regina, mater misericordiae*:

« Me ho salud, Rouanez an Neñv hag an douar, Rouanez
an Elez hag an dud, Rouanez ar re veo hag ar re varb;

Me ho salud, mamm a druez ha mamm a drugarez; c'houi
a zo eur vamm leun a c'hras evit ar re just.

Hogen, bez 'ez oc'h ivez eur vamm a drugarez evit ar
bec'herien, ha dre-se e kredan en em erbedi ouzoc'h, hag em
eus fiziañs e klevoc'h ouz va fedenn.

Ma vijec'h bet eur vamm a justis, e tlejen beza bet aon
razoc'h, met n'em eus nec'h ebet rak eur vamm a drugarez
evel ma 'z oc'h-c'houi.

Roet he deus d'eoc'h an Iliz an ano kaer-se a « vamm
a drugarez », abalamour ma lavar unan eus ho servijerien, e
tigorit braster divent trugarez Doue da neb a blij ganeoc'h,
keit ha ma plij ganeoc'h hag en doare ma plij ganeoc'h, e
feson n'eus pec'her ebet hag a yafe da goll, ma plijfe ganeoc'h
her c'hemeret dindan ho kwarez santel hag implija ho kal-
loud dirak ho mab Jezuz evitañ. »

**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit pedi ar *Werc'hez glorius Vari*, *mamm Hor Salver*, an *Ebëstel*, ar *Verzerien* hag an holl *Sent eürus eus an Nenv*, ma plijo ganto diwall pep-hini ac'hanomp diouz ar pec'hed ha dreist-holl diouz an daonedigez a bado da-viken, ha da lakaat ene an hini treme-net-mañ da gaout ar c'hras da veza renket bremañ e-barz ar baradoz, e-touez ar *Re Choazet*, evit perc'henna ar c'hloar hag an eürusted e-pad an holl amzer.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Sonjit ervat, o va ene, n'ouzoc'h nag an deiz nag an eur ma rankoc'h en em zispartia diouz ho korf. Pedavare e vo ret d'eoc'h e zilezel? En hañv pe er goañv? E kêr pe war ar mêz? War an deiz pe diouz an noz? Dre gleñved pe dre wallzarvoud? Pa vezoc'h en nebeuta soñj pe goude ma vo bet roet d'eoc'h da c'houzout dre eun dra bennak?

Daoust hag ho po amzer da gofes pe n'ho po ket?

Allas! n'ouzomp netra eus a gement-se holl; ar pez a ouzomp hepken eo e teuy, ha kentoc'h eget na gredomp.

Sonjit ervat e vo echu neuze ar bed evidoc'h. Ya! ar bed-mañ ne vo mui netra; dioustu ez ay a-zirak ho taoulagad. Ar plijadureziou, ar fougou, fals-joaiou ar bed, ar c'haranteziou didalvez ha direiz, an darempredou fall a seblañto evel eur skeud pe eur goabrenn o tremen e-biou d'an den reuzeudik ma 'z oc'h, a vo bet ken divenn ha ken fallakr o tismegañsi Doue evit traou ken dister. Neuze e weloc'h hoc'h eus kuitaet Doue evit redek war-lerc'h plijadureziou didalvoud. Avi ho po ouz an devosion hag an oberou mat a seblañto d'eoc'h dous ha frealzus, ha ne gavoc'h ket ho keuz da breña. « Perak, emezoc'h neuze, n'em eus ket heuliet an hent-se ken kaer, ken dudiñs ha ken santel? » Hag ar pec'hedjou o doa doare evidoc'h da veza bihan, a gavoc'h ken bras ha menezioù, hag ho tevosion dister-meurbet.

Soñjit ervat er c'himiad trist ha melkonius a ra hon ene, pa guita ar bed-mañ. Lavaret a ra kenavo evit mat d'ar

plijadureziou, d'an amzer dremenet, d'hor mignoned ha mignonezed, d'hon amezeien, d'hor c'herent, d'hor pried ha d'an holl, hag erfin d'ar c'horf, a lezo war e lerc'h, skoelfet, melenet ha distroñket e fas.

Soñjit ervat gant pegement a brez e vo lianet ha savet ar c'horf-se, evit e guzat en douar, ha penaos, pa vo bet graet kement-se, ne soñjo nemeur ar bed ennañ mui. Ankounac'haet e vezoc'h, kenkoulz ha m'hoc'h eus ankounac'haet ar re-all a-raozoc'h. « Doue da rei joa d'e ene! » a vo lavaret eur wechig bennak, ha setu tout.

O maro, pa soñjer mat ennout, na te a zo c'houero ha didruez!

Soñjit ervat, pa zeu an ene er-mêz eus ar c'horf, e kemer an hent a-zehou pe a-gleiz. Allas! da be lec'h ez ay ho hini-c'houi? Pe hent a gemero, nemet an hini en do heuliet e-barz ar bed-mañ sur?

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* hag eun *De profundis* evit an holl anaon dilezet n'o deus den da bedi **Doue** evito ha n'o deus sikour all ebet nemet dre ar pedennou a ra ar gristenien fidel e komun ha re hor *Mamm Santel* an *Iliz*, hag evit kement hini emañ henoz e gorf war ar varvaskaon, ken war zouar, ken war vor, hag evit holl anaon ar purgator, dreist-holl evit an hini-tremenet-mañ, evit m'en do e ene ar c'hras, pa vo douget e gorf d'ar vered, da veza kurunet e-barz ar baradoz e-touez ar *Sent* hag an *Elez*.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Pobl staget ouz ar bed, klask a rit ho plijadur; A gorf hag a spered ec'h en em roit d'an natur. Ne soñjit ket, zoken, eur wech ez eo ret mervel: Berraat 'ra ho puhez, prest eo Doue d'ho kervel.

Staget eo ho kalon gant chadenn an droukspered
Siouaz ! ouz ho madoù, hag evel-se oc'h dallet.
Ganto soñj ar maro en ho spered 'zo mouget,
Daoust ma 'z eo 'r gwas a tra a c'hellfed sur da welet.

Ret mat eo d'eomp kredi ar pezh a welomp anat,
Mervel a rankimp holl, ya ! abret pe ziwezat.
E-kreiz hor yaouankiz pe 'barz an oad a gozni
E paeimp d'ar maro an dle 'zo merket d'eomp-ni.

Ne ouzomp nag an deiz, nag an eur, nag ar momed
E teuy an Ankou kriz, a-daol trumm, d'hor c'hemeret.
Diwezat 'vo kaout keuz goude ma vimp tremenet;
An amzer aet e-biou ne vo biken adkavet.

Neuze 'vije bet es d'ar bec'herien aheurtet
Ober o finijenn ha kaout glac'har d'o fec'hed;
Gant o buhez gwechall morse ken ne gendalc'hint,
Gant o buhez da zont e vint chalet, pa varvint.

Bezit 'ta aketus da zont d'en em brepari,
Gant aon 'vefec'h kavet en eur stad a ziegi.
Kredi 'rit, a-dra-sur, e tleit beva pelloc'h,
Ha marteze henoz mervel soudén a rankoc'h.

Kredi a rit ivez na oufec'h beza kollet,
O 'veza ma kerzit dre eun hent darempredet,
Ha marteze henoz ar maro kriz ho strinko
E goueled an ifern, siouaz ! da zevi eno.

Ar pezh a zo anat, er stad ma vezoc'h kavet,
Pa vezoc'h dre 'r maro diouz ar bed-mañ dibradet,
E chomoc'h da-viken, reuzeudik pe evurus,
Er vrasa levezeg pe er c'hastizoù skrijus.

Deomp eta a spered d'ar c'harneliou da welet
An eskern eus an dud hon eus bet anavezet :
Bet int war an douar, evelomp-ni, o veva,
Ha ganto e vimp c'hoaz, pa soñjimp an nebeuta.

Kalz Sent eus an Neñvou a zo bet, war ar bed-mañ,
Pec'herien baour ivez, 'vel an dud a zo bremañ;
Ar soñj eus ar maro 'deus graet d'ezo prederia,
'N em santelaet int bet betek o eur ziweza.

'Velto argasomp kuit an holl bec'hejou marvel,
Dilezomp c'hoaz ar c'hig, ar pec'hejou veniel,
Ha soñjomp er maro, ivez en eternite,
Hag e vimp sur, atao, e gwir zoujañs hon Doue.

O Jezuz, va Salver, me 'sant ez oun faziet;
Allas ! dallet oun bet gant ar bed, an droukspered.
Met prometi 'ran d'eoc'h dre ho kras, o va Doue,
Kregi a-feson vat gant hent an eternite.

'Hed an deiz hag an noz e soñjin 'barz ar maro
'Vit beza prest atao, kerkent hag am diskaro,
Gant aon 'vefen kavet e stad a bec'hed marvel,
Rak koll 'rafen neuze an evurusted santel.

Nac'h a ran krenn ar bed hag e holl blijadurioù;
Nac'h a ran krenn ivez, gant euz, e wall-gustumou.
Kenavo d'eoc'h, kerent ! Kenavo d'eoc'h, mignoned !
Ar soñj eus ar maro a ra d'in nac'h ar pec'hed.

Kenavo da-viken, plijadurioù difennet;
'Vit mezur ar preñved d'ar bez ez omp kondaonet.
Tra ken ne vo em soñj nemet ober pinijenn,
Hounnez a vo va lod ha va joa hiviziken.

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit ma vo diwallet ene
an hini tremenet-mañ gant sant Yann, sant Per, sant Jakez,
sant Andre, sant Tomaz, sant Filip, sant Simon, sant Jud,
sant Berteleme, sant Jakez ar bihan, sant Vaze ha sant
Matiaz.

Pedomp an daouzek Abostol santel, evit ma plijo ganto
beza daouzek alvokad galloudus evit an ene paour-se dirak
o Mestr benniget.

O va Doue, c'houi hag a zo eur mor a drugarez, plijet gant ho madelez divuzul klevet ar pedennou a gasomp war-du ennoc'h, gant eur galon izel, d'hoc'h aspedi, p'hoc'h eus gourc'hemennet d'ezañ kuitaat ar bed-mañ, da zigemeret en eur vro a beoc'h hag a sklerijenn ene an hini tremenet-mañ, evit ma ne zeuy ket da goueza etre krabanou an Enebour. Ho pedi a reomp, va Doue, da gaout eñvor anezañ betek ar fin ha da rei urz d'hoc'h Elez santel da zont d'e reseo ha d'e heñcha betek ar baradoz.

Hon Tad hag a zo en Neñv...

Me ho salud, Mari...

*
**

Pebez laouenidigez da eun ene eürus
Pa zisparti, er bed-mañ, diouz e gorf priziüs!
Kerkent e vez digollet eus e holl binijenn,
Hag e kerz da gemeret e berz er gwir sklerijenn.

Ar baradoz eo sur al lec'h kaera bet krouet;
N'o do digemer ennañ nemet ar Re Salvet;
Heñvel ouz aour ar c'hleuzeur e ranker beza pur,
A-barz kaout nep esperañs da vont di a-dra-sur.

Skedusoc'h 'get ar perlez hag holl aour ar Perou
Eo perzier ar Baradoz ha doriou an Neñvou;
Eno eo ken dudiüs beza ma ne c'hell den
Her c'hompren, hen diskleria, nemet Doue hepken.

Sant Paol, a-barz ma varvas, gant dudi estlammet,
D'an trede oabl 'voe douget ha d'ar gorre kaset,
Hag e barr an eürusted, dre aotre e Grouer,
E welas eus gloar Doue eun elfennig dister.

Ha war-lerc'h eur seurt trugar, pa voe disaouzanet,
Gant ar vrasa levenez e chome c'hoaz bamet:
« Gwelet em eus, emezan, pez na welas kristen,
« Traou ken kaer ha burzudus ma n'heller o c'hompren. »

Santez Katell a Sien he deus ivez gwelet,
Dre ar c'hras 'roas d'ezi tri ferson an Dreinded,
Eur skeudennig sklerijenn eus a c'hloar an Neñvou
A zo pourchaset eno 'vit oaned an Aotrou.

« Kement tra 'zo er bed-mañ ne deq nemet moged
E-keñver sur, emezi, ar c'hloar am eus gwelet;
Ar c'hloar 'zo war an douar ne c'hell den he gorren,
Ar c'hloar wirion er bed-mañ ne vo kavet biken. »

E rouantelez Doue e vo joa dizamant
Evit hor c'horf, hon ene, evit hor pemp skiant;
Gant ar sklerijenn skedus a roy d'eomp hon Doue,
E c'hellimp holl e welet 'pad an eternite.

Kalz kaeroc'h ha lintrusoc'h 'get heol, loar ha stered
E vo neuze hon ene dirak tron an Dreinded.
Houarn ruz ha tan nerzus ne vint ken tost morse
Ha ma vo da-virviken hon ene ha Doue.

Seul-vui e welimp Doue, seul-gaeroc'h her c'havimp;
Gant e holl barfedigez, hep paouez her gwelimp;
Goude tremen dirazañ ouspenn kant ha kant vloaz,
Ne raimp sur, war hor meno, netra 'met komañs c'hoaz.

Misteriou ar feiz kristen gant Doue, betek-hen,
'Zo kuzet, 'barz ar bed-mañ, ouz spered striz mañ-den;
Met er baradoz skedus, pa vimp en em gavet,
O gwelimp sklêr hag anat, dizolo, hep douet.

An eneo evurus splann a welo neuze
Mister santel an Dreinded, tri ferson e Doue,
Ha Sakramant an Aoter, an Inkarnasion,
Traou ha n'hellont er bed-man intent e nep feson.

Anavezout 'raint ivez sklêr an eternite:
Beza bet, 'raok ar bed-mañ, 'giz an Aotrou Doue,
Beza c'hoaz, goude bremañ, e-pad an holl amzer,
Evel ma vimp hon-unan gant hor Mestr ha Krouer.

Hogen ar c'horfou santel o devezo ive
Eun evurusted dispar, dre drugarez Doue;
Da-viken o devezo levenez dizamant,
Ha kement mat 'c'hell laouen santout ar pemp skiant.

Gwelet 'ray o daoulagad, gant laouenidigez,
Korf Jezuz-Krist, Hor Sálver, hag hini ar Werc'hez,
Korfou an holl Sent ivez, ken kaer, ken lugernus,
Er baradoz alaouret, ar palez dudius.

Ouspenn-se, c'hoaz e kavint 'n o gloar ar Re Salvet
Hag, evel eur c'hemm spontus e-skoaz o eürusted,
E welint ar Re Zaonet 'n o zourmañchou garo
O tiwaska gwall boaniou, hep kaout truez outo.

O pebez anaoudegez o devezo neuze
An holl eneou salvet e-keñver an Doue
En devezo o frenet hag, ouspenn, diwallet,
A drugarez da Jezuz, ouz poaniou ken kalet.

Dirazo 'paro anat frouez ar gwir binijenn
A gavit ken rust, bremañ, m' he nac'hit didermen.
Ar Sent eus ar baradoz a zo laouen-meurbet
Da veza graet pinijenn, p'he deus o saveteet.

Rak 'n eul livad gloar skedus mar dint beuzet brema,
Hervez ar profed David, pa edo o veva,
Ez eo dre ar binijenn o c'hasas 'vel eur skeul
Betek treuzou an Neñvou. O! deomp ivez d'o heul!

Lakait douñ en ho spered, kement 'zo e buhez,
Ar soñj eveus ar maro, hep e ankouaat jamez:
Baradoz eur wech kollet, pep tra 'zo aet da goll,
Ha baradoz gounezet, setu gounezet holl.

Saveteit prim hoc'h ene, an ifern dilezit;
Dibabit ar baradoz, lakait poan d'e c'hounit
Dre ar gwir basianted hag ar gwir garantez
Ouz an Aotrou, hor Roue, ivez ouz ho hentez.



(Hervez Zendoya)

*Tremen a ra pep tra,... nemet Kroaz Hor Salver...
Dismantret ha lonket e vez pep tra,... nemet Kroaz Jezuz...
Krogit mat enni,... hag e vezoc'h salvet !*

Pegen fur eo ar c'hristen a nac'h an ézaman
Evit ober pinijenn, didrouz ha dizaman;
Drezi davet hon Aotrou 'vo kaset da repoz
Gant ar Sent hag an Elez, e gloar ar baradoz.

Dougomp hor c'hroaz, kristenien, tre betek hor maro,
Karomp bepred hon Doue ha Doue hor c'haro,
Lakaomp start hon esperañs en e holl drugarez
Hag eun deiz e tigouezimp en e rouantelez.

C'houi, ken mat all, va Jezuz, e-keñver ar bed holl,
Ho pedi 'reomp en eur vouez, mirit na daimp da goll;
Hogen, dre ho madélez, roit d'eomp bremañ ar c'hras
Da c'hellout, er baradoz, ho kwelet fas-ha-fas!

*
**

**Eur Bater hag eun Ave Maria evit adori an Tri Ferson
sagr ha santel eus an Dreinded.** Ar c'henta eo an Tad Eter-
nel en deus hor c'hrouet; an eil eo ar Mab en deus hor prenet
gant e holl wad; an trede eo ar Spered-Santel en deus hor
santelaet.

M' hoc'h ador, c'houi Tad Eternel,
C'houi, Mab, ha c'houi, Spered-Santel,
Tri ferson 'n eun Doue hepken,
Treinded skedus 'zo ouz hor ren,
Da sellët ouzomp a druez,
P' hon eus holl keuz d'hor gwall vuhez.
Ennoc'h hepken ec'h esperomp,
Rak-se ho pet truez ouzomp;
Grit ma 'z aimp d'ho rouantelez
D'ho meuli laouen da jamez.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Perak ez oc'h-c'houi ken trist, va ene? Pe zigarez hoc'h
eus da gaout aon rak ar maro? Ha gouzout a rit e pelec'h
ha penaos e vezoc'h digemeret er bed-all?

Emaoc'h o vont da echui gant ho harlu er bed-mañ ha da
zistrei d'ho pro ger, e-lec'h ma 'z eo prest Jezuz-Krist hag e
Vamm Santel, hag holl Sent ar Baradoz, d'ober d'eoc'h dige-
mer vat ha laouen.

Mont a rit d'eur fest-eured e-lec'h m'ho po kement hoc'h
eus c'hoant hag e-lec'h ma kavoc'h eur sterad plijadur da
walc'ha ho kalon.

Mont a rit da gaout ar gerz eus an eurvad a vez e-ser
Doue ha da berc'henna ar mad dreist pep mad ma 'z oc'h bet
krouet evitañ.

Mont a rit eus an amzer a dremen d'an hini a bado da-
viken, eus ar skeud d'ar wirionez, eus ar maro d'ar vuhez,
hag eus eur stad reuzeudik d'eur stad eürus ha leun a
c'hloar.

Emaoc'h o vont tre e ti Doue ha da chom e bro ar Re
Veo, da ren en eur palez kaer ha skedus ha da neu en eur
mor a laouenidigez.

Mont a rit da welet ar pezh biskoaz na welas lagad, da
glevet ar pezh biskoaz na glevas skouarn, ha da gemeret dudi
gant ar pezh biskoaz na ijinat kalon an den en he faltazi!

Mont a rit d'eur vro e-lec'h ma kavoc'h kement a c'hoan-
tait, e-lec'h na vo netra a gement a vefe gouest d'ober aon
d'eoc'h, e-lec'h na vezoc'h mui war var d'en em goll, e-lec'h
ma veloc'h Doue ha m'ho po pep tra digantañ.

Ho pet fiziañs, o va ene, kuitait ar vuhez varvel-mañ hag
ar c'horf reuzeudik e-lec'h m'emaoc'h er prizon abaoe keit
amzer. Perak 'ta hoc'h eus aon?

Jezuz-Krist a zo maro evidoc'h; kemeret en deus samm
ho pec'hejou; paeet en deus hoc'h holl zle; aet eo da gred
evidoc'h dirak e Dad; prometet en deus d'eoc'h e varadoz,
nemet e rankit esperout ennañ diouz ho tu.

N'hoc'h eus graet vad ebet? Hogen Jezuz en deus graet
evidoc'h.

N'hoc'h eus ket gouzañvet netra evitañ? Hogen Heñ en
deus gouzañvet kalz evidoc'h.

Roet en deus d'eoc'h ar gwir, dre e boaniou kriz ha kalet, da zont da berc'henna rouantelez an Neñv. Roet en deus d'eoc'h perz en e holl veritou. Roet en deus d'eoc'h eul lodenn eus ar susit (heritach) a zo bet gounezet gantañ. Prometet en deus da neb piau bennak a resevje e Gorf Sakr er gomunion, na varvje ket e-doug an holl amzer.

Ha n'hoc'h eus ket digemeret an Aotrou Doue en ho kalon a-barz kregi gant ho peaj? Perak 'ta kaout aon neuze, p'hoc'h eus eun errez ken priziüs eus e bromesa hag eus e garantez?

Ma fellje d'ezañ ho koll, daoust hag e vije maro evidoc'h? Daoust hag ho talc'het en dije keit amzer e buhez hag ho kortozet gant kement a basianted? Daoust hag en dije roet amzer d'eoc'h d'en em anaout ha da c'houlenn pardon digantañ eus ho pec'hejou? Ha diskennet e vije bet en ho kalon dre ar gomunion, deuet eus an Neñv abalamour d'eoc'h hag aet en ho ti, ma ne falvezje ket d'ezañ ho reseo en e hini?

Mar deo a-walc'h eur soñj fall da lakaat eun den da goll ar baradoz, ez eo a-walc'h ivez eun huanad a wir c'hlac'har evit ober d'ezañ e c'hounit. M'hoc'h eus keuz a-greiz ho kalon, va ene paour, da veza ofañset Doue, e pardono d'eoc'h an holl zismegañsou hoc'h eus graet d'ezañ; eur gwir binijenn a vo deuet mat d'ezañ, ne vern ket pedavare. N'en em droomp morse re ziwezat ouz Doue, p'her greomp gant lealded. Morse, kennebeut, ne vez disprizet gant an Aotrou eur galon glac'haret ha mezekaet gant ar c'heuz da veza disantet outañ.

Deomp eta, va ene, ha marvomp gant Jezuz! Setu-Heñ ouz ho kervel hag oc'h astenn d'eoc'h e zivrec'h. Setu-Heñ ouz ar Groaz, o pedi c'hoaz evidoc'h hag ouz hoc'h erbedi ouz e Dad. Setu-Heñ o c'houlenn pardon evit ar re o deus e lakaet d'ar maro. Daoust ha n'oc'h ket eus ar re-se?

Sellit penaos e stou e benn ouz ar Groaz; ha n'eo ket evit rei d'eoc'h eur pok a beoc'h eo? Sellit penaos ec'h astenn e zivrec'h; ha n'eo ket evit ho priata eo? Setu digor e galon evit rei digemer d'eoc'h enni.

Skuilhet en deus e holl wad evit ho prena hag evit ho savetei. Ha ne fell ket d'eoc'h rei d'ezañ eur merk bennak eus ho karantez hag hoc'h anaoudegez-vat en e geñver? Ne oufec'h ket rei d'ezañ anatoc'h merk eget o vervel evitañ.

Marvomp eta! Laouen oun, pa fell da Zoue her grafen. Marvomp evit renta gloar da Jezuz-Krist; marvomp en anaoudegez eus e c'hrasou hag eus e soñjezonou, hag evit paea hon dle d'e justis. Marvomp evit mont d'e welet, pa n'heller ket e welet anez mervel. Hastomp da vervel, met na skuizomp ket o tiwaska poan. N'hon eus mui nemet nebeut amzer da c'houzañv, hag an eternite hor bo goude-se d'en em laouenaat.

O Maro! na dous eo ar soñj ac'hanout da neb a gav ar vuhez-mañ c'houero! O pebez plijadur eo mervel da neb n'en deus ket plijadur o veva!

* *

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* en enor d'an Itron *Varia* a *Druez* ha da *Veronik*, ar *Santez* karantezus a sec'has e vizaj trist da Jezuz, ma plijo ganto kaout truez ouz ene an hini tremenet-mañ ha beza diou alvokadez galloudus evit pep-hini ac'hanomp, dreist-holl pa vimp war-nes en em gavout dirak lez-varn an Aotrou Doue, hag aspedi tri ferson an Dreinded evit ma vo ene an hini tremenet-mañ douget gant an Elez d'ar baradoz, e-kreiz ar joausted hag ar meuleudiou e-pad an holl amzer.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

* *

Aotrou sant Per benniget, abostol evurus,
C'houi a zo bet eun diskibl, eur mignon da Jezuz,
Hon erbedi ouz Doue, ni ho ped a galon;
Ne oufec'h nac'h kement-se, rak c'houi eo hor patron.

Ni 'zo bugale divat, pec'herien aheurtet;
Hor c'halon ouz komz Doue 'zo, siouaz! kaledet,
Hor c'houstiañs zo karget a bep seurt pec'hejou,
Rak-se ez omp gwall-sammet gant bec'h hor mizeriou.

O'houi hoc'h eus graet pinijenn evit beza nac'het
Jezuz, hor Mestr, hor C'hrouer, hor Salver benniget;
Roit ivez d'hon daoulagad eun eienn a zaelou
Da ouela ha da geuzia bepred d'hon torfejou.

O'houi 'zo e-kreiz an dudi, c'houi a zo kurunet
A-unan gant an holl Sent ha gant an holl Eled,
O'houi a zo bremañ laouen hag ivez evurus
Dirak ho Mestr, hoc'h Aotrou, hag o veuli Jezuz.

Ober a raimp pinijenn, nac'h a reomp ar pec'hed;
Ganeomp ar bed, e bompou, a vo krenn dilezet.
Hon erbedit ouz Doue ma 'z aimp holl da repoz,
Da welet Jezuz ivez e-kreiz ar baradoz.

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* en enor da sant. Per ha
da sant Paol, perzerien rouantelez an Nenv, evit ma plijo
ganto, pa c'houlennimp digor, dont da zigeri d'eomp dor ar
baradoz ha da zigemeret, kerkent ha ma vo lakaet e gorf
e-barz ar bez, ene an hini tremenet-mañ e palez dudius
an Aotrou Doue.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Klevit gant souez ha spouron
Ali ar roue Salomon;
Skrivit-heñ doun en ho spered
Hag e tilezoc'h ar pec'hed.

A-greiz holl mervel a ranker
Ha monet dirak ar Barner'
'Vit beza da-viken kaset
D'an tan kriz pe d'an eürusted.

'Touez an dud ma ren ar pec'hed,
Eo dre na vezont ket chalet
Gant o finvezioù diweza,
Traou kriz hag eus an euzusa.

Korf an den, hervez an natur,
Ne glask nemet e blijadur;
Emberr koulskoude hep arvar,
Ez ay da vreina d'an douar.

Ar c'horf 'zo meurbet kizidik,
Divenn, lipous ha gwall-simplik.
Goude beza bet re vaget
E talv da larda ar preñved.

Ar bed 'zo treitour, kristenien,
Evel war an dour eur bluenn;
Neb en devo fiziañs ennañ
A vo sur touellet gantañ.

Da neb ouz e vez 'zo tostik
Buhez hir 'ra van da ginnig,
D'ar re glañv pare dizale,
D'ar re yac'h nep kleñved morse.

Arabat 've er c'halonou
Ar c'hoant da rastellat madou:
Rak madou ar bed dastumet
Ne dint netra nemet moged.

Ha pa vefec'h, den reuzeudik,
Deut galloudek ha pinvidik,
Petra 'ta ho po gounezet
Pa 'z eoc'h d'an douar 'n eun arched?

Eur goz liñser ha pemp plankenn,
Dindan ho penn eun tamm torchenn,
Setu ar pezh 'vo d'eoc'h roet
'Vit mont d'an douar da gousket.

Na fiziit ket war ho yec'hed,
Ho yaouankiz hag ho kened;
An Ankou didrouz a ziskar
Ar re nerzusa d'an douar.

N'eus den pinvidik ha desket,
Na den ebet uhel savet,
Diskarg eus lezenn ar maro:
O falc'hat a ray, pa garo.

Sonjit-e vale an Ankou
Tostik-tre atao d'ho seuliou.
Ne zaleo ket d'ho kervel,
Bazit prest bepred da vervel.

Goude ma vezoc'h tremenet,
Ho kerent hag ho mignoned
Betek ar bez hoc'h ambrougo,
Ha kerkent ho laoskint eno.

Neuze 'echuo er c'hañvou
Ho joa, ho kloar, ho pompadou,
Ha n'ho pezo da vignoned
Nemet tign, kontron ha preñved.

War an traou-se, 'hed ho puhez,
Sonjit ervat hag alies,
Hag ho korf, d'ar bez pa 'z aio,
Hoc'h ene d'ar c'hloar a nijo.

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit enori al *Lamgroaz*
benniget hag evit pedi Itron *Varia Goadri*, hag an holl Sent
all a zo enoret e-barz he chapel, ma plijo ganto beza alvo-
kaded vat evit ene an hini tremenet-mañ dirak an Aotrou
Krist, hag evit, pa vo douget e gorf d'an douar, ma vo kuru-
net an ene-se e-barz ar c'hloar.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Selaouit, Kristenien, da c'houzout ken troet,
Penaos e tisparti diouz e gorf benniget,
Pa vez fin d'ar vuhez, an Ene evurus
'Zo bet ouz e vleina war heñchou ar vertuz.

Pa 'z eo ho polontez, eo ret d'in, va Aotrou,
Kemeret va frankiz, terri va liammou,
Dilezel ar prizon eus va c'horf evurus
A zo bet va c'henseurt 'pad eun treiz gwall-risklus.
Ret eo, gant ho krad-vat, kuitât ar gambr-studi
Karget gant prederiou eur bed ken dizudi.
Dirazoun e tigor dor eur vuhez nevez:
Ret eo kuitât ar bed ha mont d'ar gwir furnez.

Va c'horf 'vel eur vagig en devezs va c'haset
Dre an avel divat hag ar rec'hell kalet.
E kêr santel Sion, setu me digouezet,
Ha Porz ar Bromesa kerkent am eus gwelet.
Evel e Arc'h Noe, er bed e oan lojet:
En-dro d'in 'c'hourveze bep seurt anevaled.
Re-bar d'eur goulm, bremañ va nij a gemerin;
P' am eus trec'het Satan, harz ebet ne gavin.

An Elez, dre o gras, a zeuy d'am skoazella
Da vont betek eur vro eus an dudiusa,
E-lec'h m'am bo perz en eürusted padus.
A zo bet prometet d'an dud fur ha sentus.

Ar bed all a welan ouz eur Gêr Gaer heñvel
Ha karget he ruiou gant eun engroez santel.
Ar Maro eo 'r porzier 'zigoro ar C'hastell,
Pa vezo bruzunet va lestr ouz e rec'hell.
Eur stêr a zo eno o ruilhal, hep ehan,
Laouenidigez vras, plijadurioù dizoan;



Ar c'hristen mat a ya kaouen dirak Doue goude beza resevet e sakramañchou : « Eürus ar re a varv e karantez Doue ».



« O Gwerc'hez santel, c'houi hag a zo maro gant ar garantez evit Doue, pedit evidomp, pec'herien, bremañ ha da eur hor maro. »

An ene ' gemero eur berad anezi,
Da-viken en devo eürusted ha dudi.

Foll bras eo ar bediz o touja ar maro:
Termen eo d'an drougou, pa laka fin d'ezo.
An tu hon eus drezañ da vonet d'ar joaiou,
P'eo ret d'an den mervel 'raok gwelet e Aotrou.
Rak-se deuit 'ta buan, Maro madelezus,
Arabat d'eoc'h dale na beza diegus;
Etre Doue ha ni ez oc'h eun nor sarret,
Emaoun ouz ho kortoz 'vit beza pardonet.

Skuiz oun 'barz ar bed-mañ, p'ouzon mat e zoare,
N'eus 'met ar pezh 'zo bet, a zistro adarre.
Joaïou fall-daolennet 'roer d'eomp da welet,
Al levenez gwirion en Neñv a zo miret.
Rak-se c'hoant am eus da veza dizoaniet
Hag evel eun tenn bir, pa vimp dispartiet,
Mont da glask dor-zigor d'ar C'hambrou Uhela
Ha digemer eürus e-kreiz ar joa vrasa.

♦ ♦

An Ene.

Kenavo 'ta, va c'horf, kenavo ' lavaran!
C'houi ha me ' oa unan 'boe hon amzer gentan,
Met mar plij gant Doue dont d'hon dizunani,
Hon-daou p'hon eus bevet, 'vo dous hon disparti.

Ar C'horf.

Allas! ene paour, va natur divarvel,
Me ' glev aoza va laour (1), prest oc'h d'am dilezel.
Holl dechou va c'halon 'm eus evidoc'h nac'het
Ha bremañ, va-unan, ganeoc'h e vin laosket.

(1) cherch, arched, geler.

An Ene.

Gwir eo, mignon paour, leala kompagnun,
Eus ar gourc'hemennou n'hoc'h eus torret nikun,
Met Doue a gemenn, ha dre e volontez
'Vo fin d'am mestroni ha d'ho sentidigez.
Doue, ma plij d'ezañ hon holl vadoberou,
'C'hell hep cheñch hon doare, dre berz hor meritou,
Hep hon dispartia hol lezel asambles
Da veva dibreder e gwir unvaniez.
'Barz al Lezenn Genta kement-se 'oa skrivet,
Met dre bec'hed Adam an traou 'zo bet cheñchet,
Ha bremañ 'tisparti ar c'horf diouz an ene;
C'houi a ya d'an douar, me 'ya davet Doue.

Ar C'horf.

Mar doun-me al lechenn a oa graet d'ho loja,
Piou ho tigemero, pa vo ret kimiada?
Va c'huitât 'reoc'h neuze 'kreiz an dristidigez,
Glac'haret 'vin ivez, mignon ker va buhez.

An Ene.

Diouz prizon ho korf pa vin-me diframmet,
E palez an Dreinded, ar Sent hag an Eled,
Kaeroc'h lec'h evidoun a vo neuze aozet
Eget an heol skedus en oabl sklerijennet.

Ar C'horf.

Mar deo evit paea hoc'h holl vadoberou
E ro Doue d'eoc'h-c'houi perz e-barz ar joaiou,
D'in-me eo ken dleet kaout va lod enoriou,
Pa 'z oun bet ho skoazell war hent ar vertuziou.

An Ene.

Da veo eus a varo pa savoc'h eun devez,
En ho torn e pegin ha, gant kalz karantez,
Ganin-me ho sachin da Vro an Eürusted,
'Vel ma sach ar mēntouch eun tamm houarn kalet.

Ar C'horf.

Pa vin-me divuhez en eur bez astennet,
Gant ar vreïnadurez en douar dispennet,
Pa n'em bo na daouarn, na treid, nag ivinou,
E vo gwall-ziwezat klask va c'has d'an Neñvou.

An Ene.

Neb a grouas ar-bed, hep patrom na danvez,
En deus c'hoaz ar galloud d'ho furmi a-nevez;
An hini ho kreas gant douar distrempet
Hep mar ho tiskoacho 'douez atred ar vered.

Ar C'horf.

Dister ha dianvez e kavoc'h ho mignon,
Krignet gant ar preñved, debret gant ar c'hontron.
An heñveledigez 'zo mamm d'ar garantez:
Ganin pa n'he gweloc'h, am laoskoc'h a-gostez.

An Ene.

Re-bar 'vezoc'h neuze d'ar c'horfou vertuzus
Zo e-barz an douar eun teñzor prizius.
Evel gwrizioù lavand, lili ha roz livrin,
E kornig al liorz dindan an heol mintin,
E vezoc'h er vered o c'hortoz, c'houi ivez,
Ar mare da vleunia ha d'adkaout ar vuhez.

Ar C'horf.

Ar roz hag al lili, al lavand, al lore
'Zeu da goll o gened hag her c'hav adarre.
Mar doun-me evelto, e-giz ma leveret,
A-raok deiz ha bloaz me 'vo resusitet.

An Ene.

Eur bloaz a ve ennañ ken lies a zevez
Hag a ve penn-da-benn ken hir ha mil bloavezh,
Termen d'hon disparti a lakay marteze:
Mil bloaz n'eo nemet eun devez 'vit Doue.

Ar C'horfi.

Kenavo, va buhez, ret eo d'eomp kimiada;
Plijet gant an Aotrou ho kas d'ar joa vrasa.
C'houi 'vo bepred dihun: me, siouaz! a gousko.
Pa vo deut an termen, c'houi d'in her c'hemennno.

An Ene.

Kenavo, korf eürus, me ho trugareka:
C'houi a zo bet sentus ha santel er bed-ma.
'Vit ar Varn diweza pa sono an Elez,
Tergern an trompilhou hor c'havo asambles.

Ar C'horfi.

It eta, va buhez, ho lod da gemeret
Eus ar gwir garantez hag ar gwir eürusted,
Eus ar joa a bado keit hag an holl amzer
E baradoz Doue, palez kaer Hor Salver.
Sarrit, va daoulagad; echu eo va zrevell;
C'hoaz eun huanadenn hag ez an da vervel.

*
**

Eur *Bater*, eun *Ave Maria* hag eun *De profundis* evit
erbedi ouz Doue an eneoü fidel a zo aet er-mêz eus buhez
ar bed-man, dreist-holl ene an hini tremenet-mañ, re hor
c'herent, hor mignoned, hor madoberourien, ar re-holl ma 'z
omp bet digarez d'ezo da bec'hi, hag evit an eneoü eus ar
barrez-mañ a zo dalc'het e tan ar Purgator.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...
De profundis...

*
**

Klevit, koz ha yaouank, kement 'zo war ar bed,
A c'henou ar Profed ar c'hemenn hon eus bet.
D'an holl guitibunan, frès, en deus lavaret
En em drei ouz Doue: ar varn 'zo erruet.

C'hoant am eus da gomz d'eoc'h eus ar varn diweza,
Ma kar Doue, hor mestr, donet d'am skoazella
Da ziskleria d'ar bobl madelez Hor Salver
Abaoe 'n holl amzer e-keñver ar pec'her.

Komz eus fin ar bed-mañ pell 'zo hoc'h eus klevet,
Hag eus an darvoudou a dle beza gwelet:
Kernez yras ha bosenn, brezel kriz diremed,
Ha sinou bras en oabl, el loar hag er stered.

Etre Jeruzalem ha Menez Olived
Emañ, siouaz! al lec'h ma vezimp holl barnet.
Eur varn a vo hounnez dizamant ha peurglos;
Ar barner 'vo Jezuz, roue ar baradoz.

Eil ferson an Dreinded, kent c'hoaz ken hegarat,
Ziskenno, an deiz-se, e Traonienn Jozafad;
Ar galloud en devo eus a zorn an Dreinded
Da zougen ar setañs a-enep ar pec'hed.

Barner eeun ha kalet, pa vezo azezet
War e gador-roue, e fas drouk ha têret,
E c'halvo 'r bec'herien fallakr ha disentus
D'o c'hastiza neuze didruez ha grevus.

Pa vezo 'n em vodet el lec'h-se an Dreinded,
Ar Sent hag an Elez, an holl Batriarched,
Raktal d'an El galver 'vezo gourc'hemennet
Gervel, gant an drompilh, an holl re damallet.

An El neuze souden, dre urz 'n Aotrou Doue,
A gemennno kalet ha frès da bep ene
Mont davet o c'horfou 'vit en em unani
Da glevet da-viken eur setañs difazi.

A c'henou 'n embanner pa ouezo Lusifer
'Vo d'ezañ kemennet gant e Vestr, e Groer,
'N em gavout el lez-varn gant e holl genseurted,
E Traonienn Jozafad, o setañs da glevet,

En oabl e tregerno, betek deon an Neñvou,
Kounnar priñs an Ifern ha safar an diaoulou,
Hag e ranko Satan, gant e strollad euzus,
Prim ouz an-El senti a-berz 'n Aotrou Jezuz.

« Deomp, eme Lusifer, tud foll ha milliget,
« Deomp dirak ar Barner, ma vezimp kondaonet,
« 'Pad an eternite, da leski en tantad
« 'Deus aozet evidomp hon oberou dic'hrad! »

Ha neuze, gourc'hemenn a raio Lusifer
Ma vezo prim d'ezañ digaset ar c'haier
E-lec'h ma 'z eo skrivet, 'boe m'emaomp o veva,
Hon holl walloberou, hor soñjou kuzeta.

Ha pa vezo Satan hag e holl genseurted
En em gavet el lec'h ma vezo ret monet,
E tigor al leor leun a bep viloni,
Hag anat ' tiskuilho pec'hejou pep-hini.

Doue 'roio aotre neuze da Lusifer
Da zifenn e barti a-enep ar pec'her;
Gant krizder ' c'houlennno priñs an eñez kouezet
Veñjañs ouz an dud-se o devo disantet.

« Barner eeun, emezañ, barner ar wirione,
« Ha c'houi a c'hell lemel va zra diganin-me?
« Set 'amañ va c'haier leun eus ar pec'hejou
« O deus graet a-enep o Doue, o Aotrou!

« Mestr bras! Setu aze kalz tud lik ha gadal,
« Tech ar c'hig 'n o c'halon, lubrik, kent o vragal.
« Va-unan o c'havan euzus-holl da welet:
« Kastiz a c'houlennan, pa 'z eo d'in permetet! »

P'en devezo Satan echu e brezegenn,
Gant piou goulenn skoazell ne ouezo 'r bec'herien;
Pa sellint ouz Mari, outo 'vezo têtet
Ha dare da c'houlenn veñjañs ouz o fec'hed.

Ar Sent hag an Elez ger ne gredint laret
O welet Hor Salver fuc'het ha kounnaret,
Prest an tan da lezel, eus a lein an Neñvou,
War benn ar bec'herien 'balamour d'o zechou.

Hag ar Barner Gwirion, hor Mestr, ar C'hrist Jezuz,
A zougo eur setañs trist, kalet ha spontus
Enep ar bec'herien, da Satan sklavourien,
O barno da zevi en ifern da-viken.

« Tec'hit pell diouzin, tud vil ha milliget!
« It da dan an ifern 'zo evidoc'h c'houezet;
« It di 'ta da leski 'pad an eternite,
« Tre keit ha ma vezo tri ferson e Doue! »

Lusifer o krozal ha gant eur vouez euzik,
A lavaro d'ezo: « Deuit-c'houi, tud reuzeudik,
« Deuit da buñs an ifern ha d'ar flammou grizias
« Da leski da-viken gant an diaoulou ganas! »

Ar Re Zaonet, neuze, 'skrijo gant dizesper:
« Ret eo mont d'an ifern! Adeo, Doue Salver!
« Adeo, Gwerc'hez Vari! Na bras eo hon anken,
« Ret eo mont d'an ifern da leski da-viken!

« D'an heol splann hor malloz, d'al loar ha d'ar stered;
« P'hor gweljont o pec'hi, n'o doa ket hol lonket,
« Ha bremañ 'c'houlennont en hon eneb veñjañs!
« D'ar bed holl hor malloz! N'hon eus mui esperañs! »

P'en devo Hor Salver barnet ar bec'herien
Da vont gant an diaoulou da-heul o flanedenn,
Gant eur fas hegarat, ken mao ha ken skedus,
Evel-hen e komzo ouz an holl Dud-Eürus:

« Deuit holl d'ar baradoz ganin, va mignoned,
« Ho lod da gemeret eus ar gwir eürusted,
« Da gana da-viken ar c'hantikou nevez
« A gan an holl Elez gant pep seurt levez ! »

Hag an Tad Eternel a lavaro ive :
« Deuit holl, va bugale, deuit holl 'ta ganin-me !
« C'houi 'c'h eus va servijet, ivez va mab Jezuz,
« Em falez ho pezo eun digoll dudius. »

« Deuit, eme ar Werc'hez, buan da gemeret
« Ar pezh a veritit e stad ar Re Salvat,
« En teñzor bet 'vidoc'h gant ho Salver restet
« 'Vit ho paea brokus eus ho kwir fealded. »

Raktal 'vezint kaset d'ar Gwir Rouantelez
Gant ar Werc'hez Vari, ar Sent hag an Elez,
Da ren flour eur vuhez leun a bep joausted
Gant gwir servijerien tri ferson an Dreinded.

Er pezh 'zo em c'hentel ne gavoc'h nep abeg ;
Bet eo eus al latin lakaet e brezoneg
Evit hoc'h alia, c'houi holl a zo kristen,
Da nac'h ho kwall-vuhez ha d'ober pinijenn.

Rak-se, paour-kêz breudeur, c'houi touellet-meurbet,
Distroit davet Doue ha dilezit ar bed ;
Neuze, gant gras Jezuz, ez eoc'h holl hep arvar
War-eeun d'ar gwir vuhez eus reuziou an douar.

Ha bremañ, va breudeur, 'teuan d'ho kouvia
Da choaz 'kichen Doue an tu 'gavoc'h 'r gwella :
Me a bed ar Werc'hez, ar Sent hag an Eled,
Ma vezo en tu dehou e vezoc'h azezet.

*
* *

Eur Bater hag eun Ave Maria evit en em erbedi hon-
unan hag erbedi ene an hini tremenet-man ouz Kalon
Sakr Jezuz.

O Kalon Sakr Hor Salver Jezuz-Krist, ho pet trugarez
en hor c'heñver hag e-keñver ene an hini tremenet-mañ a
c'houlennomp diganeoc'h digemeret bremañ gant truez ha
madelez en ho paradoz e-pad an eternite da repoz.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
* *

Eur Bater hag eun Ave Maria pep-hini ac'hanomp, da
bedi hon El-Mat evit n'hor c'huitay ket, nag en deiz nag en
noz, ken na vimp bet heñchet gantañ da c'hloar ar baradoz,
ha da bedi El-Mat an hini tremenet-man evit na guitay
ket e ene, nag eun eur nag eur momed, ken na vo en em gavet
gantañ e rouantelez Doue.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
* *

Eur Bater hag eun Ave Maria evit ma plijo gant sant
Rok, sant Jili ha sant Sebastian pellaat diouzomp ar
gwall-glenvejou hag ar gwall-blannedennou ha lakaat ene
an hini tremenet-mañ da gaout digant Doue ar c'hras da
vont da gemeret perz e eürusted an Neñv, a-unan gant ar
Re Salvat, ha da gana meuleudi d'hon Aotrou e-kreiz ar
joaiou hag an enoriou.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
* *

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit saludi hag enori ar
Groaz priziuz ma 'z eo bet staget outi Jezuz, Hon Dasprener,
evit silvidigez ar bed a oa diagent kollet dre ar pec'hed.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...



Gant ar gwad a skuilh Hor Salver, deuit da veska ho taelou,
Kristenien, c'houi hag a glever o prezeg eus e boaniou;
Pa 'z eo evit hor pec'hejou 'c'houzañv Doue da gentañ,
Broudet dre nerz e holl c'hloaziou, bevit, marvit evitañ.

Gant kalz anken ha kalonad eo trubuilhet 'n eur jardin,
Ha d'e espern e ped e dad hag e chom en amzivin. [savet,
Gwech gant ar spont ez a an trec'h, p' en em wel er groaz
Met dre garantez, daoust d'e nec'h, ar maro en deus choazet.

Judaz, gant an arc'hant dallet, e saludas 'vel mignon;
Hogen an treitour milliget, d'ar vourrevien digalon,
Dre eur pok mezus e werzas. Pec'her, pa gomuniez,
Te 'zo ken trubard ha Judaz; da Salver a draizez!

Dilezet eo da wall-gounnar eur vandenn dud dirollet,
Bloñset eo e vizaj klouar gant taoliou ar soudarded.
'N êlez ' dlefe e warezi gant o diouaskell, pelloc'h,
Diouz fulor an dud-se ken kriz, pe c'hoaz o fêza kentoc'h.

Stlejet eo dirak Kaifaz ha diskleriet eo treitout;
Gant falloni, ar beleg bras hel lak 'touer, jarneour.
Tud disakr, pa varno ar bed, e dro en do Hor Salver;
C'houi, gant trouz ar gurun spontet, her pedo neuze 'n aner.

Keit ha ma 'z eo sakrifiet, gant an holl dismegañset,
Gant Per zoken ez eo nac'het; iskis ez eo gwallgaset.
Met eur sell taolet gant Jezuz a rann ar galon soudan
Ha Per, glac'haret ha mezus, a ouel, siouaz! gant anken.

Gant Pilat ez eo keñveriet Jezuz ouz eur gwall-vuntrer,
Met ar bobl he deus respontet: « Kaout Barabaz a ranker! »
Daoust ma 'z eo dizrouk ha dinoaz, Jezuz a zo kondaonet
Hag, allas! al laer Barabaz eus ar prizon 'zo laosket.

Ouz eur piler, en noaz staget, setu oan Doue, siouaz!
Dre urz Pilat eo skourjezet gant tud diviñs ha ganas.
Harzit, bourrevien kounnaret, paouezit gant ho torfed;
Mar deo ar gwad sakr-mañ skuilhet, ez eo evit ho pec'hed.

Eur gurunenn spern, gant krizder, en e benn a zo sanket,
Pebez kentel ha pebez skouer, tud ourgouilhous dirollet!
Setu ar poaniou a ziwash evidoc'h, pec'her dallet;
Dre ar blijadur 'maoc'h o klask ez eo Jezuz goullet.

Jezuz, pignet war ar C'halvar, ouz eur groaz a zo savet,
Ha diwarni c'hoaz e lavar: « Va Zad, o tad benniget!
« Ne ouzont ket petra 'reont, m'ho ped, pardonit d'ezo! »
'Veltañ, kristenien fur, greomp da gement hon ofañso.

Ar bobl dic'hrad, a bouez he fenn, a youc'he en-dro d'ezañ:
« Ma c'hell eus ar groaz-mañ diskenn, ni holl a gredo ennañ! »
Diskenn 'rafe ês eus ar groaz en desped d'ho holl dachou,
Met chom a ra stag outi c'hoaz 'vit preña ho pec'hejou!

'Vit ma vezo d'eomp talvoudus ho sakrifiis ken kalet,
E-lec'h diskenn 'fell d'eoc'h, Jezuz, 'vefe ervat peurglozet;
D'ho promesaou bezit fidel, hor sachit holl davedoc'h:
Hor brasa c'hoant ez eo mervel ha gouzañv poan evidoc'h.

Jezuz a varv hag an holl ved a zoug kañv bras d'Hor Salver;
C'houi hepken, pec'her kaledet, a gav 'n ho kalon krizder.
Ho kalon a zo argasus, pa 'z eo ar rec'hier frailhet,
Gant maro an Aotrou Jezuz n'oufec'h ket beza tizet.



Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit enori Pasion brizius
Hor Salver Jezuz-Krist a zo maro evidomp, dre garantez,
war ar groaz, evit hor prena, bihan ha bras, hag evit na day
nikun ac'hanomp da goll, ma c'hellimp ober pinijenn hag,
evel-se, pellaat diouz an ifern ha mont d'ar baradoz.

Me hoc'h asped, Salver ar bed, dre ar basion hag ar maro
hoc'h eus gouzañvet evidomp ha gant skoazell ar Werc'hez
Glorius Vari hag an holl Sent benniget, a bedan da veza
alvokaded vat evidomp dirak ho madelez, da brizout ober
eur sell a drugarez ouz ene ho servijer paour-mañ ha da rei
d'ezañ ar c'hras da vont bremañ d'ar baradoz d'ho kwelet
fas-ha-fas.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit pedi ar Werc'hez
Glorius Vari, an hini a zo bet lakaet gant tri ferson an
Dreinded war an tron uhela e-touez ar Re-Eürus.

O Gwerc'hez Vari, merc'h an Tad Eternel, mamm eil
ferson an Dreinded, pried ar Spered-Santel, c'houi, ar stere-
denn gaer ha lugernus savet dreist an holl Sent hag an holl
Elez, rouanez an Neñv hag an douar hag hon difennourez
dirak hor barner, o Mari, p'hoc'h eus bet pep galloud war
an douar hag an Neñv, me hoc'h asped da gemeret ene an
hini tremenet-mañ dindan ho kwarez santel ha da implija
evitañ an holl c'halloud-se dirak ho Mab, evit m'en do ar
c'hras da veza digemeret hirio en eul lec'h a beoc'h, e bara-
doz Doue, dre veritou Jezuz-Krist hon Aotrou.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit pedi an Aotrou Doue
da skuilha e c'hras hag e vennoz war an ti-man ha war
gement hini a zo ennañ o chom, ha da bellaat dioutañ falla-
griez hon enebour, ma chomo ennañ an Elez santel d'e ziwall

e peoc'h ha ma vo ivez miret ennañ ho karantez, Aotrou
Jezuz-Krist.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Lavaromp an « **In manus tuas** » evit en em lakaat etre
divrec'h Jezuz ha Mari, hag eur *Maria, mater gratiae*, evit ma
ne c'hello Satan netra en hon eneb.

In manus tuas, Domine, commendo spiritum meum
Redemisti nos, Domine Deus veritatis.

Maria, mater gratiae,
Mater misericordiae,
Tu nos ab hoste protege
Et hora mortis suscipe.

Gloria tibi, Domine,
Qui natus es de Virgine
Cum Patre et almo Spiritu
In sempiterna saecula.

*
**

Plijet ganeoc'h, hon Aotrou mat,
Hor miret holl evel mab ho lagad,
Hag hol lakaat dindan ho tiouaskell
En asurañs atao betek mervel.


Yec'hed mat d'ar gompagnunez,
D'an anaon ar silvidigez,
Peoc'h ha gras Doue d'ar re veo
Ha repoz vat d'ar re 'zo maro.

Doue da bardono d'an Anaon!

Evel-se bezet graet.




*... Ar profed Ezekiel a wel ar c'horfou maro o sevel leun a vuhez,
unanet a-nevez gant o eneoù dre c'halloud Doue. Kement-se a
c'hoarvezo da fin ar bed...*



... hag e vo dastumet an holl er memes lec'h evit ar varn diweza.

EIL PENNAD

GRAS GOEZEG



*Ar pedennou diouz an noz (Gwelit paj. 20).
Litanioù ar Werc'hez e latin (paj. 25).
An « Angelus » e latin.*

*
**

Eur Bater hag eun Ave Maria evit pedi holl Sent hag holl Sentezed ar baradoz, ma plijo ganto beza alvokaded vat evidomp dirak an Aotrou Jezuz, bremañ ha war an eur eus hor maro.

Hag er memes amzer e pedimp evit ene an hini tremenet-mañ da c'houlenn evitañ beza digemeret gant Jezuz e-barz an eürusted eternal.

*Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...*

*
**

Va Salver benniget Jezuz-Krist staget ouz ar groaz, hoc'h aspedi a ran dre ar garantez divuzul hoc'h eus evit silvidigez ar bec'herien baour; dre ho pasion galet hag ho tremenvan truezus; dre an holl wad hoc'h eus skuilhet evidomp; dre an erbed a rejoc'h eus hoc'h ene santel da Zoue, ho Tad; dre an diweza kriadenn a laoskjoc'h a-barz mervel; dre an huanadenn diweza a rejoc'h en eur dremen, ha dre ho maro a zeuas da seveni pe da beurgloza an Daspren hoc'h eus graet ac'hanoun, ma plijo ganeoc'h kaout truez ouzin bremañ hag en eur eus va fasion, pa yin war va zremenvan,

ha digemeret va ene etre ho tivrec'h trugarezus a-benn ar pred eus va maro, hag ivez reseo bremañ ene an hini tremenet-mañ e-touez ho Sent hag ar Re Salvete en ho paradoz kaer ha dudius.

*
**

Lavaromp eur Bater hag eun Ave Maria en enor d'an Aotrou sant Jozef, tad miager da Salver ar bed, pried d'ar Werc'hez Glorius, fidel da Jezuz ha da Vari ha patron ar maro mat:

« Aotrou sant Jozef benniget, grit d'eomp, ni ho ped, kaout bep a varo mat ha bep a ene eürus, ha da ene an hini tremenet-mañ ar c'hras da vont d'ar baradoz da veuli Doue da-viken. »

*Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...*

*
**

Eur Bater hag eun Ave Maria evit pedi Itron Varia Dreguron, Itron Varia ar Feunteunioù hag Itron Varia ar Gergoad ma plijo ganto beza evidomp teir alvokadez vat, p' en em gavimp, war-lerc'h hor maro, dirak Jezuz, hor barner, hag evit en e an hini tremenet-mañ, bremañ p' en deus da respont dirak Doue eus e vuhez er bed-mañ.

*Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...*

*
**

Aotrou Jezuz, pegen dous e,
E-pad an noz, e-pad an de,
Soñjal e welo va ene
Santez Mari, mamm da Zoue.

Goude Jezuz, hor c'harantez
'Ya d'ar Werc'hez, hor Rouanez,
Ha brasa joa 'm eus er bed-mañ
Eo sur gellout he servija.

Rak piou bennak he servij mat
'Zo ganti skoazellet ervat,
Ha d'ar c'hloar eo sur da vonet
D'he gwelet splann ha d'he c'haret.

Drezi, Rouanez an Neñvou,
E resever kalz a c'hrasou;
Drezi 'renimp mat hor buhez
Hag e kavimp silvidigez.

E skrid ebet n'em eus lennet,
Na kennebeut klevet laret
'Ve bet kollet gwir servijer
Ar Werc'hez Sakr, mamm Hor Salver.

Rak-se m'ho ped gwitibunan
D'he c'haret mat, bras ha bihan,
Ma fell d'eoc'h beza kurunet
En Neñv; palez kaer an Dreinded.

*
**

Gwerc'hez Vari, mamm Jezuz,
Me ho ped da druezi
War stad an Anaon klemmus
Er purgator o tevi.
Eno emaint e langis
En tan-grizias hag euzus.
Gouzañv 'reont poaniou iskis,
O diboagnit, Mamm eürus!

Me ho salud, Mari...

O Mari, feunteun gomun
Hor c'hempenn diouz ar pec'hed
Hag, hep disprizout nikun,
A ro d'an holl ar yec'hed,
Astennit ho torn santel
Da sikour ar re boaniet
Ha da rei prim ho skoazell
D'an Anaon paour ha doaniet.

Me ho salud, Mari...

Mari, mamm drugarezus,
Diganeoc'h eo e c'hortoz
An eneou hirvoudus
M'o zennoc'h da repoz.
C'hoant bras o deus ac'hanoc'h
Da gaout buan ar gweled,
Hag ive 'n tanva pelloc'h
Eus joa vras ar Re Salvete.

Me ho salud, Mari...

O Mari, alc'houez David
A zigor dor an Neñvou,
Buan davedoc'h galvit
Ar geiz-mañ a eneou.
Ar re-mañ 'zo gwall-wanet,
Muioc'h ne c'heller beza.
Grit ma vezint dilivret,
Deuit 'ta d'o dibrizonia.

Me ho salud, Mari...

O Mari, c'houi eo lezenn
An dud devot ha santel;
C'houi eo ivez reolenn
Ar gwir gristenien fidel;
C'houi eo gwir silvidigez
'R re o deus fiziañs ennoc'h;
Roit 'ta laouenidigez
D'ar paour-kêz Anaon pelloc'h.

Me ho salud, Mari...

O Mari, mamm venniget,
Implijit mat ho studi
Evit ar re dremenet
Hep ehana da bedi
Ha da ginnig meritou
D'ho Mab, an Aotrou Jezuz,
Ma kuitay eus o dleou
An Anaon paour ha klemmus.

Me ho salud, Mari...

O Mari, mamm a' druez,
Rentit prim, ni hoc'h asped,
D'ar re varo ar vuhez
Ma vezoc'h ganto meulet
Ha, pa vezint pardonet,
Ma 'z aint, dre ho madelez,
Da repoz'ha da welet
Doue e-kreiz e Elez.

Me ho salud, Mari...

*
**

Pedomp an Itron Santez Barba d'hor miret diouz an
tan, diouz ar gurun, diouz al luc'hed, diouz ar maro trumm
ha, dreist pep tra, diouz ar pec'hed marvel hag an daonedigez
a bado da-viken, hag ivez da c'houlenn ouz Doue ma plijo
gantañ rei d'eomp ar c'hras da reseo hor sakramañchou
diweza a-barz mont er-mêz eus buhez ar bed-mañ.

Er memes amzer e pedimp ar Santez vras-se da sikour
ene an hini tremenet-mañ da veza digemeret gant an Aotrou
Doue en e balez, e-touez ar Sent hag an Elez, dre veritou
Hor Salver Jezuz-Krist, a zo maro war ar Groaz evit hor
prena.

Hon Tad hag a zo en Neñv...

Me ho salud, Mari...

*
**

Me ho salud, o Pemp Gouli,
Gant eur c'hoant bras d'hoc'h enori;
Ra vezo skrivet em c'halon
Jezuz hag e holl Basion.

O va Salver, me hoc'h asped,
Dre ho korf sakr ha gouliet,
Ouz va ene da gaout truez,
Pa guitay va c'horf divuhez.

'Barz ma varvin, o va Jezuz,
Gant ar gwad sakr ha priziuz
O deus ho kouliou skuilhet
Va gwelc'hit nêd diouz pep pec'hed.

Roit d'in ar c'hras hiviziken
Da ober eur gwir binijenn,
Da gaout, pa yezin o tremen,
D'am fec'hed gwir geuz hag anken.

Gwerc'hez, me a c'houlenn ouzoc'h,
Dre ho klac'har bras pa weljoc'h
Gouliou ho Mab, va Salver,
Beza truezus em c'heñver.

Dre veritou ar seiz kleze
A dreuzas ken kriz hoc'h ene
O welet e boaniou garo,
Va sikourit war va maro.

Hag evel m'hoc'h eus resevet
E gorf eus ar groaz diskennet,
Resevit neuze va ene
Ha kinnigit-heñ da Zoue.

*
**

Eur Bater hag eun *Ave Maria* evit pedi sant Diboan,
sant Selvez ha sant Matulin, hag o deus ar galloud da
ziboania bep a ene eus tan ar purgator, ma plijo ganto lakaat
o freder da denna ene an hini tremenet-mañ eus al lec'h a
binijenn-se, ken kaz ma vefe bet kaset di da baea e zle da
justis Doue, ha da c'houlenn ouz hon Aotrou rei d'ezañ eun
digemer eürus ha laouen en e varadoz e-pad an holl amzer.

Hon Tad hag a zo en Neñv...

Me ho salud, Mari...

*
**

D'an deiz bras hag a gasoni,
Dirak hor Barner pa 'z aimp-ni,
E vezo devet ar bed-ma:
Test eo David gant Sibilla.

Neuze pebez spont a vezo
Ar gwall varner-se, pa zeuio
D'ober eun enklask aketus
War oberou ar re gablus.

Eun drompillh klevet a vezo,
Dre ar bed holl e tregerno.
Hag an holl 'n em gavo bodet
E lez varn garo an Dreinded.

Ar Maro a vezo spontet,
Koulz hag an Natur, o welet
An holl dud o resusita
Da gaout o setañs diweza.

Eul leor a vezo digoret
E-lec'h ma vezo displeget
Kement a roio digarez
Da varn ar pec'her hep truez.

Ar Barner 'vezo azezet
Hag a welo 'n holl draou kuzet;
Ne chomo droug an distera
Ha na vezo veñjet ganta.

Allas! petra a livirin
Ha piou d'am sikour a bedin?
Ne gredo ket mont dirazañ
Ar justa den 'zo er bed-mañ.

O Doue bras! o va Rouè!
M' ho ped, saveteit va ene
Pa 'z oc'h ar feunteun a druez
'Ginnig d'an holl silvidigez.

Ho pet eñvor, o va Jezuz,
Oun bet kaoz d'ar veaj poanuis
Hoc'h eus bet graet evidoun-me
Ha n'am c'hollit ket en deiz-se.

Azeza 'c'h eus graet gant skuizder
Ouz va c'hask-me, o va Salver!
Ouz eur groaz hoc'h eus va frenet,
Ho poan arabat 've kollet.

O Barner just, list ar veñjañs!
Pardonit d'in va dismegañs,
'Barz ma vezo 'n deiz 'n em gavet
Da renta 'r gont kriz ha kalet.

Kablus oun, m'her goar, va Doue,
Hogen keuz am eus em ene.
Ruzia 'ran gant mez d'am fec'hed,
Pardonit-heñ d'in, m'hoc'h asped.

Ar Vadalen 'c'h eus absolvit,
Ouz al laer dehou 'c'h eus selaouet;
Rak-se 'ta me am eus esper
Am c'hlevoc'h ivez, va Salver.

Ne veritan ket ho truez,
Met fiziañs 'm eus 'n ho madelez.
Mirit na din, me hoc'h asped,
Da zevi gant ar re zaonet.

Va zennit a-douez ar bouc'hed
En tu kleiz d'eoc'h neuze bodet.
Va lakait e-touez ho teñved
En tu dehou d'eoc'h, Mestr an Eled.

Ha pa ho pezo kondaonet
D'ar flammou an dud villiget,
Gant ar re venniget ivez
Va galvit d'ho rouantelez.

Gant doujañs dirazoc'h stouet,
Va c'halon hogos bruzunet,
Ouzoc'h, va Jezuz, a-vremañ
Va finvez start a erbedan.

O devez trist hag hirvoudus
E-lec'h ma tle an den kablus
Resusita eus e ludu
'Vit beza barnet ganeoc'h-hu!

Pardonit d'ezañ, va Doue,
Ha pardonit d'eomp-ni ive
'Vit ma c'hellimp mont gant fiziañs
Dirazoc'h da gaout hor setañs.

O Jezuz, leun a drugarez,
Ouz an Anaon ho pet truez!
Roit d'ezo, en ho paradoz,
An eternite da repoz.

*
* *

Lavaromp eun *De profundis* evit an Anaon dilezet n'o
deus den da soñjal enno ha na vez graet pedenn ebet evito,
nemet ar pedennou komun a ra hor Mamm Santel an Iliz,
bep sul ha bep gouel, da c'houlenn ouz Doue kemeret truez
outo hag o diboania eus poan ar purgator.

De profundis...

*
* *

C'houi, tud devot, ho pet eñvor
Eus an Anaon er purgator.
Klevit ar c'hri hag ar c'hlemmou
A laoskont a-greiz ar flammou,
'Lec'h m'emañt bepred o c'houlenn.
Digant o c'herent eur bedenn.

« Ma oufec'h petra 'c'houzañvomp
Ho pefe kalz truez ouzomp,
N' oc'h ket 'vit kompren an tourmant
Hon drast spontus ha dizamant.

Siouaz! atao hon dilezit,
En an 'Doue hor sikourit!

Heskinerez ar verzerien
Ha re an holl dorfetourien
'Zo evel plijadureziou
P' o c'heñverier ouz hor poaniou.

'Kreiz an tan emamp o leski,
O chaina, oc'h hirvoudi,
Gant hirnez ha c'hoant da welet
Jezuz, hor Mestr, hag e Eled.

C'houi, mignoned, ha c'houi, kerent,
Bugale a garemp kement,
Truez ouzomp holl ho pezit
Hag ouz hor muez paour selaouit.

C'houi 'zo el laouenidigez,
Ni a zo en dristidigez;
C'houi 'zo dibreder hag eürus,
Ni 'zo 'kreiz eun tantad euzus.

Penaos ez oc'h-c'houi ken dic'hrad
Da lezel hep kaout kalonad
Hag hep klask dont d'o diboania,
Tad ha mamm en tan da geina?

Ho preudeur omp, ho c'hoarezed,
Ho kerent hag ho mignoned,
Holl omp bugale d'Hor Salver;
Grit trugarez en hor c'heñver.

Roit evidomp aluzenou,
Yunit, livirit pedennou,
Tostait ouz ar gomunion
Goude eur gwir gofesion.

War-lerc'h ho pred, c'houi 'lavar, o
Hag hor glaz ar c'hloc'h pa sono
Ha pa dremenoc'h en iliz,
Eur *Bater*, eun *De profundis*.

Met n'eus netra ken talvoudus,
Evit hon diboania founnus,
Hag eun oferenn kinniget
'Vit Anaon ar Re Dremenet.

*
**

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Me ho salud, korf va Salver,
Deuet eus an Neñv war an aoter;
Dre gomz ar beleg diskennet
D'hol lemel holl eus a bec'hed.

Me hoc'h ador, o gwad Jezuz
'Zo er c'halir, tra vuzudus,
'Lec'h ar gwin ennañ kensakret;
Ganeoc'h 'vo hon ene gwelc'het.

Er Sakramant, e gwirionez,
Emaoc'h, Doue a garantez,
Ha, 'vel eur feunteun yec'hedus,
E lamit hor poaniou grevus.

Roit d'in ar c'hras, o va Salver,
Pa zeuy ar maro d'am gelver,
Da vont d'ho paradoz skedus
D'ho meuli gant ar Re-Eürus.

Enor ha gloar d'eoc'h-c'houi, Treinded,
Tad Eternel, Mab ha Spered,
Tri ferson er memes Doue,
Ha bennoz d'ar C'hrist, hor Roue.

*
**

Lavaromp ar chapeled « Requiem » evit ene ar c'henta
pe ar genta a varvo eus ar gompagnunez, hag evit repoze ene
an hini tremenet-mañ, gant aon e vefe dalc'het d'ober pini-
jenn e-barz ar purgator, ma plijo gant Doue e ziboania hag
e gas gantañ d'e varadoz.

Amañ e vo lavaret ar chapeled-se evel-hen.

Da genta: Credo ha *De profundis*

War bep greunenn vihan:

V. Requiem æternam dona eis, Domine.

R. Et lux perpetua luceat eis.

War c'hreunenn pep dizenez,
An « De profundis », ha goude:

Plijet ganeoc'h, Aotrou Jezuz,
Pa 'z oc'h meurbet trugarezus,
Dilivra dre ho pasion
An anaon paour diouz o frizon.

R. Roit d'ezo ar baradoz
Hag an eternite da repoze.

*Pa vez hanteret ar chapeled (1), e lavar ar grasaouer pe ar
c'hrasaouerez:*

Setu Sin hor Mestr hegarat,
Setu Mister ar Groaz anat!
Ouz ar merk kriz-se 'voe staget
Korf an Hini 'n deus hor c'hrouet.

Outañ e voe toullet ivez
Ganas, gant eul lañs, e gostez;
Evit hor gwelc'hi diouz pec'hed,
Dour ha gwad er-mêz 'zo redet.

(1) Gwechall e oa ar c'hiz gant pep kristen mat da staga, e-kreiz
e chapeled, eur groazig bet prenet gantan evit derc'hel sonj eus
eur mision, eur jubile pe eun adoration bennak.



Er bed all, pep-hini a costo...



... ar pez en do ladet er bed-mañ.

Ha setu erfin sevenet
Ar pez en deus David kanet:
« War 'n holl vroiou, Doue ato,
Dre ar c'hoad santel, a reno. »

O Gwezenn gaer ha prizius,
Livet e ruz gant gwad Jezuz,
Dreist pep koad din oc'h bet kavet
Da zougen korf hor Mestr karet.

Santel eo ar groaz ' deus douget
Neb en deus ar bed dasprenet,
Da valañs d'e gorf servijet,
Hag an Ifern dizarbennet.

O Kroaz, c'houi eo hon esperañs,
Ho saludi 'reomp gant doujañs!

Amañ e responto an holl:

Santelait ho servijerien
Ha pardonit d'ar bec'herien!

Ar grasaouer a gendalc'ho evel-hen:

Da-viken ra vezoc'h meulet,
C'houi, tri ferson sakr an Dreinded;
Ni ho ped, mirit mat ato
Neb ouz ar Groaz santel 'sento!

*
* *

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Da wener, grit orezon;
'Mañ Jezuz 'n e basion
Ha gwall-wasket eo 'kalon
Ar Werc'hez, e vamm wirion.

Jezuz 'varvas da wener,
Deiz ar c'hany, deiz ar merzer,
E gern gant spenn kurunet
'Vit hon tenna a bec'hed.

C'hoant en deus bet d'hon espern
Ouz poaniou kriz an ifern,
'Lec'h ma 'z eus taniou grizias
O tevi feuls ha ganas.

O Jezuz, sav alese!
Kalz poan 'c'houzañvez aze.
Allas! dre hor pec'hejou
Ez out gwriet gant tachou.

Plantet hon eus ez kostez
Dir lemm eul lañs didruez!
Daoust ma 'z omp tud digalon,
Ro d'eomp, Jezuz, da bardon.

'N Itron Varia 'sempas
Hag he c'halon a vantras,
Gant ar c'hloaz hag an anken,
Pa rankas he mab tremen.

Kroaz Jezuz, mab ar Werc'hez,
Kroaz Krist, hor silvidigez,
Ra skedo, splann ha dispar,
Da vannou war an douar!

Hon difenn ouz pep saouzan,
Ouz droug hag ardou Satan,
Ouz tan, ouz dour, ouz avel,
Ouz ar seiz pec'hed marvel!

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit enori **Pasion Hor Salver Jezuz-Krist** ha goulenn digant an Aotrou Doue ar c'hras d'eomp da gaout bep a varo mat ha santel, ha da ene an hini tremenet-mañ da vont da dañva al laouenidigez hag an eürusted a zo bet prometet d'an dud fur ha fidel.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Elez an Neñv, deuit d'an douar,
Diskennit war Menez Kalvar
Da ober kañvou d'Hor Salver
Pa ne gar ar bed hen ober.

Me ho ped, Mari, mamm Jezuz,
C'houi ivez, sant Mikêl eürus,
Grit d'eomp kaout keuz bras ha glac'har
Da ouelä e varo dispar.

Hor c'halon a dlefe ranna
Gant an anken an iskisa
O prederia war e boaniou
Hag o welet e c'houliou.

Sellit, pec'herien, gant truez,
Ouz e zaoulagad divuhez;
E benn gant ar spenn 'zo treuzet
Hag en e empenn int sanket.

Gwelit e zremm gwadigellet;
E dreid, e zaouarn 'zo roget
Ha dispennet gant an tachou
'Voe aozet gant ho pec'hejou.

Sellit ouz e gostez toullet
Hag ouz e gorf er groaz savet;
Ho kalon m' her gwel hep keuzia
'Zo graet gant an dir kaleta.

An douar a zeu da grena
Hag, ivez, ar vein da frailha;
An heol, al loar hag ar stered
A guz o dremm gant ar morc'hed.

Ha c'houi, pec'herien aheurtet,
Ne doc'h na doaniet na chalet
O welet maro ho Roue,
Ho Tad, ho Salver, ho Toue.

Gwasoc'h oc'h eget bourrevien,
Gwasoc'h eget ar Juzevien,
Rak gant keuz bras darn anezo
'Voe tizet war-lerc'h e varo.

Ganto n'oa ket anavezet;
'Vito e oa eur fals-profed.
Met c'houi hen anav, o pec'her!
Gouzout a rit eo ho Salver.

Dre ho pec'hejou milliget
Ouz ar groaz ez eo bet staget
Ha digeri 'rit a-nevez
E c'houliou: pebez truez!

M' hoc'h eus evitañ karantez,
Cheñchit bremañ ho kwall-vuhez
Hag e boaniou kriz ha garo
Neuze kerkent a baouezo.

Grit prim enklask 'n o koustiañs,
Goulennit pardon gant doujañs.
Ha kerzit buan da gofes
Gant gwir glac'har ha gant enkrez.

Ha d'ho nesa, hep kasoni,
Eo ret d'eoc'h ivez pardoni.
Ar pezh a zo d'ezañ rentit,
Ha krenn ar pec'hed dilezit.

O pedi, o rei aluzen,
O yun, oc'h ober pinijenn
E tiboanioc'h ho Preur Jezuz
En e Basion druezus.

Ha c'houi, va Doue, va Salver,
Pa zeuy ar maro d'hor gelver,
Hon digemerit, m' hoc'h asped,
D'ho meuli e-touez an Eled.

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* evit ma plijo gant hon
El-Mat beilha warnomp bepred e-pad hor buhez hag hor
c'has, war-lerc'h hor maro, betek porz an Neñvou, hag evit
pedi El-Mat an hini tremenet-mañ da ambrouga e ene tre
betek tron Doue, er baradoz.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

D'e Elez hon diwall 'n deus Doue kemennet
Hag ivez ouz pep gwall, gant aked, hor miret.
'Vel gwir servijerien ez int bet digaset
Da sikour mat pep den da vont d'an eürusted.

Ouz urz Doue sentus, ar c'hannaded santel
'Zo laouen hag eürus o rei d'eomp o skoazell,
Hag he rei a reont c'hoaz gant mui a garantez,
Pa vezomp devot bras d'o enori bemdez.

Ouspenn an Istorion, ar Skritur 'zo karget
Gant brud madoberou o deus graet da nouspet,
Tud hag a oa douget d'o enori ato,
Da c'houlenn aketus o skoazell diganto.

Ha, rak-se, m'her c'harit ha ma vezit ervat
Sentus hag anaoudek e-kenver hoc'h El-Mat,
Ne golloc'h ket ho poan; gant laouenidigez
E kemero preder gant ho silvidigez.

Selaouit an doare da renta ho tever
Ha da veza d'ezañ devot e pep amzer:
Sonjit ennañ 'lies, ho pet doujañs 'vitañ,
Pedit-heñ kalonek, kemerit skouer warnañ.

Ho pet soñj bep mintin, pa zeuit da zihuna,
'N ho kichen 'hed an noz ez eo bet o veilha,
Bepred ouz ho tiwall ouz ar gwall zarvoudou,
Ouz ho tifenn ivez ouz touell an diaoulou.

Pa vezit o sevel hag oc'h en em wiska,
Soñjit e sell ouzoc'h: modest 'rankit beza.
Kargit-heñ da c'houlenn, pa rit ho pedennou,
Grasou puilh evidoc'h digant hor gwir Aotrou.

A-barz kuitaat ho ti, pa 'z it da veaji,
Goulennit mat outañ ac'hanoc'h kaout soursi,
Hag e pep diêster, kuzul ha sklerijenn,
Ma ho lakay ervat bepred er gwir roudenn.

Goulennit e sikour, m' ho pefe eun afer
Ouz unan a vefe diês da embreger,
'Vit m'en em lakay, gant El-mat an den-se,
Da zousaat e imor, da renka 'n traou ive.

Pa son an horolaj, ar Werc'hez saludit
Hag, ouz hoc'h El-Mirer, 'vel-hen 'n em erbedit:
« El Mat, ho pet soursi ac'hanoun-me bremañ
Hag e eur va maro, pa 'z in eus ar bed-mañ. »

*
* *

Eur Bater hag eun Ave Maria eyit pedi Hor Salver hag
e Vamm santel ar Werc'hez da veza trugarezus en hor
c'heñver, pa vimp aet eus buhez ar bed-mañ, ha da deurel
bremañ eur sell a druez ouz ene an hini tremenet-mañ, da
rei d'ezañ ar pardon eus e bec'hejou ha d'e lakaat e-touez
ar Sent hag an Elez e baradoz an Aotrou Doue.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
* *

Piou a c'hellfe teurel evez
E anken Mari, ar Werc'hez,
Hep ma ve e galon gwasket
Gant ar glac'har hag ar morc'hed ?

« Allas ! va mab ker, emezi,
« Houmañ a zo eur falloni,
« Eur vez, eun dizanaoudegez,
« A rankit gouzañv didruez !

« O kaera den a voe morse,
« Penaos oc'h lakaet er stad-se ?
« Ne c'hellan mui ouzoc'h sellet
« Kement ma 'z oc'h displeberet !

« Perak, va Jezuz, va Doue,
« Oc'h bet merzeriet ken gwas-se ?
« Piou 'voe kriz a-walc'h d'ho muntra
« Ha d'ho tispenn 'barz ho laza ?

« Allas ! C'houi, pec'her aheurtet,
« C'houi eo hoc'h eus ken gwallgaset,
« Ken bourreviet va mab Jezuz !
« Ho pet keuz d'ho pec'hed euzus ! »

Me eo, Gwerc'hez, an den dic'hrad
'Zo bet 'n e geñver ken divat;
Me eo 'n hini 'n deus merzeriet,
Siouaz ! ho mab muia-karet.

Rak-se pardon a c'houlennan
Diganeoc'h-c'houi ha digantañ;
Ar peoc'h hoc'h aspedan d'ober
'Trezañ ha me, o mamm dener!

Perak, siouaz! ne deo rannet
Va c'halon gant eur gwir vorc'hed
Da veza, dre va zorfejou,
Roet ar maro d'am Aotrou?

Cheñch buhez bremañ a rankan,
Ha mervel mil gwech a choazan
Kent ' get, dre va fallagriez,
E grusifia a-nevez.

Penaos, Aotrou, d'eoc'h-c'houi diskouez
Va grad-yat, va anaoudegez,
Da veza-vidoun gouzañvet
Eur maro mezus ha kalet?

'Vit ho servija gant enor,
Grit ma vezo va holl defizor
Dougen ganeoc'h ivez bemdez
Ar groaz betek fin va buhez.

Me ' fell d'in chom hiviziken
E-harz ho kroaz gant Madalen
Da ouela druz d'am fec'hejou
'Zo bet kiriek d'ho tourmañchou.

Va c'hambr a rin eus ho kostez
D'estlammi ouz ar garantez
Hoc'h eus em c'heñver diskouezet
P' hoc'h eus gant ho kwad va frenet.

Da vara d'in, o va Aotrou,
'Talvez neuze ho poaniou;
Ha da evach, me ' gemero
Ar gwinegr hag ar vestl c'houero.

Skrivit eta doun em c'halon
Ho pemp gouli, ho pasion;
Merkit enni ho skourjezou,
Ho kroaz, ho spern hag ho tachou.

Da eur va maro, va Doue,
Gwelc'hit gant ho kwad va ene,
Ha roit d'in, dre ho pasion,
Eus va fec'hejou gwir bardon.

*
**

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

Salud, steredenn ar Moriou,
Leun a enor, Porz an Neñvou,
Mamm da Zoue, bepred Gwerc'hez,
Selaouit ouzomp gant truez.

Resevit ar salud santel
'Roas d'eoc'h an El Gabriel;
'N hon touez ar peoc'h diazevit
Ha c'hoaz ano Eva cheñchit.

Torrit chadenn ar bec'herien,
D'ar re ' zo dall roit sklerijenn,
Pellait diouzomp pep dañjer,
Ha grit d'eomp kaout pep madober.

Bezit c'hoaz eur vamm hegarat
E-keñver an dud emzivat;
Grit m'hor selaouo an Hini
Hoc'h eus ganet evidomp-ni.

Gwerc'hez dinamm e pep keñver,
Mamm vadelezus Hor Salver,
Diouz ar pec'hed hon disammit,
Mat ha pur bepred hor rentit.


Grit d'eomp ren eur vuhez santel,
Kerzet war eun hent diskoasell,
Ma vezimp, o welet Jezuz,
Ganeoc'h-c'houi laouen hag eürus.

Gloar bepred d'an Tad Eternel,
D'ar Mab ha d'ar Spered-Santel;
Meulet ra vezo gant pep den
Tri ferson 'n eun Doue hepken.

**


Gras d'ar re ' zo e poan da veza diboaniet,
D'an Anaon paour da veza pardonet;
Peoc'h ha gras Doue d'ar re ' zo beo
Ha repoz vat d'ar re ' zo maro.
Doue da bardono d'an Anaon!

Evel-se bezet graet.



TREDE PENNAD

GRAS GOENAC'H



*... Diredit, Breizhiz, da Santez-Anna-Wened... Goulennit digant
Patronez ho pro ar c'hras da ren eur vuhez santel ha da gaout
eur maro mat... ha pedit evit ar soudarded hag ar vartoloded
maro er brezel !*



En ano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered-Santel. Evel-
se bezet graet.

Ar Pedennou diouz ar mintin

O pasion, o poaniou kriz, o maro prizius va Salver, meulet, benniget hag enoret ra vezoc'h e-pad an holl amzer ! Me hoc'h ador, va Jezuz, hag a ginnig d'eoc'h va spêred evit soñjal ennoc'h hep ehan, va c'halon evit ho karet gant eur garantez eternal, va zeod evit komz alies ac'hanoc'h, va diskouarn evit klevet ho meuli gant joa, va daoulagad evit sellet gant devosion ouz ho skeudenn war an imachou hag an taolennou, va zreid evit mont an alies a c'hellin d'an iliz ha d'ar plasou devot. Erfin, va c'horf a ginnigan d'eoc'h evit gouzañv, dre garantez evidoc'h, kement poan a blijho ganeoc'h digas d'in.

Plijet ganeoc'h, va Salver ker, sellet a-druez ouzin.

M'hoc'h ador, Doue, va C'hrouer,
M'hoc'h ador, Jezuz, va Salver ;
Me 'zo amañ war va daoulin
'Vit ho pedi diouz ar mintin.

Mil bennoz d'eoc'h, o va Aotrou,
Evit hoc'h holl vadoberou :
D'am beza graet, prenet, miret,
Hag en hoc'h Iliz kemeret.

Kement a rin, a livirin,
A c'houzañvin hag a soñjin,
A ginnigan evit ho kloar
Keit ha ma vin war an douar.

'Vit plijout d'eoc'h, Salver karet,
Me a dec'ho diouz ar pec'hed
Hag a heulio piz penn-da-benn
Kement a zo en ho lezenn.

Sellit ouzin, o va Jezuz,
Skuilhit warnoun grasou nerzus,
Ha dreist pep tra grit ma vo don
Ho karantez 'barz va c'halon.

(Kenderc'hel gant ar pedennou, pajenn 21.)

Gwerc'hez Vari, va mamm dener...

*
**

Ar Pedennou diouz an noz

Ne dleomp morse, eme sant Fransez a Sal, chom hep
lavaret hor pedennou...

*(Kenderc'hel gant ar gentel-se, pajenn 20, ha gant ar
Pedennou diouz an noz, pajenn 20.)*

*
**

Evit repoz ene an hini tremenet-mañ:
De profundis...

*
**

Evit goulenn skoazell Itron Varia Wir-Sikour ma plijo
ganti sikour ene an hini tremenet-mañ da veza digemeret
e-touez ar Sent er baradoz da gana meuleudi da Zoue e-pad
an holl amzer.

Itron Varia Wir-Sikour,
Ni ho ped c'hoantek d'hon rekour,
C'houi, ar genta alvokadez
Evit pec'her ha pec'herez.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Salud, Steredenn ar Moriou...

(An orezon-se a zo war ar bajenn 129.)

*
**

Pedomp santez Barba evit ma plijo ganti hon diwall
diouz ar gurun, an tan-gwall ha, dreist pep tra, diouz ar
maro trumm, ha goulenn digant Doue ar c'hras da ene an
hini tremenet-mañ da vont da c'hloar ar baradoz.

« O Itron santez Barba, c'houi hag hoc'h eus an eurvad
da gaout diou gurunenn er baradoz o veza ma 'z oc'h
gwerc'hez ha merzerez, bezit evidomp holl eun alvokadez vat
ha plijet ganeoc'h hon diwall diouz pep dañjer. Grit, ni ho
ped, ma c'hellimp, a-raok mervel, ober eur gofesion vat ha
santel ha ma c'hellimp ivez reseo gant eur galon nêr korf
Hor Salver er Sakramant ha mont goude d'ar baradoz da
veuli Doue da-viken. »

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Evit hon enebourien ha distro ar bec'herien ouz Doue
hag evit ma plijo gant ar Werc'hez, mamm Jezuz, pedi he
Mab da veza trugarezus ouz ene an hini tremenet-mañ.

O Gwerc'hez Vari, leun a druez,
Me ho ped, eñvor ho pezet.
Penaos biskoaz den en e vuhez
N'en deveus gwelet na klevet
Ho pije laosket en abandon
Nikun a gement a zeue
D'en em erbedi d'eoc'h a galon,
Daoust pegen bras pec'her 'vije.
Nann, ne zeuit morse da zilezel
Neb ' laka e fiziañs ennoc'h,
Hag a c'houlenn ho kwarez santel
Ha skoazell nerzus diganeoc'h.

Gant memes fiziañs 'teuan ivez,
O Gwerc'hez, mamm ar gwerc'hezed,
D'en em erbedi d'ho madelez
'Vit beza ganeoc'h sikouret.
E-harz ho treid, o huanadi
'Vel eur pec'her bras ma 'z oun-me,
Ha stouet izel d'o saludi,
Drezoc'h pardon 'c'houlennan-me.
C'houi, mamm 'n Hini anver komz Doue,
Na zisprizit ket va c'homzou;
Va selaouit ha plijet ive
Ganeoc'h rei d'in va ezommou.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Evit enori Pasion Hor Salver a zo maro war ar groaz
evit hor prena bihan ha bras, hag evit ma plijo gantañ kaout
truez ouz ene an hini tremenet-mañ a zo dalc'het marteze
e tan ar purgator abaoe m'en deus kuitaet ar c'horf a zo
amañ war ar varvaskaon.

Me ho salud, o Pemp Gouli...
(An orezon-se a zo war ar bajenn 112.)

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Evit goulenn skoazell ar Familh santel hag hini holl
Sent hag holl Elez ar baradoz, hag evit ma plijo gant Doue
rei d'eomp ar c'hras da gaout bep a varo mat ha santel ha
da ene an hini tremenet-mañ da vont bremañ d'e rouantelez
da gaout eul lodenn eus an eürusted a zo prometet d'ar Re
Salvet.

Jezuz, Mari, Jozef, Joachim hag Anna,
Sant Mikêl ha sant Yann, ha c'houi, santez Barba,
Sant Per, sant Paol ivez, ha c'houi, sant Kaourintin,
Va sikourit bremañ ha c'hoaz pa finvezin.

Va sant paeron, va santez maeronez,
Elez eürus hag holl Sent asambles,
Grit ma c'hellin savetei va ene
Da vont ganeoc'h da welet va Doue.

O va El-Mat, pa 'z oc'h d'in digaset,
Ha pa 'z oun bet ennoc'h ivez fiziet
Dre vadelez va Aotrou, va C'hrouer,
Va skoazellit ha bezit va mirer.

Roit war bep tra sklerijenn d'am spered,
Va diwallit ouz pep droug gant aked,
Ha va renit war hent ar baradoz
Ouz va gouarn ha bemdez ha bemnoz.

Hag en eñvor, va Doue, eus kousked
An Aotrou Krist, hor Salver benniget,
Pa voe gwechall o veva er bed-mañ,
E kinnigan va c'housked d'eoc'h bremañ.

Ho pet truez ouzin, o va Doue,
Plijet ganeoc'h beilha war va ene;
Me hoc'h asped, n' am list ket da gousket
Morse, biken, er maro, er pec'hed.

Pa n' oun ket sur da veza beo warc'hoaz,
Ouzoc'h Jezuz en em erbedan c'hoaz;
En em ginnig 'ran d'eoc'h a-greiz kalon
D'ober ar pezh a garoc'h ac'hanon.

Ouzoc'h, Jezuz, va ene ' erbedan,
'Tre ho taouarn, va Salver, hel lakan
Rak ganeoc'h-c'houi eo bet prenet ivez
Dre ho kwad sakr, Doue a wirionez.

Santez Mari, ken leun a garantez,
O Mamm a c'hras, o mamm a drugarez,
Hon enebour diwar hon tro kasit;
Pa vimp maro, en Neñv hor resevit.

Gloar hag enor d'eoc'h-c'houi, Tad Eternel,
D'ho Mab Jezuz ha d'ar Spered-Santel;
Meuleudi d'eoc'h bepred ha gant pep den,
C'houi tri ferson en eun Doue hepken.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

En enor d'hon El-Mat ha da hini an hini tremenet-mañ
en deus e ziwallet hag e viret e-pad e vuhez hag a heñcho
e ene betek porz an Neñvou, e-lec'h ma vo digemeret gant
Doue ha lakaet e-touez ar Re-Eürus en e varadoz.

Pedomp a-zevri, Kristenien,
En enor d'hon El gardien;
Meritout a ra an dra-se
Abalamour d'e garante.

Hennez eo an El benniget
En deus bepred hon difennet,
En deus bepred hor sikouret
'N hon emgann ouz an droukspered.

Kinnig 'ra d'an Aotrou Doue
Oberou gwella hor buhe,
Ha dere'hel tost 'ray d'eomp ato,
Tre betek 'n eur eus hor maro.

En hor c'heñver eo ken feal
Ma vez ato ouz hon diwall.
Dianaoudek ' rabat beza
E-keñver hor mignon gwella.

Spered eürus eus an Neñvou
Digaset d'in gant va Aotrou,
Mar plij ganeoc'h, va diwallet
Ouz pep droug hag ouz pep pec'hed.

Ac'hanoun c'houi hoc'h eus soursi
Ha bepred 'vezit o pedi;
Pedit ato hag hep skuiza
Rak kollet 'm eus aon da veza.

C'houi 'zo bepred va diwaller,
Va servijer ha va mirer,
Ha ken bras eo ho fealded
Ma n' am c'huitait ket eur gammed.

'Vidoun eo bras ho karante;
Pa bedan, e pedit ive;
Pa vez touellet va c'halon,
En em lakait en orezon.

C'houi, El-mat, 'zo leun a furnez,
A zouster hag a vadelez,
Ha prest da senti ouz Doue
Evit ober e volonte.

P'am be 'enep Doue pec'het
E vezit kerkent glac'haret;
Tridal 'rit gant ar joa vrasa
Pa ven bet o komunia.

Me ho ped, lakait em ene
Ar c'hoant da servija Doue;
Roit d'am spered devosion,
Gwir geuz ha glac'har d'am c'halon.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

**

Evit goulenn skoazell hor Mamm santez Anna hag evit
ma plijo ganti pedi Jezuz, he mab bihan, da rei da ene an
hini tremenet-mañ peoc'h ha levenez en e varadoz.


M' hoc'h ador, va Doue, ha gant anaoudegez
D'eoc'h e kasan hirio bennoz ha trugarez
'Vit beza enoret ha savet ken uhel
Hor mamm santez Anna, patronez Breiz-Izel.

Eienenn a c'hrasou ha skouer a santelez,
Dor zigor 'n ho kalon roit d'eomp gant madelez,
Ha daoust d'eomp da veza pec'herien digalon,
Pedit ho mab bihan da rei d'eomp e bardon.

Itron gaer ha karet, rozenn visterius,
Er bed e lakajoc'h Mari, mamm da Jezuz,
Ar Werc'hez dibabet a-hed an amzeriou
Da zigas levenez d'an douar, d'an neñvou.

C'houi eo gwir batronez an holl dud eureujet
Ha gwir skoazellerez an holl intañvezed,
Skouer ar gwragez santel, teñzor ar vertuziou
Ha, da gement ho ped, eur vamm leun a c'hrasou.

Gant fiziañs 'kinnigan d'ho karantez santel
Bro an dud kalonek, va bro gaer Breiz-Izel;
Pedit 'vit va broiz hag a zo kristenien
Hag an trec'h roit d'ezo war o enebourien.



Evit rei skoazell da
eneou ar purgator,
n'eus ket par da sa-
krifis santel an ofe-
renn. Kristenien, it
alies d'an oferen hag,

a-unan gant ar beleg,
kinnigit da Zoue; evit
ho tud varo, Korf ha
Gwad H. S. Jezuz-
Krist.

Itron santez Annia, bezit alvokadez
Ar bec'herien doaniet 'zeu d'ho pedi bemdez;
Da bennou bras ar vro roit ar c'hras d'hor blenia
Gant lezennou leal, bepred diouz ar gwella.

Skoazellit, mamm garet, hon tud en armeou,
Astennit ho taouarn a-us d'an emgannou;
Kasit kuit eus hor bro hon holl enebourien,
Ha lakait en hon touez eur feiz kreñv da-viken.

Prizit, mamm venniget, 'n ho kwarez kemeret
Ar Pab, vikel Jezuz, Tad santel ha karet,
An holl gardinaled, ivez an eskibien,
Beleien hon Aotrou, mirourien e lezenn.

Grit d'ar re 'zo 'vervel, o Mamm garantezus,
Kaout eur maro santel, eun tremenvan eürus;
Gras kaer ar vadeziañt roit c'hoaz d'ar vugale
Ha d'ar gwragez poaniet ar yec'hed dizale.

O Tad an holl vadou, 'n em lakaomp 'n ho kwarez
Hag hini ar Santez a zo mamm d'ar Werc'hez;
Pedomp an Dreinded sakr da zont d'hor pardoni
Ma c'hellimp mont eun deiz d'an Neñvou d'he meuli.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
Me ho salud, Mari...

*
**

Evit ma vo diboaniet buan **eneou dilezet ar purgator**,
ha gant aon e vefe bet dalc'het ene an hini tremenet-mañ
e tan ar bed all da baea e zle da Zoue, ma plijo gant Jezuz
hag e Vamm santel dont d'e ziboania ha d'e gas ganto d'ar
repozvan eternal.

O va Doue, tad a drugarez, c'houi hag a fell d'eoc'h e
vimp holl salvet, sellit a-druez ouz an eneou a zo dalc'het
e poaniou ar purgator. Plijet ganeoc'h o diboania ha rei
d'ezo, en ho paradoz, ar joausted emaint o c'hortoz.

Ho pet soñj, va Doue, int bet fidel d'ho servija war an
douar, daoust d'ar faziou o deus graet en hoc'h eneb, ha
kement-se o veza ma 'z eo an den bresk hag hep bolontez
dre natur.

Plijet ganeoc'h o lemel kuit eus an tourmañchou hag an
deñvalijenn evit o lakaat en eul lec'h a beoc'h hag a skleri-
jenn.

Na zisprizit ket, va Doue, ar bedenn a gasan d'eoc'h,
gant eur galon izel, evito holl ha, dreist pep tra, evit ar re
a dleomp pedi evito.

Ar c'hras-se a c'houlennan diganeoc'h dre veritou Jezuz-
Krist, a zo bet maro evidomp war ar groaz hag en deus
sevenet d'ho justis evidomp holl.

Evel-se bezet graet.

De profundis...

*
**

Lavaromp ar **chapeled « Requiem »** evit anaon hon tud
hag evit ene an hini tremenet-mañ.

(Gwelit uheloc'h, pajenn 119.)

*
**

C'houi, tud devot, ho pet eñvor...
(An orezon-se a zo war ar bajenn 116.)

De profundis...

*
**

Klevit gant souez ha spouron
Ali ar Roue Salomon...
(An orezon-se a zo war ar bajenn 88.)

De profundis...

*
**

D'an deiz bras hag a gasoni...
(An orezon-se a zo war ar bajenn 114.)

De profundis...

O Kroaz, c'houi eo va esperañs,
Ho saludi 'ran gant doujañs;
Santelait ho servijerien
Ha pardonit d'ar bec'herien.

Elez an Neñv, deuit d'an douar...
(*An orezon-se a zo war ar bajenn 123.*)

De profundis...

Peur, va Doue, 'vezo disammet
Va ene diouz ar chadennou
A zo ouz e zerc'hel ken doaniet
Er c'horf-mañ gant kalz a boaniou ?
Peur 'vezo ganin-me dilezet
Eur vuhez karget a anken
'Vit mont da vuhez an eürusted
D'ho kwelet, Aotrou, da-viken ?

O buhez hir, o buhez poanius,
Am eus er bed-mañ da dremen.
Harlu kriz ha meurbet-ankenius,
Peur e welin-me da dermen ?
Peur az kwelin-me oc'h echui ?
O bec'h enouüs va buhez ?
Siouaz ! ne ran nemet hirvoudi
War da stadig paour gant truez.

Leun eo ar bed a siou noazus,
Karget eo gant fallagriez;
N'eus ennañ nemet tud fougeüs,
Nemet poan ha tristidigez.
Siouaz ! war var da goll e ene
Emañ ennañ an den atao
Ha dalc'het eo, 'vel gant eun ere,
E-kreiz eur brezel hep arzao !

Prizon ankenius va c'horf douar
A zalc'h va ene chadennet;
Ennañ emacoun atao er glac'har,
Atao en aon, atao nec'het !
Peur e vezi-te, 'ta diskaret
Pe dre ar maro digoret,
Ma c'hellin-me va Doue gwelet
Ha nijal d'am bro d'e garet ?

O va Jezuz, leun a vadelez,
Ouzin plijet ganeoc'h klevet
Ha va zenna d'ho rouantelezh
Ma vezin ganeoc'h unanet.
Ya ! C'houi hepken eo a c'hell gwalc'ha
An holl c'hoantou 'zo em ene.
Ar bed-mañ nemet va heskina
Ne ra pelloc'h e pep doare.

Siouaz ! Ennañ n'em eus ken dudi,
Ennañ n'em eus ken levenez
Nemet o c'houzañv hep damanti
Pep poan hag ivez pep enkreiz.
Evit plijout d'eoc'h c'houi, va Salver,
Ha diskouez d'eoc'h va c'harantez,
Mervel pe c'houzañv 'hed va amzer.
N' em eus amañ ken bolontez.

An horolaj, pa sko he zaoliou,
'Laka em c'halon levenez
Rak seul-vui e tremen an euriou,
E tosta fin va zamm buhez
Ha, war eun dro, ar mare eüs
M' am bo ar c'hras hag an eurvad
Da nijal d'ar baradoz skedus
Da gaout Doue, mestr hegarat.

O Baradoz, palez dudius
Ar Re-Salvet hag an Elez,
Ti Hor Salver ken karantezus
Hag e Vamm santel, ar Werc'hez,

Pegen lirin ha pegen laouen
'Pad an holl amzer 'vezin-me
Oc'h ober ganto holl, kavandenn!
N'em eus ken hast nemet da-se.

Gant ar c'hoant, va Doue, d'ho kwelet
E-kreiz hoc'h eürusted santel,
Gant ar mennad e vezoc'h meulet,
E varvan, pa n' hellan mervel.
Va c'hasit ganeoc'h hiviziken
Evit ma c'hellin ho karet,
Hep aon ebet da veza biken,
, Mestr, diouzoc'h, dispartiet!

De profundis...

*
**

Mab-den, sonjit en hoc'h eur diweza,
Pa vezo ret da-viken finveza
Gant ho puhez, ho pinvidigeziou,
Ho kloar dister, ho plijadureziou.

Krouer ar bed, Doue, en deus barnet.
Ez eo hep mank ar re veo kondaonet
Eur wech hepken da c'houzañv ar maro;
Lakaomp evez ha diwallomp ato.

Ar maro kriz, garo ha diremed
A zo lemmoc'h eget birou lemmet,
Ne bardonas da zen morse, biskoaz,
Hag a-dra-sur ne bardono ket c'hoaz.

Kenkoulz ez a da lez ar rouaned
Eget da di ar paoura peizanted;
N' en devez aon na rag bras na bihan;
Heñ, hep avar, 'zo mestr war bep unan.

Ar maro kriz a vale diarc'henn;
Hep trouz ebet ez ay d'ho tiarbenn.
Mut ha bouzar, ne ra van ouz klemmou,
Ouz yaouankiz, na gened, na madou.

Tud touellet gant kement 'zo terien,
Sonjit ervat, sonjit en ho termen.
Er momed-se da betra 'servijo
Ar pezh hoc'h eus kement karet ato?

Gwelet hoc'h eus tud e pred ar maro
Hag o deus bet o gwalc'h a draou ato;
Holl e rankont bremañ o dilezel,
Pa zeu souden ar maro d'o gervel.

A! Goulennomp outo gwitibunan:
« Peseurt anken a santit-hu bremañ?
« Cheñchet hoc'h eus ho roz gant drein garo
« Hag ho mel dous gant ar vestl ken c'houero.

« Uzurer kriz, gant avi, pizoni,
« Hoc'h eus berniet gwall frouez ho laeronsi;
« Kement hoc'h eus dastumet a golloc'h,
« Hag en o lec'h an ifern a gavoc'h.

« Livirit d'in, marc'hadour pinvidik,
« Pelec'h emañ hoc'h arc'hant, ho trafik? »
Allas! Allas! ne chomint mui ganta,
Pa zeuy d'ar fin ar maro d'e laza.

« — Ha c'houi, den vil ha lubrik milliget,
« Petra ivez hoc'h eus-c'houi gounezet?
« Aon ruz am eus, bras ha spontus-meurbet,
« Rak difazi 'z eoc'h da leski, me 'gred.

« Mezvier dallet, gant ar gwin dibouellet,
« Diskouezit d'in ar fin eus ho pec'hed.
« Ar maro yen a sarro ho kenou,
« Ha kenavo d'ho plijadureziou!

« Merc'hed fier, hogos diskiantet
« Gant ho krogou, ho pokou milliget !
« Ho kuchou brao hag ho pleo-alaouret
« Rouestlet 'vezint gant skoulmou an naered.

« Ho fas ken kaer a veze ken gwelc'het,
« Er melezour ken lies-adoret,
« Hag ho taouarn ken gwenn hag olifant.
« Holl e vezint dantet gant ar sarpant.

« Poull ho kalon, ho pruched dizolo,
« Fest d'an naered goude 'r maro vezo;
« En eur foz doun e vezoc'h diskaret
« Ha penn-da-benn gant ar preñved debret. »

Soñjomp eta, ha soñjomp a-zevri,
E-barz anken, glac'har ha melkoni
Ar pec'her kêz, pa vez prest da vervel,
Pa vez d'ezañ ret ar bed dilezel.

Pebez morc'hed o welet kement-se
Hag o keuzia d'ar pec'hejou noz-de.
Unan hepken a c'hell dizesperi;
Gwelet kant mil, o pebez melkoni!

Va mignon ker, o klevet kement-se,
Lakait evez e tri dra noz ha de;
Skrivit-i doun en ho kalon ato
Hag eur maro evurus ho pezo.

Ma ve ret d'eoc'h a-benn eun eur mervel
Hag ho kerent-ha pep tra dilezel,
Pegen spontus 'vefe ho nec'hamant
Da veza bet gwall-bec'het dizamant!

D'an eil, soñjit peseurt oberou mat
A garfec'h-c'houi beza graet en ho stad.
D'an trede poent, pegen bras pinijenn
Ho pefe c'hoant d'ober, ma ve moien.

Ar pezh 'garfec'h beza bet graet neuze,
Grit a-zoare hag hep dale morse;
Neb a sarro 'n nor ouz ar Spered-Glan
A gavo sur ha dizesper ha poan.

Ha c'houi, tud koz, m'hoc'h eus eun tamm furnez,
Grit pinijenn er rest eus ho puhez;
C'houi, tud yaouank, mirit lezenn Doue,
A-raok warc'hoaz e varvoc'h marteze.

De profundis...

*
**

Koll a ran va nerz bep eun tamm, berraat a ra va buhez
na n'em eus mui nemet ar bez da c'hortoz. N'en em gavan
ket e stad a bec'hed marvel, ha, koulskoude, n'eus nemet
traoù glac'harus dirak va daoulagad.

Va zennit a boan, o va Aotrou, ha va lakait en ho kichen,
ha neuze ra zeuy neb a garo da glask noazout ouzin!

Tremenet eo devezioù va buhez, ha bremañ ne zistroit
mui; diêzet eo va spered gant mil soñjezon enkreuz na
reont nemet heskina va c'halon. Cheñchet o deus an noz d'in
en deiz o virout ouzin da ziskuiza, met, war-lerc'h nec'hamant
ha teñvalijenn ar vuhez-mañ, ec'h esperan gwelet sklerijenn
eben. Ma kemeran c'hoaz pasiañted, e welin, a-greiz-holl, ar
fin eus va foaniou, pa vo graet va gwele d'in er bez ha pa vin
lakaet da loja ennañ. Neuze e livirin d'ar vreïnadurez:
« C'houi eo va zad », ha d'ar preñved: « C'houi eo va mamm
ha va c'hoar! »

Met e-pelec'h emañ bremañ an diboagn hag ar frealz a
c'hortozan-me digant va zud ha va mignoned? Ha piou a
daolo evez er basiañted a rankan-me da gemeret er poaniou
a c'houzañvan?

O veza ma pec'han bemdez ha ma choman hep ober pini-
jenn, ez oun strafuilhet holl gant aon rak ar maro, hag o
veza na c'heller ket dont er-mêz eus an ifern, pa vezet aet
di, ho pedan, o va Doue, da gaout truez ouzin ha d'am
savetei.

De profundis...

*
**

Sonjit, den touellet,
Er bed-all hep ehana!
C'houi, siouaz! 'zo dallet
Gant an techou fallakra;
Sonjit e rankoc'h mervel
Ha kuitât ar bed-mañ,
Pa zeuy Doue d'ho kervel,
A-barz nemeur amañ.

Gant kalz a spont neuze
Ez eoc'h dirak ar Barner:
Striz eo justis Doue
Ha gwaz a-se d'ar pec'her.
Eur setañs a resevoc'h
A vuhez pe a varo,
Hag ar stad m'en em gavoc'h,
Da-viken a bado.

Nemet eur wech hepken
Ar baradoz ne goller,
Hag eus an ifern ken
En em denna ne c'heller;
Hogen baradoz kollet,
Setu tout aet da goll,
Ha baradoz gounezet,
Setu gounezet holl.

Roet en deus Doue
Ar choaz d'eoc'h, e gwirionez,
En eil pe egile
Da vont diwar ho puhez:
En ifern pe 'r baradoz
E rankoc'h chom ato,
Da zevi pe da repoz,
Goude pred ar maro.

Ma sonjfec'h en traou-se,
Es 'vefe d'eoc'h kimiada
Diouz kement d'hoc'h ene
A ra gaou eus ar gwas;

'Lec'h klask an tu da bec'hi,
A-grenn e tistofec'h;
E-lec'h en em beurzaoni,
Pinijenn a rafec'h.

Koulskoude oc'h ken dall,
Ken diboell, ken aheurtet,
Ma n'eus nemet traou fall
E pep korn eus ho spered.
Dievez war an afer
Eus ho silvidigez,
N'hoc'h eus bet en he c'heñver
Nemet leziregez.

Saveteit hoc'h ene;
An ifern dianzavit;
Choazit palez Doue,
Lakait ho poan d'e c'hounit
O tiskouez ho trugarez,
O heuilh ar vertuziou,
O ouestla ho karantez
Da Zoue, hon Aotrou.

Kofesait a galon
Ho pec'hejou tremenet,
Ha goulennit pardon
Gant keuz ha gant lealded.
Lakait doun en ho spered
Ar c'hoant start da drec'hi
War hoc'h ene ken techet
Ha troet da bec'hi.

Reizit gwell ho puhez
Hep fiziout pell da veva,
Tremenit pep devez
'Vel pa ve an diweza,
Hag ho kalon distagit
Diouz holl draou ar bed-ma;
Neuze, hep aon, prederiit
War hoc'h eur diweza.

Ar bed a dremeno
Ha c'houi a raio ive;
An ifern a bado
E-doug an eternite.
An tourmant a zo ennañ
Biken ne echuo,
Met plijadur ar bed-mañ
Buan a baouezo.

Siouaz! pegen bras eo
Follentez ar c'hrouadur
A choaz devi ez-veo
Evit dister plijadur,
Devi 'n ifern da-viken
Da-heul an droukêlez,
Bepred e-kreiz an anken,
Hep frealzidigez.

Na bras ez eo furnez
Neb a nac'h ar blijadur,
A laosk ar gwall-vuhez,
A dro kein d'ar bed hudur,
Hag a gav gwell ar poaniou,
Evit kaout an eurvad
Da vont goude d'an Neñvou
Gant ar Sent hegarat.

N' o devez ar seurt-se
Tamm melkoni o vervel,
Pa ouzont 'ro Doue
D'eo ar vuhez eternal.
O anken e levenez
A vez cheñchet neuze;
Glac'har na tristidigez
N'o devez ken goude.

Dibab 'ran, va Salver,
Em buhez ar binijenn;
Gouzañv 'rin gant douster
Bep seurt poan hiviziken.

Met c'houi, o Spered-Santel,
D'am c'halon ken hedro,
Roit nerz, aked ha skoazell
Ma vezin d'eoc'h ato.

D'ar c'hig e troan kein,
D'ar bed ha d'an droukspered,
Ha d'am holl dechou brein.
D'ar bizoni villiget,
'Vit ma c'hellin, va Jezuz,
Em maro, hep anken,
Mont d'ho kaout d'ar Vro Eürus
D'ho meuli da-viken.

De profundis...

*
**

I

Me hoc'h asped, Spered-Santel,
Roit d'in sklerijenn ha skoazell
Da sevel gwerz ar berejou,
Talvoudus d'an holl sperejoù.

Eun tamm amzer pa 'm eus kavet,
Danvez eur werz am eus klasket,
Danvez eur werz, hini 'r vered,
Evit ma vo muioc'h doujet.

Selaouit, kristenien digar,
Eur gentel gaer hag helavar;
Lakait-hi doun en ho spered
Hag ho kalon a vo tizet.

Ret eo douja ar berejou
'Lec'h m'eo gourvezet ar c'horfou;
Ar Skritur-Sakr d'eomp her c'hemenñ,
An Iliz ouzomp her goulenn.

Ar groaz santel 'zo er vered,
Salver ar bed outi staget;
Eur maro kriz 'n deus gouzañvet
'Vit hor prena diouz ar pec'hed.

'Barz ar vered emañ korfou
Hon tud koz, tadou ha mammou,
Re hor breudeur, hor c'hoarezed,
Hor c'herent hag hor mignoned.

Selaout o mouez truezus
En ho kalon o skei klemmus;
Grit evito prim eur bedenn,
Ma torro o foan, o anken.


Ho pet truez, va mignoned,
Truez ouz ar re dremenet.
Dec'h o zro, warc'hoaz hon hini:
Gwerzet holl d'an Ankou omp-ni.

Pa dreuzit tachenn ar vered,
Pedit 'vit ar re dremenet:
Eur « Bater », eun « De profundis »,
Hervez giz santel an Iliz.

Chomit a sav 'ta, kristenien,
Rak eul lec'h sakr eo he zachenn;
Soñjit mat er re 'zo enni
Ha paouezit 'ta da bec'hi.

Anat eo d'an holl, koulskoude,
E varvoc'h 'velto dizale;
Neuze 'rafe vad eur bedenn
D'hoc'h ene 'kreiz ar binijenn.

Ne gomzan ket eus ar poaniou
Ho po da c'houzañv, va zudou;
Er bed-all e vint lodennet
Hervez grevusted pep pec'hed.



Kalz a c'hellit dre ho poaniou,
Pedennou hag oferennoù;
Ken didruez na vezit ket,
En an' Doue hor sikouret !



Ha pa vimp-ni aet e gloar Doue,
Evidoc'h ni bedo ive;
Ouzomp eta holl selaouet;
En an' Doue hor sikouret !

(Kantik ar purgator.)

Ne gomzan 'met eus ar vered
A laka va c'halon mantret,
Pa soñjan 'vin enni beziet
Ha kuzet diouz va mignoned.

N'omp ket mestr da chom er bed mañ
Ha sponta ne dalv ket bremañ;
Hon tud koz ez eo pulluc'het
O c'horfou e-barz ar vered,
Hag hor re-ni a ray ive,
Arabat laret marteze.

II

Mantra a ray neb a garo,
Ar wirionez, sur, a glevo,
Rak biken ne lezin kuzet
Ar pezh a zo war va spered.

Selaouit, tud lik ha gadal,
Petra 'dalv pec'hi ha bragal?
Sellomp ouz ar Beurbadelez
Ha nann ouz ar blijadurez.

Petra ' dalv larda ar c'horfou,
Peogwir e vreinint er beziou?
Bez 'e vint boued druz d'ar preñved,
Pa vint bet kaset d'ar vered.

Perc'henned vras hag aotrounez
Gwalc'het gant ar chervad bemdez,
N'oc'h nemet eun dournad ludu
Ouz tammou eskern diskurlu.

Ne vern ket pegen galloudus
Ez oc'h-c'houi, na pegen otus,
Rak emberr ez ay ho korfou
D'ober temz 'barz ar berejou.

Doujit 'ta douar ar vered:
War e c'horre oc'h bet douget
Betek mên-font ar vadeziant
'Vit beza kristen eveziant.

Tremen a rankoc'h c'hoaz warnañ
Pa vo deut hoc'h eur diwezañ
Rak, pa soñjoc'h an nebeuta,
'Vezoc'h kaset di da vreina.

Tud pinvidik, set 'eun ali
D'ho sklerijenna difazi:
Arc'hant, danvez war an douar
Ne reont 'met kreski ho klac'har.

Rak, goude ma vezoc'h maro,
Hoc'h holl draou war ho lerc'h chomo.
Perak eo ho kalon staget
Ouz an arc'hant hoc'h eus berniet?

Ha c'houi, mezvierien kaledet
En ho si fall ha milliget,
Selaouit 'ta va c'huzulioù
Ha tavit gant ho malloziou.

Pa vezit mezo 'vel chatal
E treuzit ar vered, dichal;
Eun dachenn-foar n'eo ket houmañ,
D'eoc'h gant doñjer hel lavaran.

Luc'hachou ha traou diseven
A zislonkit en eur dremen;
Koulskoude e tigemero
Ho korfou war-lerc'h ho maro.

Laret 'ran d'an uzulierien
N'o devo ket o gwalc'h biken
Eus an douar 'zo er bed-mañ
Ken na 'z aint da vreina ennañ.

Pa 'z a, gant an ezomm kaset
Eur c'hristen bennak d'o c'havet
Da c'houlenn 'vit arc'hant douar,
Set 'amañ o c'homzou digar :

« Douar n'am eus ket da werza,
Me 'garfe kaout c'hoaz da brena. »
Ken na vo o genou karget
Gant douar eveus ar vered,
Ne vo ket o c'halon gwalc'het
Na diouz traou ar bed distaget.

Pa vezit 'c'h ober bailhezou,
E vuzulit an douarou.
Arabat beza souezet,
Hoc'h-unan 'vezoc'h muzulet:
Merket 'vo hoc'h hed, ho lec'hed
'Raok rei d'eoc'h ho lod er vered.

Douar 'vo eno dindanoc'h
A bep tu hag ivez warnoc'h;
Nag heol na loar n'helloc'h gwelet
Diouz an toull-se, 'vidoc'h kleuzet.

Siouaz! hoc'h arched, pa vreino,
Gant pouez an douar a buko
War hoc'h eskern gwenn ha krazet,
Krignet hep mar gant ar preñved.

Pa vezoc'h d'ar vered kaset,
Ho kerent hag ho mignoned
Kañvou bras d'eoc'h-c'houi a raio
Ha warc'hoaz hoc'h ankounac'ho.

Kerkent ma vezoc'h douaret
E tachenn ar re dremenet,
Ho pezh hep mar 'vo dilezet
Hag ar soñj ac'hanoc'h kollet
Siouaz! gant ar re ho kare
Hag ar re ho taremprede.

Ouz ho korf oc'h bet dizamant
Da skrapa danvez hag arc'hant:
'Mañ ho kerent 'c'h en em ganna
Diwar-benn al lodenn vrasa.

Tabut etrezo 'zo savet
Ha n'int ket prest d'en em glevet;
Kiriek-bras ez oc'h hoc'h-unan,
Ma hoc'h ankouañ ken buan.

Gant evez ho poa priedet
Eun tamm brao a voued d'ar preñved
Hep soñjal tamm en hoc'h ene
Hag a bado keit ha Doue.

Ar pezh 'zo an talvoudusañ
'Dlefe beza sellet outañ;
Lod gant o ene 'zo dichal
Hag e vevont evel chatal.

Ma ve d'eoc'h hirio kemennet
'Vezoc'h warc'hoaz d'ar bez douget,
Hag ho pe dek mil skoued leve,
D'eoc'h eta petra 'servijfe?

Karet 'rafec'h chom er bed-ma
E-lec'h 'n hini 'vevo 'n hira
Ha pa rankfec'h koll ho tanvez
Ha beva 'kreiz ar baourentez.

Ha ne ziskouezit ket aze
Emañ e stad fall hoc'h ene?
Ar Sent biskoaz n'o deus krenet
O soñjal 'n douar benniget.

Ganto 'c'hoarvez da vihana
'Vel gant eun den o tiloja
Hag o kuitat eun ti dister
'Vit mont da chom en eur maner.

Doue 'n deus eur rouantelez
Karget a bep seurt levenez;
Ma 'z a di 'n nebeud eneoù
D'ar vered 'z a an holl gorfou.

O'houi, pa savit eun ti nevez,
Gant kalon e poagnit bemdez,
War zigarez ez it d'ezañ,
Pegeit oc'h sur da chom ennañ?

Labouromp 'ta 'vit gloar Doue,
Re ziwezat e vo goude;
Ar bed-mañ ne ra 'met tremen,
Ar bed-all 'bado da-viken.

Ar pezh am laka souezet,
P' am bez warnezañ prederiet,
Ez eo gwelet na gemerer
Ouz an ene paour nep preder.

Met ar c'horfou brein a vager
Floura ha c'houeka ma c'heller:
Arabat 'vefemp diêzet
Na gant netraig enkrezet.

N'oun ket deut d'am digarezi:
D'in ivez 'plij an diegi.
Krena 'ran, pa daolan evez
E chomin em bez divuhez.

Em gwele, skuiz p'en em gavan,
Da cheñch kostez trei a c'hellan;
Met, allas! pa vin er vered,
Difinv e chomin gourvezet.

III

Douar santel ar berejou,
O'houi 'zigemer an holl gorfou,
O'houi 'zigemer ar bec'herien
Koulz hag an dud a binijenn.

D'ar vered, diouz tro, 'vo kaset
An holl Sent, an holl Sentezed,
An noblañs hag ar rouaned,
Ar beorien, ar vondanied;
D'ar vered ez ay o c'horfou,
Da belec'h 'z ay o eneoù?

'Tre tud galloudus ha dister
Renk ebet eno ne gaver,
Met ar c'henta 'vez sebeliet
Kerkent d'an douar 'vez douget.

Eno 'z eus eul lec'h prientet
'Vit lakât an hugunoded,
Hag ar re 'verra o buhez
'Gaser di ivez didruez.

Kemm ebet n'eus eno ivez
'Tre peizanted hag aotrounez;
Ar re binvidik, koulskoude,
O deus eur bez war o gorre.

Bez ar paour 'zo anavezet,
N'eo 'met eur bern douar renket;
E relegou ennañ 'chomo
Ken na vint savet ac'hano.

Beziou 'r veleien er vered
Eo ar re uhela savet,
Evit ma vo anavezet
Servijerien vat an Dreinded.

Petra 'dalv gwelet ar beziou
A zo o c'holei ar c'horfou ?
Ar re-mañ 'zo bet pulluc'het
Ha gant an douar kemmesket

'N em gavet eo bet o ene
E lez-varn an Aotrou Doue ;
Ar pezh o deus graet, a ouzont ;
N'ouzomp ket 'pe lec'h 'n em gavont.

O douar santel ar vered,
Te hag a dle beza doujet,
Gra d'eomp gwelet hor gwall-dechou
Kenkoulz hag hor madoberou.

Em c'halon 'sko eun taol kontell,
Pa soñjan, o douar santel !
E vo ennout beziet ivez
Va c'horf paour, pa vo divuhez,
Ha ne vo ket anavezet
Va relegou 'barz ar vered.

Hon eskern, pa vint diveziet,
Hep tamm doujañs a vo taolet
Dre ar vered hag ar garnel,
Dindan ar glao hag an avel.

A-benn eur maread goude
E vint dastumet adarre,
Ar wech diweza hep arvar,
Ha stlapet 'n eun toull en douar.

Ar bed-mañ keit ha ma pado,
Ne c'hellimp sevel ac'hano,
Ken 'vo deiz ar Varn Diweza,
Deiz kriz hag eus an euzusa.

A-berz Doue eun el 'zeuio
Gant eun drompilh, hag e sono
Hag e c'halvo d'ar berejou
'N eneo war-dro ar c'horfou.

Evel 'n o amzer dremenet
E vint adarre unanet,
Hag e lavaro an ene
D'ar c'horf paour : « Sav 'ta alese ! »

« Gwechall te 'heulie da gredenn,
Bremañ senti 'vo da lezenn ;
'N em unani 'raimp hep arvar
Da vont d'ar joa pe d'ar glac'har.

« Sav alese ha sav buan !
Hag ez aimp hon-daou en unan.
E traonienn Jozafad goude
E vimp sur barnet dizale. »

Heti a ran a wir galon
Klevet mouez kreñv an Tri Ferson
O lavaret d'an dud neuze :
« Deuit ganin holl, va bugale ! »

O kaera komz a ve hounnez,
Ma lavarfe Mab ar Werc'hez :
« Hoc'h ene en tan kempennet
Hag ho korf en douar breinet
A reno eur vuhez nevez
Er Baradoz, bro an Elez. »

De profundis...

*
**

Seblañtout a ra an niver bras a dud a vary bemdez lavaret d'eomp dalc'hmat : « Hirio hon tro-ni ha warc'hoaz ho hini ! » Hag e tlefemp teurel evez, pa zeu tud hag hon eus karet d'hor c'huitaat evel-se, eo kement-se ivez eun doare maro evidomp.

Sonjit mat eta, hiviziken, petra eo ar maro : eun disparti krenn eo diouzomp ha kement tra a zo er bed. Pa vezoc'h en em gavet er mare trist-se, ne vo mui evidoc'h na pinvidigez, nag enor, na plijadur, na karg, na kerent, na mignoned.

Hag ho pefe kement tra a zo er bed-mañ, netra anezo ne day d'ho heul, ha kement a yelo ganeoc'h ne vo nemet hoc'h arched hag eul liñser gwriet en-dro d'ho korf gant spilhou.

Kriz eo ar maro ha kerzet a ra diarc'henn. Na dromplit ket Doue, na rit ket goap anezañ. Ar pezh en do hadet an den en e vuhez a vo gantañ da vedi ha da zastum war-lerc'h e varo.

Rankout a ra an holl suja d'ar maro; rak-se, arabat d'eoc'h fiziout war hoc'h oad, war ho yaouankiz, war ho nerz na war ho kened. Kuzet eo ar maro ouz daoulagad an dud, hogen ouz Doue ne deo ket.

Eur c'hristen a dle deski ober tri dra, gouzañv, senti ha mervel: gouzañv gant pasiañted, senti gant eur galon izel ha mervel hep klemm... Gouzañv kement poan a zeu d'ezañ, senti ouz kement hini en deus ar gwir da c'hourc'hemenn d'ezañ, mervel da gement c'hoant ha soñj fall... Gouzañv hep grozmolat, senti hep enebi, mervel hep disfiziañs... Gouzañv evel eur pec'her, senti evel eur c'hristen, mervel evel eur Sant.

De profundis...

*
**

Eur *Bater* hag eun *Ave Maria* en enor da **sant Fransez a Asiz**, ar sant bras en deus savet an Drede-Urz, a gare kement Hor Salver hag an dud paour ha reuzeudik, ha n'en doa aon ebet rak maro ar c'horf, ma plijo gantañ goulenn digant Doue ar c'hras da ene an hini tremant-mañ da chom beo ha lugernus, re-bar d'eur c'houlaouenn war elum, ha da veza lakaet e-touez an eneou salvet a zo er Baradoz o skedi evel flammou santel dirak an Dreinded Sakr.

O Tad sant Fransez, burzud a santelez
Ret e ve d'eomp kaout telenn aour an Elez
'Vit bruda dereat ho kloar, ho vertuziou
Hag ho meritou.

Gwir boltred Jezuz, ho puhez a zo bet
Heñvel ouz hini Hor Salver benniget;
Evit mont d'e heul hoc'h eus abred, gant joa,
Dilezet pep tra.

An aour, an arc'hant, an holl vadou terien,
C'houi o disprize evel fank ha bouilhenn,
Hag, evel Jezuz, ho prasa karantez
'Oa ar baourentez.

War ar baourentez, zoken, hoc'h eus savet
An Teir Urz brudet, dre ar bed holl skignet,
Hag o deus kaset kement a eneou
Da c'hloar an Neñvou.

Yun, beilha, pedi ha soñjal deiz ha noz
E poaniou Jezuz, e gloar ar Baradoz,
Setu, sant Fransez, petra 'oa ho studi
Hag hoc'h holl dudi.

Pur evel eun el, truezus, pasiañt,
N'ho poa da enebour 'met an aerouant;
Hemañ dirazoc'h, spontet-holl, a grene
Ha prim a dec'he.

Hag ar bec'herien hag ar pec'herezed,
Dre ho pedennou, a zo bet distroet
Hag o deus goude renet hiviziken
Eur vuhez kristen.

Dre ho pedennou, puilh e koueze grasou
War ar gristenien: met an holl vuzudou
Hoc'h eus graet a-raok ha goude ho maro,
Piou o lavaro?

Pegen bras galloud gant Doue d'eoc'h roet!
Pebez levezon, zoken war al loened!
Holl ho selaouent, evel bleiz Gubbio,
Pa gomzec'h outo.

Eun deiz ma komzec'h da labousedigou,
Ar re-mañ 'chomas sioul ha klos a begou,
Hag ec'h astennent o gouzoug, estlammet,
Tad, ouz ho klevet.

Piou a lavaro burzud ar pemp Gouli
Merket en ho korf evel er grusifi ?
Eur grusifi veo e oac'h e gwirionez,
O Tad sant Fransez !

Tad trugarezus ha ken karantezus,
Pedit evidomp ar Werc'hez ha Jezuz,
Ma 'z aimp holl, eun deiz, d'an Neñv en ho kichen
Da ren da-viken.

Hon Tad hag a zo en Neñv...
He ho salud, Mari...

*
**

Aotrou Doue, ni ho ped, dre ho prasa trugarez, da gaout
truez ouz ene ho servijer (pe ho servijerez) a zo astennet
amañ war ar varvskañ. Ha bremañ, pa 'z eo dispartiet dre
ar maro diouz breinadurez ar vuhez-mañ, plijet ganeoc'h rei
perz d'ezañ da-viken en hoc'h eürusted dre veritou Hor Sal-
ver Jezuz-Krist ho Mab.


Evel-se bezet graet.

*
**

Roit ar repozvan eternal,
Va Doue, d'an Anaon fidel,
Hag o c'hasit d'ar sklerijenn
E-lec'h m'ho kwelin da-viken.
Doue da bardono d'an Anaon !
Evel-se bezet graet.

PEVARE PENNAD

OREZONOU ALL




« Bez' e oa eun den pinvidik hag a lavare ennañ e-unan : va ene, madou e-leiz ac'h eus dastumet evit meur a vloaz; ehan bre-mañ, debr, ev, gra chervat !... »



« ...Met Doue a lavaras d'ezañ : Den diskiant, en noz-mañ zoken e vo goulennet da ene diganit; hag ar pezh ac'h eus berniet, da biou e vo ? »

(H. S. Jezuz-Krist.)



Klemmou an Ene daonet

Klevit pebez glac'har en deus an den daonet,
Pa vez, er baradoz, e lec'h gantañ kollet;
Setu-heñ en ifern, dalc'het gant Lusifer,
Evel en eur prizon, e-pad an holl amzer :

« Vit servija Doue, gantañ 'oan bet krouet,
Evit joa an Neñvou, ivez 'vit e garet.
Karet 'm eus an enor ha karet ar madou;
O heuilh va flijadur oun kouezet er poaniou.

Tud yaouank berboellik, kerent ha mignoned,
Gant ar vuhez diroll hoc'h eus va zouellet:
C'houi eo a zo kiriek-ma 'z oun hirio barnet
Da leski en ifern e-touez ar re zaonet.

Kenavo da-viken, kerent, fals-vignoned;
Evit ho kwall-skoueriou ra vezoc'h milliget!
Ha d'eoc'h-c'houi, mamm ha tad, evit ho trouk-ali,
Malloz Doue warnoc'h hag ivez va hini!

O re garet ar bed, hoc'h eus va distroet
Diouz ar goure'hemennou hag en droug va zaolet;
O klask va c'has uhel, o vernia d'in madou,
Hoc'h eus-c'houi didruez va stlâpet er poaniou.

Eur c'hañv ez eo hennez, eun disparti kalet,
Kuitât Roue an Neñv, Hôr Salver benniget
Dre ho puhez direiz hag ho kwall-genteliou
Hoc'h eus va diskaret e strad an iferniou.

Diouz va c'horf pa 'z oun bet, siouaz! dispartiet,
Kenseurtes kriz Satan warnoun 'zo bet sailhet;
Dirak Doue stlejet gant va samm pec'hejou,
Eno frêe e rankis anzav va zorfejou.

Gant keuz bras ha glac'har d'an oleou kollet
Ez oun bet distrinket a-zirak an Dreinded,
Evel eun torfetour gant houarn chadennet
Hag e tan an ifern war va eilpenn taolet.

Pa dreuzis al Limbou, an holl Inosanted,
O welet va anken a zo bet estlammet.
Kenavo da-viken! Me 'ya d'eur gwanerez
Kalz gwasoc'h, bugale, eget hoc'h holl hirnez.

An Anaon 'm eus klevet er purgator euzus
O c'hervel o c'herent gant eur vouez truezus;
Pedi 'reont kar ha par ac'hano d'o lemel,
Met frealz o .El-mat 'zo 'vito eur skoazell.

E-barz puñs an ifern gant flammou oun kelec'het;
Evel tennou kanol e strakont fuloret.
Meneziou tan spontus, 'vel ar mor o fiñval,
A zizac'h dibaouez hag a chom da ruilhal.

Tan a zo en ifern tre betek ar goueled:
Ouspenn eur milion emamp atao dalc'het
E tanfoeltr ar Bed all, gwasoc'h 'get kurunou
Ha trouz kanoliou feuls Korserien sant Malou.

Kredet em boa kent ne oa 'met sorc'hennou
Puñs an ifern grizias hag an drouksperejou
Ken na welis diaoulou, stañk 'vel ar gliz-beure
O tont d'am merzeria, o trasta pep ene.

Santet 'm eus dizale kastizou pep pec'hed:
E puñs doun an ourgouilh oun bet, siouaz! stlapet;
'Touez laeron, muntreien, e-barz an tan devet
Hag ouz spes pep pec'her dizamant liammet.

Staget oun bet goude ouz ar re avius,
Horzennet asambles gant riblerien flêrius,
Laset ha chadennet ouz 'n eneo falla,
Dre yenijenn ha gwrez el lec'hioù tenvala.

Pa edon en anken, gant ar fals-pinvidik,
E kavis em ene an takad kizidik
'Touez ar Sent o welet va lec'h er baradoz,
Kollet hep esperañs ganin dre va ratoz.

Kreski 'reas neuze va enkreiz, va foaniou;
Teurel 'ris va malloz war Roue an Neñvou,
War ar Sent, an Elez, an eürusted kollet
Hag ar re 'oa kiriek d'in da veza daonet.

Ma vefe va zermen 'vit dek mil bloaz merket,
Pe gant beg eul lapous an douar dispennet
Eur wech bep kant mil bloaz 'raok beza diboaniet,
Em befe an esper c'hoaz da veza salvet.

Allas! kaer am bezo, e rankin koulskoude
Chom en ifern tefival tra ma pado Doue.
Eur soñj ez eo hennez hag a gresk va anken,
N' hellan lavaret ken: Daonet oun da-viken!



: ben'oeq gog roxitaed elowb ano ar teizad



« Evel ma tastumer an draog d'hen devi, evel-se ivez e vo da fin ar bed : Mab an den a zegaso e Elez, hag e stlapint ar re a ra an droug er forn leun a dan. Eno e vo daelou ha skrign dent. »

(H. S. Jezuz-Krist.)

— 471 —



An Ifern

Diskennomp holl a spered en ifern da welet
Doare euzus ha spontus an eneou daonet
'Zo eno, dre wir Doue, 'barz ar flammou dalc'het,
Dre m' o deus war an douar e c'hras dismegañset.

Eun islonk' eo an ifern, leun a defivalijenn,
E-lec'h ne weler morse eur berad sklerijenn;
An doriou a zo sarret ha prennet gant Doue,
Ha n'o digoro biken : kollet eo an alc'houe!

Eur forn goret er bed-mañ ne deo nemet maged
E-keñver tan an ifern, tan eneou daonet;
Ac'hann d'ar Varn diweza 've gwell enni devi
Eget beza en ifern 'pad eun eur o leski.

Prederiit mat war walleur an eneou daonet;
Taolit evez 'n o foaniou, 'n o glac'har diremed,
Gant aon, goude ho maro, e teufec'h da goueza
Er stad kriz m'emaint enni, pa soñjoc'h 'n nebeuta.

Krial a reont ha yudal evel chas kounnaret;
Ne ouzont pelec'h tec'het; a bep tu int lesket.
Tan a zo war o gorre, tan a zo dindano,
Tan a zo a bep kostez ha bepred o devo.

Neuze, gant an dizesper, an dud kêz-se daonet
A ro mil ha mil malloz d'an eur ma 'z int ganet,
D'an tadou ha d'ar mammou 'zo kiriek d'o glac'har,
Dre n'o deus o c'helennet, p' edont war an douar.

Rak ar priedou 'n ifern a zo klozet ive,
Kenkoulz hag o bugale, pa gollont o ene.
Mil rebech ha mil tamall ray an eil d'egile
Diwar-benn o gwall-vuhez, tra ma pado Doue.

Gant o zad 'lamm ar vibien, ar merc'hed gant o mamm,
D'o stleja kriz hag euzus, dre o bleo, 'kreiz ar flamm:
Malloz d'eoc'h, gwreg diaket, hoc'h eus bet hon douget!
Malloz d'eoc'h, tad didalvez, c'houi hoc'h eus hor c'hollet!

Ar re 'zo bet er bed-mañ en davarn mignoned
Hag, en o buhez gadal, graet mil ha mil pec'hed
E-barz an ifern grizias a-unan 'n em gavo
E-lec'h m'en em zispennint evel loened fero.

Daoulagad ar re zaonet a-vo sponset euzus,
Pa barint war an diaoulou, da welet ken euzus
Ma lare santez Katell, gant unan 'n em gavet,
War c'hlaou beo ha diarc'henn 'oa gwell ganti kerzet.

D'ezo, 'vit magadurez, gant Satan 'vo roet,
E-kreiz ar flammou euzik, fank lous an dragoned;
Evit evaj o devo o daelou kemmesket
Gant mil ha mil seurt viltans ha gwad an touseged.

O diskouarn ne glevint nemet gwall-vlasfemou;
Kriou forz, leou-douet ha pep seurt malloziou,
A roy an eil d'egile ha zoken d'an Dreinded,
D'ar Werc'hez ha d'an Elez, d'ar Sent, d'ar Sentezed.

Krignet e vo o c'hroc'henn, hag o c'horf dispennet,
Gant beg an naered-wiber ha dent ar sarpanted,
Hag en tan e vo ruilhet o c'hig hag o eskern,
Evit ma tevint gwelloc'h e fornez an ifern.

Goude ma vezint laosket eur pennadig er forn
'Vezint taolet, gant Satan, en eul lenn leun a skorn,
Hag eus al lenn en tantad, hag adarre stlapet
Eus an tan el lenn skornet 'vel eun houarn goeliet.

Neuze e teuint da grial, da ouela gant enkrez:
Ho pet ouzomp, va Doue, ho pet ouzomp truez!
Hogen en aner 'ouelint, rak tra bado Doue,
E pado o ankeniou hag o glac'har ive.

Ken têr 'vezo an tantad o rosto en ifern,
Ma teuy ar mel da virvi penn-da-benn 'n o eskern.
Seul-vui c'houennint truez, seul-vui 'vezint drastet;
Kaer o devezo yudal, bepred 'vezint lesket.

Dre vuaneged Doue eo c'houezet an tan-se,
Tamm eus e nerz ne gollo 'hed an eternite;
Biken ne daolo moged na biken ne davo;
Hep ehana d'o leski, morse n'o distrujo.

Eur preñv en o c'houstiañs, hep paouez, o c'hrigno,
Hag o amzer dremenet d'ezo a rebecho.
Hennez 'vezo eur glac'har o welet 'deus kollet
Alc'houeziou ar baradoz na vezint mui kavet.

« Pet gwech omp bet er retred », a livirint neuze,
« Vel ma veze 'r Re Salvet, o klevet komz Doue ?
« N'hon eus taolet tamm evez; diseblant omp chomet;
« Ne deo ket sur hep abeg ez omp bremañ daonet.

« O misionou santel, induljañsou plenier!
« Trémenet oc'h evidomp; ne zeuy mui hoc'h amzer;
« Kollet hon eus hon Doue dre ar pec'hed marvel,
« Kondaonet omp bet, siouaz! d'ar poaniou eternal.

« Met c'houi, kerent, mignoned, hag a zo c'hoaz er bed,
« Na gollit ket hoc'h amzer evel m'hon eus-ni grêt.
« Mirit lezennou Doue ha grit gwir binijenn,
« Gant aon e kouezfec'h goude en ifern da-viken! »

Rak-se prest en em zalc'homp, pa 'z omp bet kenteliet;
Greomp hor mad eus planedenn an eneoù daonet.
Tostât a ra ar maro, siouaz ! ouzomp bemdez,
Pedomp Hor Salver Jezuz da gaout ouzomp truez.



TAOLENN

RAKLAVAR	Paj. 3
EUN NEBEUD ALIOU	13
PENNAD KENTA : GRAS SKAER	15
EIL PENNAD : GRAS GOEZEG	107
TREDE PENNAD : GRAS GOENAC'H	131
PEVARE PENNAD : OREZONOU ALL :	
KLEMMOU AN ENE DAONET	169
AN IFERN	173



IMPRIMERIE
COMMERCIALE DE
"LA VOIX DE L'OUEST"
31, Avenue Janvier - RENNES

***Pa vin galvet gant Doue,
Patron ar maro mat,
Deut gant eun dorn a drue,
Serrit va daoulagad.***

(Kantik s. Jozef)

